

SEITE visant O pourmen dre Vreiz-Izel

Levrenn genta

(An eil levren a zo e gwerz e ti “Emgleo Breiz”, 4, ru Yves Collet, 29200 Brest)

Pellgomz : 02-98-02-68-17

e-mail : emgleo.breiz@wanadoo.fr

www.emgleobreiz.com

Tresadennoù gand **J.P. Guiriec**

Adkemeret eo bet ar pennadoù-mañ digand an Télégramme, a drugarekaom evid an aotre bet roet deom.

Taolenn

(Hervez roll al lizerenneg)

A beb seurt	Euz Kerfani d'ar Poull-du
A-dreuz ar hantvejou	Foariou ha marhajoù
A-hed ar Ster-Elle	Fontanella
An Abati Gwenn	Fontanella e Karaez
An Hirglaz	Fouenn
Ar Faoued	Goueliou ha pardonioù
Ar Hap-Sizun	Goueliou koz
Ar haz hag ar marmouz	Gouesnah ha tro-war-dro
Ar marh ourgouill	Gourenez Kraoñ
Ar Menez-Hom	Gwaien
Ar Menezioù Du	Gwall-amzer war ar Porzou
Ar Porze	Gwall-zarvoudoù ha brezelioù
Ar Releg e Plouneour	Gwerennoù livet ar Hrann
Ar Releg goude an Normaned	Gwerz Pennmarh
Ar roue Arzur	Ilizou koz Kap-Kaval
Ar Stangala	Iliz-Veur Kastell-Paol
Ar ster Oded	Iliz-veur Kemper
Ar ster-Arthant	Intron Varia ar Geoded
Ar Youdig	Intron Varia ar Hrann
Bae-an-Avon	Intron Varia ar Porzou
Baroned ar Pont	Intron Varia Goatkeo
Bég ar Van	Jakez Riou
Bég-an-Dorchenn	Karaez
Bég-ar-Raz	Karaez goude ar Romaned
Bleizi	Kastell ar Ruskeg
Bloavez mad	Kastell Santel
Brazparz	Kastellin
Brizeug	Kemper
Bro-Leon	Kemperle ha Sant Gunthiern
Brudeta mab Karaez	Kenta Eskob Bro-Leon
Chapel ar Porzou	Kerdevod
Chapel ar Vouster	Kere ha Jezegou
Distro da Gastellin	Kêr-Iz
Diwar lein tour Karaez	Kernaskleden

Diwar Roh-Trevezel	Kervarker
Douarnenez	Koad ar Hrannou
Douarnenez	Konkerne
Emgann an Tregont	Krampouez Kemper
Enez-Sun	Krogom adarre
Euz Kerfani d'ar Poull-du	Landevenneg
Foariou ha marhjou	Langoned
Fontanella	Lokmaria
Fontanella e Karaez	Lokronan
Fouenn	Loktudi
Goueliou ha pardonioù	Luhed ha moged
Goueliou koz	Manati Sant Urlou
Gouesnah ha tro-war-dro	Maner Trevarez
Gourenez Kraoñ	Maner Trezigidi
Gwaien	Maout ar Gow ha maout ar Gall
Gwall-amzer war ar Porzou	Matilin an Dall
Gwall-zarvoudou ha brezelioù	Mein an Uhelgoad
Gwerennoù livet ar Hrann	Mein Koadri (Koad Ri)
Gwerz Pennmarh	Menez Mikêl
Ilizou koz Kap-Kaval	Menez-Fruji
Iliz-Veur Kastell-Paol	Mikêl an Noblez
Iliz-veur Kemper	Minihi Kastell-Paol
Intron Varia ar Geoded	
Intron Varia ar Hrann	
Intron Varia ar Porzou	
Intron Varia Goatkeo	
Jakez Riou	
Karaez	
Karaez goude ar Romaned	
Kastell ar Ruskeg	
Kastell Santel	
Kastellin	
Kemper	
Kemperle ha Sant Gunthiern	
Kenta Eskob Bro-Leon	
Kerdevod	
Kere ha Jezegou	
Kêr-Iz	
Kernaskleden	
Kervarker	
Koad ar Hrannou	
Konkerne	
Krampouez Kemper	
Krogom adarre	
Landevenneg	
Langoned	
Lokmaria	
Lokronan	
Loktudi	
Luhed ha moged	
Manati Sant Urlou	
Maner Trevarez	
Maner Trezigidi	
Maout ar Gow ha maout ar Gall	
Matilin an Dall	
Mein an Uhelgoad	

Mein Koadri (Koad Ri)	
Menez Mikêl	
Menez-Fruji	
Mikêl an Noblez	
Minihi Kastell-Paol	
Mirdi Pennmarh	
Ouz ar sklêr-loar	
Park an Avorig	
Pennmarh	
Penn-da-benn d'al Laita	
Pleiben	
Pont-'n-Abad	
Pont-Aven	
Pont-e-Kroaz	
Porz-ar-Forest	
Poulldreuzig	
Roh Plên	
Roh-Tredudon	
Roh-Trevezel	
Rumengol	
Sant Moris	
Sant Tremeur	
Sant-Herbot	
Skaer	
Tour-tan Ekmühl	
Treboul	
Treminou	
Troveni Sant Elo	
Tro-war-dro Pont-Aven	
Tud vrudet Kemper	
Tud vrudet Kemperle	
War hent an Uhelgoad	
War hent an Uhelgoad	
Yann Ar Floc'h	
Yannig hag e gaz	
Yeun Ar Gow	

Kastellin

Soazig : Setu-ni o komañs gand on Tro-Vreiz. Euz peleh e lohim ?

Visant : Méd euz Kastellin evel-just, peogwir emaoñ o chom e Kastellin.

Soazig : A-raog mond kuit e vo mad deom neuze lavared eur gêr euz ar gêr-ze. Ha da genta petra zinifi Kastellin ?

Visant : An ano-ze a vez komprenet fall. Kastellin a dlefe beza skrivet Kastell-Nin evel ma lavarer Bann-Nin euz ar menez a zo e-kichen. Nin eo ano an aotrou a oa o chom er hastell a veze gwelet, er Grenn-amzer war ar roh vraz a zo a-zioh kêr.

Soazig : El leh m'ema bremañ ospital ar re goz ?

Visant : Ya, just Eno, én-dro d'ar hastell-ze, eo bet ganet kêr Gastellin. Ne oa neuze nemed eur vourh vihan.

Soazig : Gweled a ran bremañ perag e vez greet ar Vourh-Koz euz al leh a zo e-kichenn. Méd, gwelet e vez c'hoaz eul lodenn euz dismantrou ar hastell koz !

Visant : Ya, diazez eur mell moger deo a weler Pebez gwél kaer a zo ahano war ar Vourh-Koz a-béz ha war an draonienn a-héd ar ganol !

Soazig : Hag ivez pebez chapel vrao a weler e-kichenn. Honnez eo bet, nekéta, kenta iliz Kastellin Koz eo ?

Visant : Ya, koz kenañ eo chapel Intron Varia Gastellin. Ar pilierou an tosta d'an aoter a zo euz an XIIved kantved Al lodennou all a zo euz ar XVved kantved hag ar XVIIved kantved gand an tour.

Soazig : N'eus netra gaerroh e Kastellin. Kalz touristed a vez beb bloaz ouz he gweled Kizelladuriou kaer ha delwennou koz a gaver enni

Visant : Ha dirazi eur halvar bihan souezuz. N'eus e nebleh hini all e-béd heñvel outañ

Soazig : Selaouerien gér, pa dremenoh dre Gastellin, pignit war roh vraz Kastell-Nin ha grit ivez eur weladenn d'ar japel goz.

Soazig : Atao emaom e Kastellin, ha meur a dra on-eus amañ da lavared c'hoaz. Perag ez eus diou iliz amañ e Kastellin ?

Visant : Gwir eo ez eus amañ : Iliz an Itron Varia, koz kenañ, hag iliz Sant Iduned kalz nevesoh, peogwir eo euz ar bloaz 1548.

Soazig : Kalz ne houzont ket piou eo Sant Iduned.

Visant : Eur zant koz eo. Lavared a reer eo bet manah e Landevenneg er c'hwehved kantved.

Soazig : Eur werenn a-liou én iliz a ziskouez anezañ o veva evel ermit, war gern menez Bann-Nin, a-zioh hent koz Kemper.

Visant : Ya Gweled a reer anezañ eno, o reseo, en e lochenn, e vignon Sant Gwenole. Hemañ a oa, er mare-ze, tad-abad e manati Landevenneg.

Soazig : Abalamour da ze eo Sant Iduned, patron parrez Kastellin, a zo bet anvet gwechall : Lok-Iduned pe Lok-Yoned.

Visant : Lok-Iduned a oa neuze eur prioldi stag ouz Abati Landevenneg.

Soazig : Eur gêrig sioul eo bet atao Kastellin, nekéta !

Visant : N'eo ket bet gwir atao. Gwall zarvoudou a zo bet enni meur a wech. Brezel a zo bet én-dro d'ar hastell koz. Brezel ivez e amzer al Ligue ha da vare dispah ar Bonedou ruz.

Soazig : Red eo ivez gouzoud eo bet ganet e Kastellin an Tad Andre, jezuiet, er bloaz : Eun den brudet kenañ dre e zeskadurez.

Visant : Ya, hag an Amiral Kozmao euz ar memez amzer hag a oa eun den kaloneg braz er brezelioù war vor. Mervel a reas e Brést e Méd a-walh evid hirio. Kenavo ar wech all

Soazig : N'hellom ket kuitaad Kastellin heb komz euz an amzer hirio.

Visant : Gwir eo. Kastellin hirio a zo eur gêrig koant treuzet gand ar Ster-Aon. a dud a zo enni o chom.

Soazig : Ya, hag an drederenn vad anezo a zo er skolioù. Ouspenn ar skolioù izel e kaver e Kastellin eul lise, eur skolaj kristen, eur skol-labour-douar, hag eur skol all evid ar re glañv.

Visant : Kastellin a zo e-kreiz eur vro gaer. Ar mor a zav béteg enni hag ar batimañchou ivez, dreist-oll béteg Meill ar Wern hag a zo bet eur porz-mor talvouduz gwechall.

Soazig : Liou ar binvidigez a weler c'hoaz war diez koz ar porzig-se.

Visant : Batimañchou. Brést a zigase a beb seurt marhadourez. Ahano e vezent kaset dre girri d'an oll barreziou tro-war-dro : ispisiri, trêz, koad ha traou all.

Soazig : Me 'blij din kalz Kastellin gand eur gurunenn meneziou glaz beuzet a-wechou en eur vogidell dantéléz a zav diwar dour ar Ster.

Visant : Eun dudi eo mond da bourmen war droad. A-wechou e vez gwelet an eoged o lammad dreist ar skluziou.

Soazig : An eoged ! gwechall e oa kalz muioh anezo er Ster-Aon Bez' e oa zoken eul lenn evid o mired el leh m'ema bremañ an ti-post Abalamour da ze eo bet anvet ar Hastellinad Penn-eog

Visant : Ken brao all eo pignad war ar meneziou tro-dro da weled bro : Menez-kelh, Menez-braz, Bann Nin, ha pelloh : Garreg-an-Tan e Gouezeg ha Menez-Hom e Dineol, an hini uhella, 330 metr dezañ. Kenavo ar wech all !

Soazig : A-raog kuitaad Kastellin, lavarom e vez amañ, bep ploaz, eur redadeg veloiou brudet dre ar Frañs a-béz.

Visant : Ma karez ivez, lavarom eur gér euz Moger an Diaoul Gouzoud a rez an istor a gonter diwarbenni ?

Soazig : Marteze. Méd lavar din anezi da weled.

Visant : Eur voger a oa amañ e gwirionez. Mond a ree euz Kastellin béteg Gouezeg ha Brieg. Tremen a ree goude dre Gerneven ha Kast, a-raog dond éndro da Gastellin. Tregont kilometr !

Soazig : Perag eur voger ken hir ?

Visant : Savet e oa bet war urz Duked Vreiz, da gloza ar vro a zerviche dezo da vond enni da jaseal a beb seurt loened euz ar vro.

Soazig : Ha perag eo anvet moger an diaoul ?

Visant : An dud a grede ne helle eur voger ken hir beza savet nemed gand an diaoul. Konta 'reer e-noa hemañ greet marhad gand an Aotrou Nin, da zevel ar voger-ze, én eun nozvez, gand ma rofe dezañ e ene.

Soazig : Da lavared eo, e werzas e ene d'an diaoul ?

Visant : Ya, méd hemañ a oa eur paotr fin anezañ. Lakaad a reas benniga ar harrad mein diweza, hag an diaoul ne hellas morse echui ar voger. Kavet e-noa finnoh egetañ.

Soazig : Lavared a reer ivez ne dle morse eur horv-marzo tremen diou wech dre hent Kastellin. Anéz da-ze e kouezfe ar pont er ster.

Visant : Setu perag, ar re a varv én tu kleiz d'ar ster a vez greet o anteramant e chapel an Intron Varia peogwir ema ar vered én tu-ze. Hag ar re a varv én tu dehou, e iliz Sant Iduned Setu ar hiz koz.

Landevenneg

Soazig : Da beleh ez aim bremañ ? Echu on-eus e Kastellin.

Visant : Ma karez, pignom en eur vag da vond da heul an dour, war ar Ster-Aon béteg Landevenneg. Eno e raim eur weladenn d'an Abati nevez. Meur a dra or-bo da weled el leh brudet-se, da zeski d'or zelaouerien.

Soazig : Yao neuze war-zu Landevenneg ! Laka tro er moteur ha me 'grog er stur, hag en eur vond, sellom mad ouz ar vro. Kaer eo !

Visant : Ya, sellom ouz ar vro en daou du d'ar ster. Gweled a rez da genta, war an tu kleiz, torgennou atred. An dra-ze a zo chomet war-lerh ar vengleuzerien vein-glaz.

Soazig : Ya, gouzoud a ran ez eus bet amañ, beteg ar brezel pevarzeg, kalz a dud a labourere war ar vein glaz.

Visant : Penn-da-benn d'ar ganol beteg Gourin, e veze kavet mengleuziou evel-se. Chom a ra c'hoaz unan bennag anezo war-dro Lannuon, Motrev ha Gourin, a gav din. Méd an dra-ze n'eo netra e-kichen ar pezh a zo bet. Kantchou a Vretoned euz ar vro a gave labour eno.

Soazig : Diskenn a reom braoig gand an dour. Setu amañ Tregarvan : Eul leh dudiuz ! eur baradozig pa vez uhel ar mor ! glaster a-gleiz, glaster a-zehou. Pesked a heller ivez da baka, braoig dreist-oll.

Visant : Setu pont Terenez : Eur pont a-zistribill. Distrujet e oe e-pad ar brezel diweza gand an Almanted. E-keit-se e veze treuzet ar ster dre eur bak : tud, kirri ha loened.

Visant : Setu, emao erru dirag Landevenneg. Na kaerra bro, neketa ! ar mor, ar ster, an douar goloet a wez uhel.

Soazig : Ya, eur vro gaer e gwirionez. Kaerra korn-bro Penn ar bed. N'on ket souezet e vije bet al leh-mañ eul leh a bedenn evid meneh Sant Gwenole. Kaerder ar vro a ra deoh sevel war-zu Doue.

Soazig : Landevenneg ! Amañ or-bo meur a dra da gonta.

Visant : Deom da genta da weled ar manati koz. Méd ne jom nemed an dismantrou anezañ.

Soazig : Abaoe peur eo dismantret evel-se ?

Visant : Abaoe an dispah pe ar Revolution vraz.

Soazig : Beteg neuze edo en e zav ?

Visant : Ya 'vad ! Méd goull e oa koulz lavared. Ne jome neuze e-barz nemed pevar manah. Gwerzet e oe evid nebeud a dra d'eur marhadour a reas eur vengleuz anezañ. Gwerza 'reas ar vein euz ar mogerioù da zevel tiez pe draou all, e Brést dreist-oll.

Soazig : Méd chom a ra c'hoaz dismantrou kaer da weled euz ar japel goz, evel béz ar Roue Grallon ?

Visant : Ya, konta a reer edo eno béz ar Roue Grallon, a oa roue war Vro-Gerne a-béz.

Soazig : N'eo ket souezuz e vije bet beziet eno. Eñ eo e-neus roet douar Landevenneg da Zant Gwenole, evel e-neus bet roet douar Rumengol d'an Intron-Varia ha douar ar palud da Zantez Anna.

Visant : Ar monumant a zo bremañ war béz ar roue Grallon, n'eo ket avad an dra gosa a jom euz iliz Sant Gwenole. Eun iliz romaneg eo. Lodennou anezi a zo euz an degved kantved pe war-dro.

Soazig : Ya, eun drugar eo selled ouz ar hizelladuriou a zo a béb tu d'an nor-dal.

Visant : Heñvel int ouz ar re a heller gweled c'hoaz e Bro-Iwerzon. Hag abalamour da-ze e heller kredi ez eus bet darempredou etre meneh an diou vro.

Soazig : Komzet on-eus euz Sant Gwenole, kenta Abad Landevenneg. Mad e vo deom lavared hirroh diwar e benn. Kalz n'ouzont ket piou eo.

Visant : Gwir eo. Ar Vretoned, koulskoude, a dlefe gouzoud eo mab da Zantez Gwenn. E dad a oa Fragan e ano. Beva a reas el leh m'ema bremañ Ploufragan, e-kichenn Sant-Brieg.

Soazig : Deuet e oa euz Breiz-Veur gand e bried hag e zaou vab : Jakud ha Gwezenneg pe Gweneg. Méd Gwenole a zo bet ganet war zouar Breiz.

Visant : Mond a reas d'ar skol gand Sant Budog, da enez Lavred, e-kichenn Enez-Vriad. Deuet da veza manah, e fellas dezañ, gand eun nebeud meneh all, mond da veva pell diouz trouz ar bed.

Soazig : Hag e teujont neuze beteg Landevenneg ?

Visant : Nompaz dioustu. Chom a rejont eun nebeud amzer én enezenn a zo anvet abaoe Tibidi (Ti da bedi). Méd ne blijas ket al leh-se dezo.

Soazig : Hag o-deus neuze treuzet ar mor evid douara amañ el leh m'o-deus savet o manati.

Visant : Ya, hag ar manati-ze a zo deuet da veza Landevenneg, pe Lann-Wenole, rag ar gér Lan hag a gaver aliez e brezoneg, a zignifi ivez manati.

Soazig : Landevenneg, douar santel ! Ha pebez leh dudiuz ! al leh kenta 'wél ar bleuniou o tigeri ! Al leh diweza a wél ar bleuniou o veleni.

Soazig : Grallon, Gwenole, Korantin ! n'heller ket dispartia an tri ano-ze.

Visant : Nann ! O-zri e vezont atao asamblez. Evel-se o gweler war eur werenn a-liou e iliz Rumengol.

Soazig : Beva o-deus greet o-zri e Bro-Gerne. An hini kenta 'oa roue. An eil a oa abad, hag an trede 'oa eskob. Kenta eskob Kemper eo bet.

Visant : Kaorantin a oa o chom da genta tostig da Landevenneg. Beva a ree evel ermit, én eul lochenn baour, e-kreiz Koad Neved el leh m'ema bremañ parrez Plouardiern.

Soazig : Eno eo e oe kavet eun devez gand ar Roue Grallon, pa deuas hemañ da jaseal er hoad-se. Piou ne anavez ket Pesk Sant Kaorantin ?

Visant : Ya, eur pesk burzuduz hag a veve en eur feunteun. Eun tamm anezañ a oa a-walh evid terri o naon da oll zoudarded ar roue. Hag ar burzudusa eo e kendalhe ar pesk da veva goude beza daoudammet evel-se.

Soazig : Ar péz a verke santèlèz vraz Sant Kaorantin. Ar roue a fellas dezañ e gas d'e balez hag a reas anezañ kenta eskob Bro-Gerne, ha Kemper a deuas da veza kêr-benn an eskopti.

Visant : Eun eskopti hag a badas beteg an dispah pe ar Revolution vraz. Abaoe eo stag outañ eskopti Leon pa Kastell-Paol. Komz a raim hirroh anezo diwezatoh pa dremenim dre Gemper ha dre Gastell.

Soazig : Distrujet eo bet abati koz Landevenneg gand ar Revolution vraz. Méd a-raog e oa bet c'hoaz distrujet meur a wech ?

Visant : Ya, ouspenn dég kwech gand ar Zaozon dreist-oll. Méd da genta gand an Normaned e penn kenta an degved kantved.

Soazig : Desket am-eus bet er skol pegen gwaz eo bet an distruj-se.

Visant : Gouzoud a rez petra 'ree on tud pa zouare an Normaned war-dro Kraoñ ?

Soazig : N'ouzon ket avad !

Visant : C'hwezet e veze ganto eun tantad e Kelern e-kichenn Roskañvel e-kreiz an noz. Ha pa veze gwelet an tan eno, e veze c'hwezet eun tantad all war ar Menez-Hom, ha goude war Garreg-an-tan e Gouezeg. Evel-se, a-benn fin an noz, Breiz-Izel a-béz a ouie e oa diskennet al laeron-vor war zouar Breiz.

Soazig : Manati Landevenneg a zo bet ivez diskaret ganto ?

Visant : N'eo ket hepken Landevenneg, méd an oll vanatiou all euz Breiz. Ar vro a-béz a oa lakeet warni an tan. Roue Breiz gand e dud, ar veneh gand relegou ar Zent, an oll dud e-karg, a rankas tehed da Vro-Hall.

Soazig : Lennet em-eus ne jomas er vro nemed ar re baour, kuzet er hoajou. Pebez reuz !

Visant : Eur manah a jomas ivez : Yann Landevenneg. An dra-ze a badas e-pad c'hweh vloaz warn-ugent.

Soazig : En on diviz diweza e oa ano ganeom euz an distruj bet greet e Breiz gand an Normaned. Méd kaset int bet kuit a-benn ar fin ?

Visant : Ya, hag an dra-ze dre hras Yann Landevenneg

Soazig : An hini a oa Abad e Landevenneg pa zirollas an Normaned war zouar Breiz. Méd e-leh tehed da heul ar re all, e chomas kuzet er hoajou. Dre guz e roe kalon d'ar Vretoned. Hag e savas eun arme.

Soazig : Just evel ma reas tud ar brouskoad pe ar "maquis" e-pad ar brezel diweza.

Visant : Ha pa oe prest an arme e halvas Duk Breiz Alan Varveg euz Bro-Zaoz, el leh ma oa tehet, da zond da gemer ar penn anezi. Gwall emgannou a oa e meur a leh : En Naoned, e Kistreberh, e Plourio, e Lezneven. E peb leh e kouezas an Normaned ouz torgenn, trehet gand ar Vretoned.

Soazig : N'eus Bro-all é-béd, a gréd din, he-dije greet kemend-all !

Visant : Nann. Na Bro-Hall. Evid kaoud ar peoh diouto a rankas rei dezo Bro-Normandi.

Soazig : Ha Breiz a vevas goude e peoh ?

Visant : Ya, dindan renadur Alan Varveg, kenta Duk Breiz. An ilizou a oe adsavet. Ar manatiou ivez, gand ar veneh distroet d'o bro. An duk, dre anaoudegez evid an Abad Yann, a roas dezañ gwiriou war boullou-holen Bro-Gwenn-Rann, hag eur prioldi eno e Bourh-Baz.

Soazig : Eun dra bennag on-eus c'hoaz da lavared euz abati koz Landevenneg ?

Visant : Ma karfem, ya. Méd d'ar re a fell dezo gouzoud hirroh, e lavaran mond d'ober eur gwél d'ar mirdi. Eno, e-kichenn an dismantrou, e kavint c'hoaz meur a dra da zeski.

Soazig : Deom neuze da weled an abati nevez, rag eun abati nevez a zo.

Visant : Ya, eur wech muioh eo bet savet én-dro manati Landevenneg, méd gand meneh Kerbenead euz kichenn Landerne. An Aotrou Perrot, tad ar Bleun-Brug, eo a oa da genta o rei lañs d'ar menoz-ze : Prena ar manati koz hag e zevel én-dro.

Soazig : Dond a reas e huñvre da wir. Er bloaz 1950, e-pad overenn hanternoz Bleun-Brug ar zent e Kastell-Paol, Tad Abad Kerbenead a embannas da Vreiz a-béz ar helou mad : Prenet eo ganeom douar santel Sant Gwenole. Abati Landevenneg a zavo dizale a varo da veo.

Visant : An oll Vretoned a dridas gand levenez o kleved eur helou ken laouen. Prestig goude, seiz manah a deue da jom da Landevenneg, hag a hwezas buhez én dismantrou koz.

Soazig : Ha pebez gouél kaer er bloaz 1953 , pa deuas ar hardinal Roque euz Roazon da ziazeza ar mên kenta, lakeet ennañ eur skrid-eñvor.

Visant : An oll a ganas neuze : Alleluia ! alleluia ! kanom gand joa, rag savet eo Landevenneg a varo da veo. Buhez hir d'an abati koz, ma lugerno deiz ha noz war Vreiz a-béz.

Soazig : Komzom eur wech all c'hoaz euz Landevenneg. Eur hantik a zo bet savet ganez evid gouél braz an dedi, m'am-eus soñj mad.

Visant : Ya, war eun ton nevez bet savet gand an Tad Gourgay, Doue r'e bardono, euz Brieg. Marteze e hellfes kana anezañ din ?

Soazig : Ne ganin ket, méd lenn a rin an daou boz kenta :

Pastor karet Sant Gwenole,
Bezit bepred Tad or Breiz
Sikourit mad ho pugale
Ma chomint start én o Feiz

Gwenole a zo ganet
En eun ti leun a feiz
Sant Fregan, e dad karet,
Oa kenderv roue Breiz

Visant : Bennoz Doue dit !

Soazig : Ped manah a zo hirio e Landevenneg ?

Visant : Ouspenn daou-ugent a zo anezo. Eur vuhez a bedenn a zo ganto. Méd red eo beva. Setu ma reont a beb seurt labouriou : labourad an douar, sevel chatal korn, ober yod-frouez ha me oar-me !

Soazig : A beb seurt traou brao a reont ivez gand lèr, ha priachou kaer hag a blij kenañ.

Visant : Gouzoud a rez o-deus ivez eul levraoueg vrezoneg. Marteze n'eus e nebleh all e-béd eur seurt levraoueg. Bez' ez eus eno, e galleg hag e brezoneg,

levriou talvouduz ha dibaot N'eus forz piou a hell mond d'o gweled ha da labourad ganto. Eur manah a gaver atao da heñcha ar studieren.

Soazig : Eur greizenn vreizeg eo, talvouduz kenañ, hag a ra enor da Vreiz.

Rumengol

Soazig : A-raog kuitaad Landevenneg, taolom eur zell war ar vro. Kaer dispar, dreist-oll pa vez uhel ar mor.

Visant : Gweled a rez du-hont, e kostez ar zao-heol, én tu all d'ar Faou. Ha ma 'z afem di bremañ beteg eno ?

Soazig : Ya 'vad deom da Rumengol, hag en eur vond, kanom ar hantik brudet :

Intron Varia Rumengol

Gwerhez gallouduz

Roit deom hirio én an' Doue

Yehed ar horv hag an ene.

E Rumengol, pell amzer 'zo,
C'hwi eo boket kaerra or bro.
Péb rozenn goant, péb lilienn
A zo disliou en ho kichenn.

Visant : Kaer eo iliz Rumengol. An hini a zo bremañ a zo euz ar XVIIved kantved. Savet eo en he fez e mein Kerzanton. En he diabarz ez eus e-leiz a gizelladuriou war goad ; eun drugar selled outo.

Soazig : Ar werenn a-liou a zo a-zioh an aoter vraz a gont deom orin ar pelerinaj.

Visant : Ya. Hervez an istor, ar roue Grallon, e-unan, saveteet gand Sant Gwenole euz an dour-beuz pa oe konfontet Kêr-Iz, a ziskaras aoter an Drouized. An aoter-ze a oa eun daol-vein pe daolvên. En he flas e savas eur japel d'an intron Varia .

Soazig : Lavarom e vez greet eno daou bardon braz bép ploaz : unan da zul an Dreinded. Egile da hanter-Eost.

Visant : Hag evid echui, goulennom ma chomo ar pardonioù-ze gwir bardonioù breizeg.

Koad ar Hrannou

Soazig : Tostig da Rumengol ema Koad ar Hrannou.

Visant : Ya. Ha brasa koad Penn ar Bed eo hennez. Nag a bourmenadennoù kaer a heller ober ennañ ! Bréstiz a vez eno o pourmen aliez.

Soazig : En eur zond on-eus tremenet dre ar Faou. Eur gêr goz eo honnez ha moarvad he-deus ivez he istor.

Visant : Ya, kêr ar Faou he-deus bet kalz talvoudegez gwechall. Eur porz mor eo hag a zo bet leun a vuhez ennañ. Kalz keuneud a veze kaset drezañ da Vrést a-raog ma veze greet tan gand glaou pe gand gaz.

Soazig : Klevet am-eus ano ivez, e oa er Faou, gwechall, eur hastell koz evel e Kastellin.

Visant : Ya, eur hastell bet savet gand ar beskont Morvan. Emgannoù braz a zo bet ivez war e dro er memez amzer gand Kastellin. Ar hastell-ze a oa war eur voundenn. Méd ne jom koulz lavared netra anezañ.

Soazig : Perag eo bet anvet al leh-se Ar Faou ?

Visant : Emichañs abalamour ma oa kalz gwéz fao er vro tro-dro. Setu perag, Aotrou ar hastell a veze greet anezañ : Beskont ar Faou Fao, evel hini Kastell nevez ar Faou hag a oa euz ar memez familh.

Soazig : Du-hont e oa ivez eur Hastell neuze ?

Visant : Evel-just ! méz nevesoh moarvad peogwir eo bet anvet Ar Hastell Nevez. Aotrou ar hastell-ze a gavas eur statu d'an Intron Varia en e goad. Lakaad a reas anezi da genta a-zioh dor borz e vaner. Abaoe e vez greet anezi : Intron Varia ar Porzou hag he Chapel a zo hirio el leh m'edo ar hastell koz.

Soazig : Lavarom c'hoaz e vez eno beb bloaz eur pardon braz gand e-leiz a dud evel e Rumengol hag er Folgoad.

Ar Menez-Hom

Soazig : Ha ma 'z afem hirio war Menez-Hom ? Sklêr eo an amzer. Ar gwel ahano a vo kaer meurbed ;

Visant : Ya ; Deom war Menez-Hom ; Tremen a raim dre Roznoen, anvet Roz Lohen gwechall ; Ahano e hellim taoler eur zell war ar Ster-Aon diwar bont Terenez ;

Soazig : Tremen a raim ivez dre Argol ; Porched ar vered eno a zo dispar, gand ar roue Grallon war e varh mên.

Visant : Setu-ni war Menez-Hom. Amañ e komañs eun aridennad meneziou anvet ar Meneziou-Du : Menez Braz, Menez Kelh, Garreg an tan, Menez Laz. Menez-Hom avad eo an uhella anezo : metr e-neus.

Soazig : Sell 'ta pegen dudiuz eo ar vro a béb tu ! ar Ster Aon, aze, en traoñ. Plég-mor Douarnenez én tu all. Gourenez Kraoñ er huz-heol gand Plég-mor Brést war an tu dehou. Bég-ar-Raz a weler ivez war an tu kleiz, ha pelloh er mor, Enez-Sun.

Visant : En traoñ, aze ema iliz Sant Vik, hag izelloh, chapel Sant-Kom.

Soazig : Ahano, marteze, e teu ano ar menez-mañ ?

Visant : Ne gredan ket. Kom, eur "hom" a zo eul laouer. Hag e gwirionez pa zaver war ar menez, e weler, war an tu dehou, eun doullenn heñvel a-walh ouz eur hom pe eul laouer.

Soazig : Menez-Hom a hellfe beza ivez Menez ar houmoul, ne gav ket dit ?

Visant : Marteze ; rag pa vez izel ar houmoul e vez goloet ganto kern ar menez. Tud Sant Vik a lavar neuze e vez Sant-Kom oh ober krampouez.

Kêr-Iz

Soazig : Komzet on-eus euz Plég-Mor Douarnenez. War a gonter, e oa aze, gwechall-goz, eur gêr vraz, anvet Kêr-Iz, hag a zo bet konfontet gand ar mor.

Visant : Ya, anaoud mad a ran ar werz. Kanet e veze gwechall, soñj am-eus c'hoaz, gand ar glaskerien-vara. Me ivez am-eus he hanet dindan eñvor gand he zri-ugent koublad. Te, marteze a hellfe kana anezi ?

Soazig : Ma karit avad. Méd tri goublad hepken.

Petra 'zo nevez e Kêr-Iz,
Ma 'z eo ken foll ar yaouankiz
Ma klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag an telennou.

N'eus e Kêr-Iz netra nevez.
An ebatou a vez bemdez.
N'eus e Kêr-Iz nemed traou koz.
An ebatou a vez bemnoz.

Ahez, merh ar Roue Grallon,
Tan an ivern en he halon,
Er penn kenta euz an diroll
A gas d'he heul ar gêr da goll.

Visant : Kêr-Iz, e gwirionez, a oa kaset da goll gand ar Briñsez Ahez. Rei a reas d'an diaoul an alhwez a zigore skluziou ar gêr hag a vire ouz ar mor da ziruill warni.

Soazig : Kêr a oa izelloh eged ar mor. Pa oe digoret ar skluziou, ar mor o sevel a veuzas péb tra.

Visant : Nemed ar Roue Grallon. Hemañ a oe savetaet gand Sant Gwenole. Ar roue avad a glaskas savetei e verh, méd ar zant a skoas gand e vaz hag a reas dezi koueza er mor braz. Setu ma kaner c'hoaz :

Bremañ eet eo Mari-Morgan.
Ahez e skeud al loar a gan,
A gan, hag en eur vousec'hoarzin
A grib er mor he bleo bezin.

Visant : Ar roue koz hag ar zant, war gein o hezeg a zaoulammas beteg Bég Menez-Hom. Hag o weled ahano Ru-Mên-Goulou o lugerni e lavaras :

Du-hont, én eñvor da Gêr-Iz,
Me a raio sevel eun iliz.
Hag evid testeni d'an oll,

M'he galvo Iliz Rumengol.

Soazig : Amañ, war gern Menez-Hom e vez eur gouél braz, bep ploaz, neketa !

Visant : Ya, d'ar bemzeg a viz eost, Plouidiern a ra amañ eur gouél braz folkloreg hag a zach eur bern tud, touristed dreist-oll. Plijadur o-deus ar re-mañ o weled or gwiskamañchou kaer, o selled ouz on dañsou breizeg, kag o kleved or hanaouennou brezoneg.

Soazig : En deiz-se e vez ivez eur pardon e chapel Intron Varia Menez-Hom a weler aze he chapel én traoñ, e-touez ar gwéz. Eur japel vrao eo.

Visant : Ya 'vad ! eur japel euz ar re gaerra, euz ar XVIved kantved. Kizelladuriou dispar, war goad, a gaver enni, hag a dalvez ar boan mond d'o gweled. Estlammet e chomer dirazo.

Soazig : Penaoz ez eus bet savet én eul leh ken distro, eur japel ken kaer ?

Visant : An dra-ze a ziskouez dreist péb tra, e oa pinvidig on tud koz, hag ivez pegen e oant tud a feiz.

Soazig : Klevet am-eus e veze ivez foariou braz e-kichenn ar japel-ze.

Visant : Ya. Beteg peder bép ploaz. Ha tud ar foariou-ze, p'o-deveze bet greet foar vad, ne vankent ket da rei o aluzenn d'an Intron Varia. Evel-se, a vloaz da vloaz, e kaerrae ar japel, ez eus bet savet da vond d'ar vered eur porched braz ha kaer, ha dreist-oll eur halvar dispar e mein Kerzanton.

Soazig : Eur feunteun, a gredan, a zo ivez evel m'he-deus péb chapel e Breiz-Izel.

Visant : Evel-just. Ar pezh a ziskouez e oa dija darempredet al leh-se pell a-raog ar relijion gristen gand ar Gelted.

Soazig : Aze, en traoñ, diouz kostez Sant Vik, e weler eun aot pe eun drêzenn vrao : Trêzenn Penntêz.

Visant : Brao eo an drêzenn-ze e gwirionez. Plijuz eo beza eno pa vez tomm an heol, o redeg war an trêz gwenn, pe o kouronka er mor, pe c'hoaz o kranketa, pe o klask kregin e-touez ar rehier pa vez izel ar mor.

Ar Porze

Soazig : Gream c'hoaz eur varvailladenn a-raog diskenn diwar Menez-Hom. Ken kaer eo ar vro da weled ma ne skuizer ket o selled outi.

Visant : En traoñ, dirazom, ema ar Porze : Ploudiern, Ploeven, Plonevez-Porze ha Kerlaz. Eur vro binvidig mar deus unan. He douarou druz a ro trevajou euz ar henta. Gwechall e veze gounezet kalz gwiniz, avalou douar-had, boued chatal. Hirio ne weler koulz lavared nemed maiz dre-oll.

Soazig : Aze, neketa, edo gwechall Koad-Neved. Ha war a lavarere, parrez Plonevez a veze greet anezi : Ploneved evel ma veze greet Porz-Koad euz ar Porze, deuet da veza goude Porzoed ha Porzoez.

Visant : Koad Neved a oa braz-tre. Mond a ree azaleg Menez Hom, tro beteg Kemper. Hirio ne jom nemed eun tamm bennag anezañ én-dro da Venez Lokorn : Koad-an Duk én eun tu ha Koad Neved én tu all.

Soazig : Eur vro binvidig ! ha setu perag ne jom ket kalz a vein koz war zouar ar Porze. An darn-vuia euz ar hêriadennou a zo nevez a-walh, liou ar binvidigez warno.

Visant : Eur maner koz, kaer-kenañ, a gaver koulskoude : Maner Moellon an hini eo. Edo tostig da goueza en e boull p'eo bet reñket brao gand ar re a zo perhenn dezañ bremañ. Ma fell dit debri prejou mad ha krampouez euz ar henta, kee di. Deuet eo da veza eun Ostaleri vrudet darempredet kalz.

Soazig : Eun dra a zo hag a zisplij din pa dreuzan ar Porze. Deuet eo ar vro a-béz da veza eur blênenn, héb gwéz na glaster.

Visant : Siwaz ! diskaret eo bet ar hleuziou hag ar gwéz gand an tourterien milliget. Diêz eo bremañ kaoud eur houdorenn eneb d'an avel ha d'ar glao. Marteze eun deiz bennag e vo red sevel kleuziou én-dro.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Gourenez Kraoñ

Soazig : Da beleh ez aim bremañ ? Goude beza sellet ouz gourenez Kraoñ diwar an uhel, me 'garfe ober dezi an dro.

Visant : Deom 'ta neuze, peogwir eo brao an amzer. Eun dudi e vo ar bourmenadenn-ze. Tal-ar-Groaz a baseim da genta. Telgrug a lezim war an tu kleiz. Ar vourh eno, én he féz, a zo nevez, distrujet m'eo bet ar vourh gand ar brezel diweza.

Soazig : Setu-ni bremañ e Kraoñ. Eur gêrig v Rao a-walh eo Ar barrez a zo braz-kenañ. Mond a ra beteg Bég ar Haor, eul leh gouez spontuz, gand tiéz a-doulladou stank

Visant : Kalz anezo dilezet gand o zud, a zo bet prenet gand kêriz, a deu di da dremen an hañv. An douarou avad, goloet gand dréz, spern, lann, balan ha brug, n'int ket mui labouret.

Soazig : Euz Kraoñ, deom beteg Roskañvel. En eur dremen e Kelern e welim, e-kreiz ar mor, an Enez-Hir hag a guz en he hov binviou spontuz a varo.

Visant : Pelloh, Bég-ar-Spanoled a zo leh dudiuz dirag Brést, uhel a-zioh ar mor. Anvet eo evel-se ablamour ma 'z eus bet soudarded euz ar Spagn eno o chom e-pad brezel al "Ligue".

Soazig : Astenn a ra an deiz. Deom buan bremañ beteg Kameled. Rehier ha mor penn-da-benn. Eun drugar !

Visant : Kameled a zo eur porz-mor beo kenañ a beskete dreist-oll al legistri. Gwechall ez eus bet eno gwall emgannou etre ar Zaozon o klask douara hag ar Hallaoued, er bloaz 1594. Tour chapel Intron Varia Roh-Amadour a zo chomet diveget abaoe.

Soazig : E Lagad-Yar, tostig amañ, ez eus peulvanou pe mein hir da weled.

Visant : Méd war 700 a oa anezo, ne jom nemed seiz-ugent Ar re all a zo bet torret, siwaz !

Soazig : Evid echui gand or pourmenadenn, tremenom ivez dre gichenn monumant braz soudarded an F. F. I. euz ar brezel diweza. Lenn a heller warnañ ar geriou-mañ e brezoneg : Kentoh mervel eged en em zaotra.

Soazig : War on distro euz Kraoñ, greom eur pelerinaj e Santez-Anna ar Palud. War hent on distro da vond da Lokorn ema.

Visant : Eur zoñj vad ha santel eo. Santez Anna eo mamm-goz ar Vretoned ha Patronez Breiz.

Soazig : Setu-ni dirag he chapel. N'he-deus ket an êr da veza gwall goz.

Visant : Nann. Euz ar hantved diweza eo. Méd ar pelerinaj a zo koz-kenañ. Kan ar poz-mañ euz ar hantik hag e weli.

Soazig :

Goude ma oe sebeliet
E-kreiz izlonk ar mor
Kêr-Iz ar gêr villiget
Perlezenn an Arvor

Grallon 'roas Rumengol
D'an Intron Varia
Hag ar Palud én digoll
D'or mamm Santez Anna

Visant : Rag-se eo 'ta, abaoe amzer ar Roue Grallon e tireder d'ar Palud da bedi Santez Anna. Da lavared eo, abaoe ouspenn pemzeg kant vloaz Ar japel genta, hervez al levriou koz, a vije bet beuzet én trêz, kaset gand ar mor ha gand an avel.

Soazig : Méd chapeliou all a zo bet c'hoaz etre an hini genta hag an hini a zo bremañ ?

Visant : Ya, sur. An eil a oa euz an XIIved kantved, an drede euz ar XVIIved kantved hag an hini a welom bremañ a zo bet benniget er bloaz Skeudenn goz Santez Anna, e mein livet, a zo euz ar bloaz 1548.

Soazig : Ar gwerennou livet a zesk deom pennadou euz buhez ar Zent koz : Gwenole, Kaorantin, Gwenead, Herve, Tegoneg, Judikael, Millo, Melar, Ronan.

Visant : Pajennou kaer euz o istor eo a gaver war ar gwerennou-ze. Digasom da zoñj e vez ar pardon braz, bep ploaz, da zul diweza a viz eost. Beteg hanterkant mil dén hag ouspenn, a weler én deiz-se én-dro da Vamm-goz ar Vretoned. Eur brosesion a vez eno neuze ha n'he-deus ket he far e Breiz a-béz, én enor da Zantez Anna.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Lokronan

Soazig : Diwar eur menez d'eun all, setu-ni hirio war Menez-Lokorn pe Menez Sant Ronan.

Visant : N'eo ket hemañ ken uhel hag ar Menez-Hom : 289 metr (daou hant nao metr ha pevar-ugent) a uhelder n'e-neus kén. Méd ar gwél diwarnañ a zo marteze kaerroh c'hoaz.

Soazig : Ma vije bet an nevez-amzer, an hent on-eus heuliet a vije bet leun a vleuniou balan ha lann alaouret. Ar brug ruz, sell, a weler c'hoaz dre oll. Ar japel a zo dirazom amañ avad, n'eo ket gwall vrao. Te a anavez he istor ?

Visant : Chapel ar Zoñj a vez greet anezi, hag ar blasenn a zo én-dro dezi eo Plas-ar-Horn. Savet eo bet gand eun Intron binvidig euz ar vro e penn kenta ar hantved-mañ. En eun huñvre e-pad he housk he-doa gwelet Sant Ronan o houlenn diganti sevel amañ eur japel én e enor. Ne gaver ket avad e talvezfe ar boan beza raparet, rag n'he-deus ket kalz a dalvoudegez.

Soazig : Hag ar vro a weler diwar gern ar menez-mañ !

Visant : Ya. Du-hont war-zu an hanternoz e weler ar menezioù Are. Dirazout, war-zu ar zao-heol, ema ar Menezioù Du, beteg Karaez.

Soazig : En tu all, sell, e vez gwelet o lugerni Plegou-Mor Douarnenez ha Gwaien, hag etrezo, Bég-ar-Raz.

Visant : Diouz kostez ar hreisteiz a-zioh douarou druz Plogoneg, e hell beza gwelet, pa vez sklêr an amzer, touriou iliz-veur Kemper.

Soazig : Hag en eur zelled mad diouz kostez ar walarn, e weler zokén, én tu all da Venez-Hom, tiéz gwenn kêr Vrest. Pebez leh dudiuz da zond da bourmen, neketa !

Soazig : Diskennom diwar ar menez ha greom eur gwél da vourh Lokorn. Kalz traou or-bo da zeski eno.

Visant : Gwelom da genta an iliz. Merka 'ra al leh ma veve ennañ Sant Ronan, war-dro ar Vived kantved. Lok-Ronan a ziniti : Leh Sant Ronan, Lochenn Sant Ronan.

Soazig : Eur manah, eun ermit e oa Sant Ronan, neketa !

Visant : Eur manah deuet euz an Hiberni, pe Iwerzon, anvet e galleg "Irlande".

Soazig : Lavared a reer e-neus bet treuzet ar mor én eul laouer vein.

Visant : Konta 'reer an dra-ze e buhez meur a zant breizad. Ar pezh a zo gwir avad eo e veze laoueri mein ganto en o bagou. Ar re-mañ greet gand kregin loened a oa re skañv da harpa ouz an tarzioù mor. Al laoueri a zervije dezo d'o fonnerraad, hag ivez da lakaad dour feunteun da eva e-pad o beaj. Setu toud.

Soazig : Hag al laoueri-ze eo a weler hirio c'hoaz a-wechou e-kichenn o japeliou. Setu penaoz eo bet ijinet neuze diwezatoù kontadennou ar bagou mein.

Visant : E Bro-Leon, el leh m'ema bremañ Lokournan-Leon, eo ez eas da genta da jom. Eno e savas eur peniti. Dond a reas buan avad da veza re anavezet hervez e zoñj. Tehed a reas kuit da Vro-Gerne da zével eur peniti all a zeuas da veza Lokorn.

Soazig : Eul leh kaer a zibabas. Ar gwél a-hann, war Blég-mor Douarnenez, a zo dispar.

Visant : D'ar mare-ze, moarvad, e oa kaerroh c'hoaz. Koajou a oa dre-oll. Eur feunteun a oa ivez e-kichenn, rag n'eus ket a ermitaj heb feunteun. Ar feunteun-ze a weler c'hoaz. Honnez eo feunteun Intron Varia Kelou Mad, gand eur japelig en he-hichenn. Ema aze, eun tammig izelloh eged ar vourh.

Soazig : Souezuz eo e vije bet savet amañ, e Lokorn, eun iliz ken braz ha ken brao. Lavaret e vije eun iliz-veur.

Visant : Souezuz, e gwirionez ! Méd d'ar mare-ze, Lokorn a oa eur gêr pinvidig-mor. Dre oll, gweled a rez, ema liou ar binvidigez war an iliz, ha war an tiéz er vourh.

Soazig : Euz peleh e tenne neuze kêr Lokorn he finvidigez ?

Visant : Euz ar gwiad lin a werze. Soñj 'ta e veze gwelet neuze (a-raog ar Revolusion), gwiaderien e peb ti, koulz lavared. Gounezet e veze, d'ar mare-ze, lin ha kanab e peb leh. Ganto e veze greet lien evid batimañchou porz Brést pe ivez, dillajou a béb seurt.

Soazig : Lennet am-eus én eun tu bennag, eo Sant Ronan eo e-neus bet ijinet an doare d'ober lien pe gwiad.

Visant : Konta 'reer an dra-ze. Sant Ronan e-neus dizoloet ar mod d'ober lien en eur zelled ouz eur gevridenn o sevel he gwiad.

Soazig : N'eo ket hepken e Lokorn eo e veze kavet gwiaderien evel-se ?

Visant : Nann sur ! Euz Landerne da Vontroulez hag e meur a leh all e Breiz, e oa c'hoaz kalz anezo. Lien Breiz a oa brudet a-bell-bro. Kaset e veze d'ar broiou all dre borziou-mor Landerne, Rosko, Montroulez. Arhant hag aour e-leiz a zeuas er vro. Ganto e oa savet or haerra monumañchou : Kalvariou, ilizou, chapeliou.

Soazig : Perag ne vez ket desket an dra-ze er skoliou d'or bugale ?

Visant : Red e vije hen ober, evel-just. Muioh a lorh a vije bet neuze er Vretoned gand o Breiz. Méd abaoe n'int mui mistri en o bro, gouarnamant Pariz ne glask nemed eun dra : Kuzad outo o istor, o lakaad da gaoud méz euz o yez hag euz o amzer-dremenet

Soazig : Méd a-drugarez Doue, ez eus hirio gwellaenn o tond war ar poent-se.

Soazig : Me 'garfe gouzoud hirroh diwar-benn buhez Sant Ronan. Pell e vevas e Lokorn ?

Visant : Pellig mad, sur a-walh, peogwir e teuas a-benn da gristena ar vro. Koulskoude, eur vaouez anvet Keben a zalhas penn dezañ.

Soazig : Zoken, 'm-eus aon, e tamallas anezañ dirag Lez-varn ar Roue Grallon da veza laeret he merh.

Visant : Eur mell gaou ne oa kén, a-drugarez Doue. Mouget e oa bet ganti én eun arh. Ar zant hen diskouezas sklêr d'ar Roue én eur resusita ar plahig. Keben, abaoe, a zo chomet e memor an dud evel skwér an teodou fall. E Lokorn, hirio c'hoaz, lavared Keben da eur plah yaouank, a zo ober dezi ar gwasa dismegañs.

Soazig : Gweled a ran amañ, én iliz, béz Sant Ronan. Koulskoude, n'eo ket amañ eo bet marvet.

Visant : Nann, méd e Sant René e-kichenn Hillion, e Eskopti Sant-Brieg, el leh ma oa én em dennet e fin e vuhez. Goude e varo, e gorv, lakeet en eur harr, stlejet gand daou ejen, a zeuas war-eeun beteg amañ drezo o-unan.

Soazig : Ya, hag én eur zegouezoud, Keven, fuloret ouz ar zant, a skoas ganto gand he golvaz hag e torras e gorn da unan anezo.

Visant : Hag al leh ma kouezas warnañ ar horn a zo anvet hirio c'hoaz Plas ar horn. Kerkent avad, an douar a zigoras hag a lonkas Keven. Eur groaz anvet Kroaz-Keven, etre Plogoneg ha Lokorn, a verk al leh milliget-se. Dén ne ra sin ar groaz dirazi, hag ar vugale zokén a stlap mein outi.

Soazig : Ha Sant Ronan a oe douaret amañ neuze el leh m'ema an iliz. Ar béz kaer a welom n'eo ket koulskoude euz amzer ar zant.

Visant : Nann sur ! Hemañ a zo euz ar XVIved kantved. Savet eo bet gand an Dukez Anna Vreiz pa deuas da bardona da Lokorn da houlenn ar hras da gaoud bugale Eur verh a lakaas goude er bed hag a oe anvet ganti Renea.

Visant : Skoet e vez unan, e gwirionez, pa bign gand hent praz Douarnenez da Gastellin, o kavoud war e hent eun iliz hag a hellfe beza eun iliz-veur. Tri boz euz ar hantik a lavar deom kaerder an iliz-se Kan anezo deom 'ta :

Soazig :

Daoubleget stard o pedi
War barlenn e venez,
Gwelom iliz Sant Ronan :
Na koanta rouanez !
Garidou dantelezet,
Tro-distro d'he mantell
Ha bolziou kroazigellet
A hoarz ouz an avel

Anna, on Dukez karet,
Tro daou-hant vloaz goude,
Deredet da gaoud Ronan,
A baeas mad he dle,
Pa lakaas adsevel,
E beniti ken koant,
Goude ar béz burzuduz,
Gwir veulgan mein he c'hoant

Arzourien a Vreiz-Izel
Er vein koulz er hoad
O-deus greet gand o hizell
Patromou d'or Zant mad.
War voulouz or bannielou,
War al lien gwenn-kann,
E weler e skeudennou
O skedi kaer, er vann

Visant : An iliz-se hag a welom hirio war béz Sant-Ronan, n'eo ket evel-just, an hini genta a zo bet savet eno.

Soazig : Petra eo bet ar japel genta neuze ?

Visant : Moarvad, evel m'edo ar hiz d'ar mareou-ze, eur japel goad e-kreiz eur hoad braz. Méd ar hoad ne bad ket ouz dent an amzer. Setu perag ne jom mui netra anezi.

Soazig : Dond a reas berniou tud da bardona war béz ar zant. Ahano eo, a-dra-zur, e savas c'hoant ganto da zevel eun iliz vein euz ar re gaerra.

Soazig : Daoust ha kavoud a reer er paperiou koz eun dra bennag diwar-benn Lokorn ?

Visant : A-dra-zur ! Azaleg an XIved kantved ez eus dija ano euz Lokorn. Alan Kanihart, kont a Vro-Gerne, goude eur viktor bet gounezet gantañ, a roas douarou da Zant Ronan, hag ivez donezonou braz a arhant evid kaerraad e iliz. Lakaad a reas anezi dindan galloud meneh Kemperle.

Soazig : Duked Breiz a reas ivez, a gredan, eun dra bennag eviti.

Visant : Pèr Maoklerg, Duk a Vreiz (1250) a reas anezi eur prioldi dalhet gand meneh Sant Benead. Donezonou all a deuas c'hoaz, a-berz an Duked a renas war e lerh, a binvidikaas c'hoaz an iliz.

Soazig : An Dukez Anna Vreiz a dle beza bet koulskoude he gwella madoberourez ?

Visant : Ya, goude Yann V, an Duk meur. Evel m'on-eus lavaret dija, Anna Vreiz eo a zavas al lodenn euz an iliz anvet peniti, hag ivez béz kaer ar Zant dre anaoudegez vad evid ganedigez he merh Renea. An ano-ze n'eo nemed ano Ronan roet da eur plah.

Soazig : An tour braz n'eus bég e-béd warnañ. Petra 'zo kaoz ?

Visant : Ar gurun, er bloaz 1808, a zo bet kouezet warnañ hag eo bet diskaret. Klasket 'zo bet e zevel én-dro. Méd Lokorn ne oa ket pinvidig a-walh. An arhant bet dastumet én eskopti a-béz e-neus, koulskoude, raparet an droug greet gand an tour, én eur goueza.

Soazig : Leun a skeudennou koz a gaver ivez én iliz.

Visant : Ya, e-leiz a zo anezo. Ha war ar gador-zarmon ez eus kizelladuriou euz ar XVIIved kantved hag a ziskouez buhez Sant Ronan. Gwerennou koz a zo ivez, méd en eur stad fall kenañ.

Soazig : Daoust ha n'eo ket kloh Sant Ronan kosa tra a virer én iliz ?

Visant : Eo. Rag, war a greder, e vije deuet ar hloh-se euz Bro-Iwerzon, gand ar zant e-unan. Tri gloh all eveltañ, a virer c'hoaz e Breiz : Hini Sant Paol a Leon hag hini Sant Goulhan a zo anavezet mad én eskopti-mañ.

Soazig : Lokronan a zo anavezet dreist-oll ablamour d'an Droveni a reer eno béb c'hweh vloaz.

Visant : Gwir eo. N'eus netra souezusoh eged an droveni-ze a reer d'an eil ha d'an trede sul a viz gouere, béb c'hweh vloaz evel ma lavarere.

Soazig : Ar gér troveni a gavan eur gér misteriu. Euz peleh e teu ha petra 'zinifi ?

Visant : Red e vije lavared “tro ar vinihi”. Minihi a deu euz ar gér manah. Talvezoud a ra ivez kement hag ar gér galleg “asile”.

Soazig : Eul leh santel eo neuze, eul leh repu hag a ziskuiz ?

Visant : Er Grenn-amzer, ar re a veze klasket trabas outo gand ar justis pe al lezvarniou ne helle beza greet droug e-béd dezo keit ha ma vezent war eun dachenn venniget evel-se.

Soazig : Ouspenn an droveni vraz, béb c’hweh vloaz e vez greet ivez eun droveni vihan bép ploaz.

Visant : Méd berroh e vez houmañ. Mond a reer war-eün da japel ar Zoñj : mond ha dond nemetkén. Sant Ronan, e-pad e vuhez e Lokorn, a ree e-giz pinijenn, béb sizun, an droveni vraz, ha bemdez an droveni vihan.

Soazig : Braz eo minihi Sant Ronan ?

Visant : War-dro teir leo dro en-doa. Béb c’hweh vloaz eta, kristenien Lokorn hag ar parreziou tosta a ra prosesion an teir leo-ze. An hini ziweza a zo bet greet er bloaz 1971.

Soazig : Daoust ha c’hwi ho-peus bet greet an droveni vraz-se, eur wech bennag ?

Visant : A-drugarez Doue ! rag an hini ne ra ket e droveni e-pad e vuhez a ranko heh ober goude e varo, ha ne avañso bép ploaz nemed euz hirder e arched a-raog mond d’ar baradoz.

Soazig : E 1977 e vo eta an dromeni a zeu. Bezit sur ne vankin ket honnez ! Da hortoz marteze e hellfem ober en hañv a zeu, on tromeni vihan ?

Visant : Ma karez, avad. Gweled a ri pegen kaer e vez ha pegement a gan a vez gand an dud, ganto o haerra dillad breizeg.

Soazig : Meur a dra on-eus c’hoaz da lavared diwar-benn troveni Lokorn. Eur gwall grogad e tle beza an droveni-ze !

Visant : Red eo beza greet anezi evid her gouzoud. Dougen kroaziou, bannielou ha delwennou, dre béb seurt hentchou, a-héd teir leo, dreist-oll pa vez tomm-bero an amzer, a zo eur binijenn, m’hel lavar dit.

Soazig : Mond a reer a-wechou zokén, dre greiz ar parkeier hag ar foenneier ?

Visant : Ya ! Méd ar gwaso eo pignad war ar menez, dre douez ar brug, al lann hag an dréz. Ar merhed a vez o tougen an traou, a rank beza sikouret neuze gand ar baotred yaouank. A-drugarez Doue, pa zegouezer war bég ar menez, e-kichenn chapel ar Zoñj, e vez greet eun ehan hir. Kavet e vez eno peadra da zebri ha da eva a-raog selaou eur zarmon.

Soazig : Da houde eo êsoh rag n’eus nemed diskenn da ober beteg bourh Lokorn.

Visant : Laouennoh e vez ivez an dud goude beza debret hag evet. Diskenn a reer ouz kostez Plogoneg. Eun ehan all a reer e-kichenn eur halvar evid kana, pedi ha lenn c’hoaz an aviel.

Soazig : Tremen a reer ivez, neketa, dre gichenn kroaz Keben ?

Visant : Ya, just etre Plogoneg ha Lokorn. Dén avad ne fell dezañ e ve ar groaz-se én e barrez. Ha setu perag, tud Lokorn a dremen én tu dehou dezi ha tud Plogoneg én tu kleiz.

Soazig : A-benn péd eur e vezer distro d’an iliz ?

Visant : Ouspenn c’hweh eur e vez. Mond a reer enni dre zor ar peniti, én eur dremen dre zindan ar relegou dibradet uhel gand an dougerien. Evid echui e vez roet bennoz ar zakramant ha kanet eur wech muioh meuleudi Sant Ronan.

Soazig : Eun dro héb par eo tromeni Sant Ronan N’eus nemeti e Breiz ?

Visant : Eo. Tromeniou all a zo : hini Sant Telo e parrez Landelo a zo hirroh c’hoaz. Peder leo he-deus. Greet e vez bép ploaz da zul ar Pantekost. Diou wech on bet oh ober anezi.

Soazig : Peder leo ! Neuze eo red eun devez penn-da-benn evid ober eur seurt tro !

Visant : Kuitaad a reer an iliz da zeiz eur hanter evid distrei a-benn peder eur goude kreisteiz da gana gousperou én iliz parrez .

Soazig : Hag e touger e-pad keid all kroaziou, bannielou ha delwennou ?

Visant : Ne vez douget nemed ar relegou e-pad toud ar brosesion. An traou all a vez lezet beteg an distro én eur gêriadenn tostig a-walh d’ar vourh. An overenn a vez kanet e chapel Sant Laorañs, hanter hent en droveni. Eno e vez debret lein. Evel e Lokorn ez eer dre greiz parkeier ha lanneier. Soñj am-eus da veza treuzet eur park leton leun a zaout !

Soazig : Lavaret ho-peus ez eus meur a droveni. Pere eo ar re all ?

Visant : Greet am-eus anezo oll : troveni Sant Gouenou e parrez Gouenou, hini Sant Sane e Plouzane, hini Sant Briag e Boulvriag e eskopti Sant-Brieg. Méd ar souezusa anezo oll eo re ar zent bihan e Plougerne : teir a vez, pe a veze greet bép ploaz.

Soazig : Troveni ar zent bihan ! Perag an ano-ze ?

Visant : Delvennou sent bihan e koad eo ar re-mañ, ouspenn tregont anezo hag a vez douget e prosesion war begou bizier koad tud ar barrez. A-wechou ez eont war ar mêz, beteg eur japel, a-wechou all beteg ar mor, a-raog distrei d’an iliz-parrez. Ne anavezan netra dudiusoh eged ar prosesionou-ze. Kemeret am-eus anezo eun toullad mad a ziapozitivou hag am-eus plijadur atao o selled outo.

Soazig : Lokorn, én amzer hirio n’eo mui, tamm e-béd, ar pezh m’eo bet !

Visant : Nann, sur ! Ne glever mui, o fraoñval, én oll dier, mekanikou ar wiaderien nemed unanig bennag evid plijadur an douristed.

Soazig : Aboe pell ‘zo ema an traou evel-se ?

Visant : Abaoe ar Revolusion vraz dreist-oll hag abaoe ma ya dre dan ar batimañchou braz, e-leh mond dre lien. Setu Lokorn bet eur gêr vraz a-walh, a zo deuet buan da veza eur gêr vihan. A-veh m’he-deus bremañ 700 a dud.

Soazig : Ar gêr vihan-ze koulskoude, a dremen enni béb hañv eur bern tud.

Visant : Gwir eo ! N’eus leh e-béd marteze e Breiz-Izel, o weled kemend all a douristed, dedennet gand e diéz koz, e iliz dispar, hag ivez kaerder ar vro.

Soazig : Evel an douristed, me ivez a blij din tremen dre Lokorn n’eus forz e peseurt amzer euz ar bloaz. He mein benerez a blij din kenañ ha zoken ar puñs koz a zo e-kreiz ar blasenn.

Visant : Ar puñs koz ! Siwaz ! Ne glever mui gwigourad ar jadenn o sevel pe o tiskenn ar zaill, nag ar merhed gwisket kran o ragachad én-dro dezi, o hortoz o

zro da gaoud dour. Eno eo e veze neuze klevet keleier ar vro evel er radio én amzer hirio.

Soazig : Ha meneh ar prioldi, petra int deuet da veza ?

Visant : Abaoe an Dispah braz int eet kuit héb distro. D’ar memez amzer eo bet laeret teñzor an iliz ha kaset d’an teuz seiz kloh an tour uhel. Hag hemañ, goude koll e gleier, a zo bet prestig goude diskaret e-unan gand ar gurun. Diou wech all a-raog : e 1640 ha 1722 e oa bet diskaret dija, er memez mod. Méd neuze, Lokorn a oa pinvidig a-walh da helloud e zewel én-dro.

Soazig : A-raog kuitaad kêrig Lokorn, kontit deom c’hoaz ano euz eur hiz koz all, estreged an droveni, hag a zo chomet beo enni.

Visant : Euz gwezenn kala mae moarvad e fell dit komz ? Ya, ma tegouez ganit tremen war blasenn Lokorn d’an deiz kenta a viz mae, e chomi souezet o kavoud warni eur mell gwezenn glaz-kaol he deliou, ha n’edo ket eno an derhent.

Soazig : Perag ha penaoz, ha gand piou e vez plantet eno, bép ploaz, eur wezenn evel-se, d’an deiz kenta a viz mae ?

Visant : Trohet e vez ar wezenn dre guz, e-pad an noz a-raog, gand ar baotred yaouank a zo ugent vloaz e-doug ar bloaz, ha plantet eno ganto én enor da blahed yaouank ar barrez én oad da zimezi. Ar re-mañ, ouspenn, er memez nozvez, a vez staget dezo ouz o frenestou, eur bodig glaz euz ar wezenn-ze Diouz ar mintin, o weled ar bodig ouz he frenest, meur a hini a drido gand ar c’hoant dimezi.

Soazig : Petra e teu da veza ar wezenn goude ?

Visant : Gwerzet e vez, derhent gouél Yann, d’an hini a laka an uhella priz. Ar héf a vez d’ar prener, hag ar bodou a dalvez da ober tantad Sant Yann a vez c’hwezet e-kreiz ar blasenn.

Soazig : Hag e-keit-se evel-just, e vez dañset e-leiz én-dro dezañ, gand ar re yaouank gwisket en o haerra e-giz ar vro. Klevet ha lennet am-eus ivez én eun tu bennag, e vije bet deuet ar mojennour La Fontaine da Lokorn.

Visant : Hag hervez eur skrid koz bennag, e vije bet savet gantañ e fablenn “Le coche et la mouche”, aze war war an hent koz a gas da ru Sant Maoris. An hent-se, neuze, a oa hent ar val-bost pe an “diligence”.

Soazig : “Le chemin montant, sablonneux, malaisé” n’eo kén neuze nemed hent Sant Maoris, a bigne dre venez Lokorn da vond da Gemper ?

Visant : Hag ar manah a lavare e vrevier da heul ar harr a oa moarvad unan euz meneh ar prioldi, deuet eur gelienenn d’e heul euz liorz ar manati.

Soazig : Troet eo bet e brezoneg gand Paotr Tréouré. Ha ma lavar fem anezi ?

Visant : Ya ‘vad ! Krogom ganti neuze. Sur on e plijo d’or zelaouerien.

War eur zao digompez, toull didoull, sonn ha kromm

Hag a béb tu devet gand an heol tomm,

Peder gazez a jache war eur wetur vraz.

Gwazed, merhed, meneh, an oll a oa diskennet.

Ar moged a zute diouz ar hezekenned,

O tifronkal, gléb-teil ha skuiz-mar, siwaz !

Soazig :

Ha setu deuet, war he meno, eur gelienenn,
Da rei kalon dezo da zevel d'ar grehenn
Hag a voud, hag a flemm, dao ! d'an eil ha d'ebén !
Hag e puch war al limon, war ziouskouarn ar jao,
War fri Yann ar haser, én eur voudal atao,
Pa ne oar ober kén : dond a ray ganin !

Visant :

Pa wél ar harr o loh, ar goumer a gav dezi
Eo hi a lak ar rod da drei
Kredi a rafed gweled war dachenn an emgann
Eun ofiser o vond, o tond, hag oh embann
Petra d'ober, ha pe du lakaad beh
Evid gounid an treh

Soazig :

A-gorn e sell ouz ar veajourien vezeg
Ne reont seurt, én he serr, da rei nerz d'ar hezeg :
Eur manah o lenn e vrevier,
Eur vaouez o konta gevier.
N'eo ket pedi na kana 'zo d'ober moarvad
Méd kemer poan hag araokaad.
Goude kant abadenn ar harr a bign d'ar zao
- Amzer bremañ, emezi, greet am-eus labour vrao !
Kezeg, pa 'z int eet beteg penn
Mar plij, din va lodig brenn !

Visant :

Par int d'ar gelienenn, ar filouterien fall
A fraoñv, a voud hag a gri,
A lak e peb leh o fri
Ha ne reont seurt, nemed terri penn an dud all.

Bae Douarnenez

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Douarnenez

Soazig : Euz Lokorn da Zouarnenez eo berr an hent. Ha ma 'z afem di ?

Visant : Deom 'ta !

Soazig : Setu aze da vihanha eun ano hag a zo êz da gompren : Douarnenez : douar an enez, enez Tristan : la terre de l'île.

Visant : Ar pezh a hellfe beza gwir. Méd da ziwall a zo ouz an anoiou êz da gompren. Enez Tristan n'eo anvet evel-se nemed abaoe ar pevarzegved kantved

Soazig : Pe ano 'ta neuze a veze roet dezi a-raog ?

Visant : "Tutuarn enez" a veze greet anezi, da lavared eo : enez Sant Tutuarn. Hemañ 'zo eur manah hag e-noa savet eno eur manati war-dro ar c'hwehved kantved. Rag-se Tutuarn-enez a hellfe beza deuet da veza da genta : Tutuarn-enez, ha goude Douarnenez.

Soazig : Pa 'z eus ano ganeom euz enez Tutuarn, pe Enez Tristan, komzom da genta toud euz an enez-se. Eno ema, neketa, penn kenta Douarnenez ?

Visant : A-dra-zur ! Ha tostig dezi moarvad edo Kêr-Iz on-eus kontet dija he istor. Kavet ez eus bet roudou euz ar Romaned war an enezenn. Eul leh kreñv e tle beza bet evito sur a-walh. Daou-hant vloaz goude m'int bet trehet, da lavared eo war-dro ar bloaz 600, eh en em gavas eno Sant Tutuarn da zevel e vanati.

Soazig : Hag al laer braz Fontanella gand e zoudarded, daoust ha n'eo ket bet ivez eno o chom ?

Visant : Eo ! Méd kalz diwezatoh, da vare al "Ligue". Lakaad a reas freuz, gand e zoudarded, e peb leh. Distruja a reas oll diéz Douarnenez, da zevel eur voger vraz én-dro d'an enezenn d'én em ziwall mad diouz e enebourien. Emgannou spontuz a oe etrezañ ha tud ar vro.

Soazig : Lennet am-eus ne hellas dén é-béd dond a-benn anezañ nemed Henri IV, roue Frañs, a lakaas e laza, war ar rod, e Pariz.

Fontanella

Soazig : En on diviz diweza on-eus bet lezet Fontanella merzeriet war ar rod e Pariz. Kalz euz or zelaouerien, marteze, a garfe gouzoud hirroh diwar-benn ar forban-ze.

Visant : Kontom neuze e istor. Kredi a reer eo bet ganet e parrez Botoa e-kreiz meneziou Bro-Gerne. Ober a reas e studi e Pariz. Buan avad e kavas gwelloc'h dougen kleze. Tehed a reas. Goude meur a dro-gamm war-dro Orléans, e tistroas da Vreiz.

Soazig : An dra-ze a oa, a gredan, da veza al "Ligue" hag a reas kement a reuz e Breiz.

Visant : Ya, ha war zigarez rei sikour d'al "Ligerien" eh en em lakaas e penn eur vandennad hailloned tik war al laerez hag ar frigas.

Soazig : Diêz e vo, a gav din, lavared amañ an distruj a reas gand e dud koulz er hêriou hag er meneziou, e Breiz-Izel dreist-oll.

Visant : Spontuz eo ! beteg fin e vuhez, laerez ha laza eo bet e vicher. An oll a sponte dirazañ, ha dén ne grede lakaad warnañ e graban. Laerez a reas zoken penherez maner Mezarnou e Plouneventer, a deuas da veza e bried.

Soazig : Lennet am-eus e-neus devet ha rivinet n'ouzon ket péd kêr e Breiz.

Visant : Gwengamp, Lannuon, Landerne ha Bro-Leon a-béz a zo bet rivinet gantañ. Goude e lammas war Vro-Gerne.

Soazig : Ober a reas zoken eur hastell-kreñv euz iliz Sant Tremeur, e Karaez, evid en em zifenn.

Visant : Hag ahano e rede a-gleiz hag a-zehou da laerez ar pezh a helle er maneriu tro-dro beteg m'ah en em dennas e Enezenn-Dristan, e Douarnenez. Ahano c'hoaz evid kaoud arhant ha boued, e lammas war Gemper, Pont-e-Kroaz, ha Pennmarh dreist-oll, en eur lezel, a-vilierou, korvou maro war e lerh.

Soazig : Souezuz eo memez-tra, e vije bet lezet keid-all d'ober kemend a zroug.

Visant : N'eus bet gellet e baka nemed dre finesaou. Anéz e vije bet kendalhet pell hag hir c'hoaz gand e dorfejou.

Douarnenez

Soazig : Eur barz am-eus klevet o kana an dra-mañ :

Douarnenez, perlezenn Vreiz-Izel,
Plahig ar mor hag ar menez uhel,
Dindan da vor dispar, Kêr-Iz ar villiget
E-touez ar bezin teo, pell c'hoaz 'zo kousket.
N'eus e nebleh eur gêr eveldout-te.
Douarnenez, rozenn wenn Bro-Gerne

Visant : Kaer eo ar homzou-ze. Komzom 'ta neuze c'hoaz euz rozenn wenn Bro-Gerne.

Soazig : Méd, n'eus ket keid-se abaoe m'eo deuet Douarnenez da veza eur gêr vraz ?

Visant : Da genta, beteg ar Revolusion vraz, ne oa nemed eur porzig mor pesketêrien stag ouz Ploare. Ne deuio da veza parrez nemed er bloaz 1575. Eun iliz nevez a vo savet prestig, méd ne vo beget an tour nemed da fin ar brezel diweza

Soazig : Er memez mare pe war-dro eo bet savet ivez iliz Treboul ?

Visant : Ya, hag amañ eo bet echuet an tour. Ha petra 'reas neuze Treboul ? Mond da gerhad killog Douarnenez da lakaad war bég he zour. Setu ma lavarar c'hoaz hirio : Treboul, laer ar hillog.

Soazig : Iliz Ploare, hervez ar gwél anezi, a zo kalz kosoh ?

Visant : Euz ar XVIved kantved eo houmañ. Eun tour euz ar re gaerra a zo warni. Souezuz a-walh eo da weled ablamour d'ar peder douribell a zo warnañ ha n'o-deus ket ar memez ment. Diou anezo bet diskaret gand ar gurun e 1751, a zo bet savet én-dro en eun doare disheñvel an eil diouz ebén.

Soazig : Douarnenez, Ploare, Treboul, Poull-Dahud ne reont hirio nemed eur gêr ?

Visant : Eur gêr vraz a ouspenn 20.000 dén, an darn-vuia anezo o veva diwar labour ar besketerien.

Soazig : Lavarom 'ta c'hoaz evid echui :

Douarnenez perlezenn Vreiz-Izel,
Da vibien, heb aon én despet d'an amzer
Dirag ar mor treitour 'jom oll dibreder
N'eus e nebleh paotred evel da re,
Douarnenez, rozenn wenn Bro-Gerne.

Soazig : Douarnenez, n'eus e nebleh, paotred evel da re ! Pesketaerien eo a dlefer da lavared.

Visant : A-dra-zur ! Pesketaerien Douarnenez ha Treboul a zo brudet, a-bell 'zo, evid o nerz kalon, o halon vad hag o ampartiz war ar beskèrèz.

Soazig : Sardined eo a besketent dreist-oll. Gwechall, er skol, em-eus desket e oa Douarnenez ar brasa porz-mor e Breiz, evid ar zardined.

Visant : Gwir eo, pe gentoh, gwir eo bet. Méd hirio, ar zardined a zo deuet da veza rouez. Pesketet e vez dreist-oll, ton, brilli, legistri, grilled-mor, hag a beb seurt pesked all. Mond a reont evid-se beteg aochou bro Iwerzon, Bro-Spagn, hag Afrika zokén. O bagou kalz brasoh a harp gwelloh ouz ar gwall-vor.

Soazig : Daoust da-ze eo red d'eur bloavez tremen, heb na vije kollet unan pe unan euz o bigi, tud hag all siwaz ! Skoet e vezan beb tro ma 'z an da vered Treboul pe Douarnenez o weled kemend a blakou marb, skrivet warno : kollet er mor.

Visant : Eur gwall blanedenn eo micher ar besketerien, ha setu perag ez eus nebeud a dud yaouank én deiz a hirio o teski ar vicher. Mond a ra bep ploaz o niver war zisterraad. Euz tost da zaou vil pesketour, n'eus ket c'hoaz keid-se eo kouezet o niver izelloh eged mil.

Soazig : Douarnenez n'eo mui ar brasa porz pesketa a zo e Penn-ar-Béd ?

Visant : Nann. Konkerne an hini eo. Abaoe ar brezel diweza. Hemañ 'zo eet kalz war-raog. Koulskoude eo bet nevezet ha kresket kalz porz-mor Douarnenez. Méd n'eo ket bet a-walh c'hoaz, na goudoret mad a-walh kennebeud ar porz nevez. Evel m'ema, koulskoude, e hellfe kaoud muioh a lavig.

Soazig : Daoust da ziêsteriou an amzer e hellom lavared atao gand ar ganaouenn goz :

Ar bagou didrouz kaer,
Ken skañv ha laboused,
A ruz sioul war an dour
Dre al loar arhantet.

Soazig : Meuleudi a roer kalz da wazed Douarnenez ! Méd ar merhed ivez a hellfe beza meulet kemend-all !

Visant : Ya sur ! Kan ar ganaouenn hag e weli :

Soazig :

Gwazied, da oll verhed,
O-deus gwad rouanez,
Gwad mibin ha gwad tanet,
Roet dezo gand Ahez
Nebleh ne heller kavoud
Merhed evel da re.
Douarnenez kêr laouen,
Rozenn wenn Bro-Gerne

Visant : Ahez pe Dahud eo merh ar roue Grallon.

Soazig :

Ar bagou a zo distro,
Karget a besked kaer.
Ar merhed evid ar hae
O-deus kuiteet o hêr.
An amzer a zo klouar
Ha tomm ar halonou.
Dour 'zo én o daoulagad,
C'hoarz war o muzellou.

Visant : Mad int ivez da labourad. En uzinou koñserv pe frituriou, evel ma lavaront, ne vez nemeto, koulz lavared. Eur gwaz bennag hepkén evid ober al labouriou pounnerra. Méd ar merhed eo a laka ar pesked er boestou.

Soazig : Ya, hag en eur gana aliez, da vihanna gwechall. Eun dudi 'oa o gweled gand o hoefou gwenn penn-sardin. Kanet e veze kantikou ha kanaouennou a beb seurt mesk-ha-mesk.

Visant : Echu eo an amzer-ze, siwaz ! rag gand trouz ar mekanikou bremañ ne heller mui kana. Nebeutoh a frituriou 'zo ivez. Euz ouspenn ugent n'eus ket keid-se, a-veh ma chom eun hanter dousenn. Mar deo êseet al labour gand ar mekanikou, n'eo mui ken laouen.

Soazig : Evel-se ema hirio ar béd ! Petra 'ri ! Red eo mond d'e heul.

Treboul

Soazig : C’hwi hag a zo bet o chom pemp ploaz e Treboul a dle beza gwelet kalz a jeñchamañchou o tond e Douarnenez hag e Treboul !

Visant : Cheñchamañchou ? Ya sur ! Porz mor Douarnenez o kreski hag hini Treboul o vihannaad hag o tond da veza hepkén eur porz evid bagou pourmen pa deu an hañv. Evid-se eo bet stanket an darn vuia euz porz Treboul. Eur poull braz-tre e oa, hag ahano, moarvad eo deuet ano Treboul da lavared eo : Treo-ar-poull, Tre ar poull, Treboul.

Soazig : Souezuz eo e vije eet kement-se niver ar besketêrien war zisgreski pa’z eus bet savet evito e Douarnenez eur porz nevez ken modern.

Visant : Ma ne weler mui nemeur a zardined e Douarnenez e vez, memez tra, pesketet atao kalz a don hag a vrilli ha dreist-oll legistri, grilled ha kevnid-mor. Ar besketerez gand ar chalut eo bremañ an hini gwella.

Soazig : Peogwir ez anavezit mad Treboul, komzit din ivez euz ar gêr-ze.

Visant : Treboul ne oa da genta nemed eun toulladig tiéz én-dro da japel Sant Yann, eur porzig mor a netra. Stag e oa neuze ouz parrez Poullan : Plou-al-Lan, da lavared eo : parrez ar manati, hag e gwirionez, Poullan a oa stag ouz manati Landevenneg, en amzer goz. Kalz euz pesketêrien Treboul a zo o zud-koz genidig diwar ar mêz. Unan bennag e-neus skrivet : Ma vije sellet piz dindan o bouteier-koad, e vije c’hoaz kavet roud ar haoh saout dindanno.

Soazig : Ral eo, koulskoude, gweled peizanted o tond da veza pesketêrien.

Visant : Hirio, marteze. Méd d’ar mare-ze, e oa famillou niveruz war ar mêz. Red e oa kaoud labour d’ar baotred. Kalz a besked a oa neuze er mor. Setu ma vezent kaset da besketa, hag evel-se eo deuet Treboul da veza leun a besketêrien ma oe ranket sevel evito eun iliz vrasoh : Iliz Sant Josef, bremañ iliz parrez Treboul.

Soazig : Ar vro a zo kaer ivez ?

Visant : Kaer dispar ! Netra dudiusoh eged mond da bourmen a-héd an aot beteg Lopaereg e-leh m’ema feunteun Sant Pèr Baour ken karet gand ar besketêrien. Sant Paereg eo e oa henez e gwirionez, Sant patron Laopereg e-kichenn Kastellin Ken dispar all eo Koad-Iziz war an duchenn a-wél da Venez-Hom, a-zioh kaerra plég-mor a zo er béd.

Mikael an Noblez

Soazig : Treboul a oa da genta stag ouz parrez Poullan ha Douarnenez ouz Plouare. Bez' e oa koulskoude eur japel bennag dija e Douarnenez a-raog ma teuas da veza parrez ?

Visant : Ya, chapel Santez Helena hag a zo euz ar XVIved kantved, méd eun all a oa c'hoaz kalz kosoh : hini Sant Mikêl. Azaleg ar XIVved kantved e kaver ano anezi er paperiou koz.

Soazig : Chapel Sant Mikêl ? Anaoud a ran anezi. Méd n'he-deus ket an êr da veza ken koz-se !

Visant : Nann, gwir eo. An hini a weler hirio e-kichenn ar Porz-Ru he-deus kemeret plas eur chapel all kosoh, én eul leh m'edo o chom ennañ Mikêl an Noblez, bet Misioner braz Douarnenez e-pad tri bloaz warn-ugent euz 1617 da 1639. Euz hanter ar XVIved kantved eo ar japel-ze.

Soazig : Mikêl an Noblez, prezeger braz an taolennou, evel ma vez lavaret ?

Visant : Just avad. Eñ eo e-neus bet ijinet an taolennou pe an imachou kenta evid prezeg e visionou hag ober katekiz d'an dud vraz.

Soazig : Setu abaoe neuze eo e vez kanet ar hantik-mañ :

Sellit piz ouz an taolennou,
'Zo meleour an eneou,
Hag a lavar da bep hini
Ar wirionez heb damanti.

Visant : Hirio e vije bet lavaret e-noa ijinet eur "méthode audio-visuelle". Gweled a rez n'eus netra nevez dindan an heol. Gwelet fall a oa bet da genta gand eskob Kemper ha lod euz ar veleien ablamour d'an taolennou-ze. Ha koulskoude e oa eur gavadenn gaer, hag a reas goude, gantañ ha gand an tad Maner war e lerh, tro Breiz-Izel. Padet int bet beteg ar brezel diweza zokén.

Soazig : Kompren a ran bremañ perag e vez goueliou braz e Douarnenez bep ploaz da geñver gouél-Mikêl.

Visant : Mikêl an Noblez a zo karet kenañ gand Douarneneziz. Hag evel-se ne hellont ket pedi anezañ peogwir n'ema ket c'hoaz war roll ar Zent. En e blas e pedont e baeron an Arhêl Sant Mikêl hag a zo e houél d'an 29 a viz gwengolo.

Gwaien

Soazig : Peogwir emañ gand ar porziou-mor, deom dioustu euz Douarnenez betek Gwaien.

Visant : Deom 'ta. Gwaien pe gwazienn ("cours d'eau" e galleg) eo ano ar ster a ziskenn euz Pont-e-Kroaz (pe : ar Pont) betek ar mor. Heñvelloh eo, pa vez uhel ar mor, ouz eur vreh-vor, kaer kenañ da weled, eged ouz eur ster.

Soazig : Penaoz eo deuet Gwaien da veza Audierne e galleg ?

Visant : Eun ano disheñvel krenn eo hemañ. Eur gér keltieg eo : Aod-tiern pe Aod-an-Tiern. Eun Tiern a zo eur mestr brezel, eur pennrener. Gweled a reer netra halleg én ano-ze, ha n'e-neus netra da weled gand Gwaien.

Soazig : Eur porz-mor pesketa brao-kenañ eo Gwaien, neketa !

Visant : Ya, hag abaoe pell 'zo. Er XVved kantved, Duked Breiz o-doa eno uzinou da zehi ha da zalla pesked, a weze gwerzet da Vro-Flandrez, Bro-Zaoz ha Spagn, hag e meur a gorn euz Bro-Hall.

Soazig : Ha war am-eus lennet, ar batimañchou a ree ar homers-se a zigaze ganto én-dro, euz Bourdel, hag an Naoned, gwin, greun, ispisèrèz, rousin ha traou all.

Visant : Ar zardined a badas e Gwaien betek penn kenta ar hantved-mañ. Beteg eur hant-hanter a vagou a veze gwelet o tegas pesked a beb seurt da borz-mor Gwaien. Méd da heul Kamaled ha Douarnenez, Gwaien en em laka ivez da besketa ligistri, grilled ha kevnid-mor. Kranked ivez, evel-just. E vatimañchou, reñket evid-se, a veze gwelet war aochou ar Portugal, Maoritania, Marok, Bro-Zaoz ha Bro-Iwerzon.

Soazig : Pa lavarer Gwaien eo red ivez soñjal e Poulgoazeg hag e Plouhineg én tu all d'ar porz !

Visant : A-dra-zur ! rag an darnvuia euz ar besketêrien a zo o chom e Poulgoazeg hag ivez e Plouhineg. Evel e Douarnenez e kaver amañ kalz uzinou-koñserv pe frituriou da lakaad pesked e koñserv.

Pont-e-Kroaz

Soazig : Euz Douarnenez da Waien on-eus lezet a-gostez ar Pont, pe Pont-e-Kroaz. Eun iliz kaer a zo eno hag a dalvez beza gwelet : iliz Intron Varia Roskudon. Me 'anavez mad anezi peogwir on bet eno oh ober skol e-pad eur pennad.

Visant : Ar Pont, gwir eo, a rankom da weled. Distroom neuze war or giz. Amañ ez eus bet arzourien vad gwechall, kizellerien euz an dibab hag a zo roud o hizell war meur a iliz hag a japel diwar-dro, evel Mahalon, Intron-Varia Goñforz, ha dreist-oll Intron-Varia Gerineg e Poullan.

Soazig : Intron-Varia Gerineg ! Pebez braoig e-touez eur blokad gwéz. Ne anavezan netra kaerroh. Euz an daouzegved kantved eo al lodenn gosa anezi, mar deo gwir ar pezh am-eus klevet.

Visant : Ya, er memez oad eo gand al lodenn gosa euz iliz ar Pont. Mar deo Kerineg eur braoig, Intron-Varia Roskudon a zo eur mellad perlezenn, a zav bég he zour d'an neñv, evel eur bedenn o toulla an oabl.

Soazig : Touriou iliz-veur Kemper a zo bet savet diwar ar skwér anezañ, hervez an istor.

Visant : Eun istor ha n'eo ket koz, peogwir touriou Kemper n'int nemed euz hanter ar hantved diweza.

Soazig : Méd tour Intron-Varia Roskudon a zo kalz kosoh ?

Visant : Souezuz eo nag a ilizou pe japeliou a gaver war-dro amañ én enor d'ar Werhez ! ha ken tost all an eil d'ebén. Ha pep hini anezo a zache gwechall berniou pardonerien.

Visant : E Koñforz e weler c'hoaz eur park braz pe eur blasenn e-kichenn an iliz, gwéz braz én-dro dezi, hag a zerviche d'ar belerined. E Kerineg e oa eun ospital evid degemer ar re glañv. Hag er Pont, pebez mellad plasenn a gaver ivez e-kreiz ar bourk !

Soazig : Méd ar plasennou-ze ne oant ket hepken evid ar bardonerien.

Visant : Nann ! gouzoud a reer e veze ivez atao foariou braz war-lerh ar pardonien hag a ranke kaoud kalz a blas, hag ar foariou-ze, peurvuia, a veze eur binvidigez evid an ilizou a zeue drezo da veza kaerroh-kaerra.

Ar Hap-Sizun

Soazig : Goude beza gwelet ar Pont, kêrbenn ar Hap-Sizun, gwella on-eus d'ober eo mond d'ober eun droiad penn-da-benn d'an aot

Visant : Ya, deom 'ta ! Eur vro zouezuz eo houmañ, disheñvel mad diouz ar horniou all euz Breiz-Izel. Brezoneg an dud amañ a zo tostig a-walh da vrezoneg Bro-Leon. Geriou o-deus avad hag a zo dezo o-unan evel ar gér "hervoa" da lavared hirio.

Soazig : Tremen a raim dre barrez Beuzeg, Goulien, Kleden ha Plogoñ. Houmañ eo ar barrez diweza, an hini a zo e Bég-ar-Raz. Patron Beuzeg eo Sant Budog, mab Santez Azenor, hag hini Plogoñ eo Sant Ke.

Visant : Gouzoud a rez eo ivez Sant Ke patron Kleder, va farrez din. Euz Beuzeg da Gleder, an aot a zo meineg hag uhel kenañ a-wechou, kamm-digamm evel dent eun heskenn.

Soazig : Diustu goude Beuzeg e kaver eul leh dudiuz a-zioh ar mor, evel eur mellad roh goloet a leton glaz.

Visant : Hag al leh a zo anvet Kastell-koz. Konta 'reer e oa eno en amzer ar Gelted koz eur hastell-divenn. Gweled a reer c'hoaz roudou euz peulvanou pe meinhir ha taoliou-mein diskaret, ar peza a ziskouez ez eus bet tud o chom eno abaoe mill bell 'zo.

Soazig : Ar re o-deus bet savet ar peulvanou-ze a oa Kelted eveldom ?

Visant : Ne oant ket ! Eur bobl all e oant, kalz kosoh eged ar Gelted, a gaver roud anezi pevar pe pemp mil bloaz a-raog Jezuz-Krist : Pobl an taoliou-mein a vez greet anezo. Dre an Europ a-béz koulz lavared, o-deus bet tremenet. Sur a-walh e oa braz an niver anezo er Morbihan rag eno eo e kaver ar brasa peulvanou ha taoliou-mein, war-dro Karnag, dreist-oll.

Soazig : Eur bobl kreñv e tlee beza bet evid beza savet kemend a vein vraz .

Visant : Ha dén e-béd ne oar mad hirio c'hoaz perag ha penaoz o-deus bet savet ar vein-ze. Marteze én enor d'an heol.

Bég ar Van

Soazig : Klevet am-eus bet ahanoh o lavared e kaver e Goulien, eur hloh koz-kenañ evel hini Lokorn, bet da Zant Goulhen.

Visant : Ya, evel hini Sant Ronan, eur hloh da zeni gand an dorn. Bez' e tle beza euz ar Vived kantved. Sant Goulhen eo patron parrez Goulien evel m'eo patron Goulhen e Bro-Leon.

Soazig : E Kleden ema Bég-ar-Van. Ha ma 'z afem di a-raog mond da Vég-ar-Raz ?

Visant : Deom 'ta ! Bég-ar-Van n'eo ket ken anavezet ha Bég-ar-Raz. Din e plij muioh avad. A-raog erruoud, sellom ouz dismantrou tiéz koz bet savet gand ar Romaned. Kavet eo bet an dismantrou-ze én eur doulla an douar : mogeriou mein mañsonet brao, ha priachou ivez a beb seurt.

Soazig : Lavared a reer eo bet ar vro-mañ pevar-hant vloaz bennag dindan galloud ar Romaned. Souezuz e vije chomet ken nebeud all a draou war o lerh !

Visant : Nebeud a dra, e gwirionez ; diazevou mogeriou koz, priachou, delwennou pe statuiou bihan, gwenneien, braoigou. Kazarniou soudarded eo o-doa war-dro amañ kentoh, karget da zerhel urz vad er vro. Karaez a oa o hêrbenn e Breiz-Izel. Ahano ez ee seiz hent pe seiz strêd war-zu ar pevar avel, pavezet lod anezo ha ledan atao. Gweled a reer tammou anezo c'hoaz amañ hag a-hont war or mêziou. Unan dre Zouarnenez, a zeue beteg amañ, al leh-mañ anvet Trou-gêr pe Traoñ ar gêr e-giz ma' z eus Plougêr e-kichenn Karaez.

Soazig : Al leh a zo dispar ! Gand chapel Sant Tei a-hont izelloh gand he hroaz hag he feunteun.

Visant : Diêz eo kavoud eul leh ken kaer, ken fromuz. Sell ouz ar reier braz spontuz a zo aze. Sell ouz ar mor én traoñ toud, eoneg atao ! D'an hañv e vez an tevinier dre-oll livet kaer a vleuniou, lann ha brug. Netra kaerroh ! Kan din 'ta neuze :

O Breiz-Izel, O kaerra bro !

Soazig :

O Breiz-Izel, O kaerra Bro !

En da enor, me 'gano.

Lon-la-no lon-la

En da enor, me 'gano.

Me 'gar ar mor, ar mor dispar !

Me 'gar ar mor, ar mor dispar !

A ra an dro d'az touar.

Lon-la-no lon-la

A ra an dro d'az touar.

Bae-an-Avon

Soazig : A-walh on-eus lavaret diwar-benn Bég-ar-Van. Deom bremañ da Vég-ar-Raz én eur dreuzi Bae-an-Anaon.

Visant : Bae-an-Anaon ! setu aze eun ano hag a ra din c'hoarzin atao. Pebez faltazi !

Soazig : Koulskoude, an Anaon ne dlefent lakaad dén e-béd da hoarzin. Da veza trist ne lavaran ket !

Visant : Méd n'eus ket amañ Anaon, hini ebéd ! n'eus nemed eun droidigez fall euz gwir ano an aot-se hag a oa Bae-an-Avon. Ar gêr Avon pe Aven a zinifi Ster. Evel-se e kaver Ster-Aon e Kastellin, ha Pont-Aven e-giz ano kêr, da lavared eo : eur pont war ar ster anvet Aven. An aven, troet fall, a zo deuet da veza Anaon ha setu toud.

Soazig : Petra da zoñjal neuze euz an oll gontadennoù skrijusoh an eil eged e-bén, a gonter diwar-benn ar plég-mor-ze ?

Visant : Kontadennoù goullou ha netra ken ! ne vez ket kavet amañ, war an aot-mañ, muioh a gervou beuzet eged war an aochou all. Gweled a rez ez eus eur sterig o ruill he dour war an drêzenn pe an aot-mañ. Bez' e heller ober anezi eta Bae-an-Avon. Méd an Avon-ze a zo bet kalz brasoh gwechall.

Soazig : Bég-ar-Raz, Bég-ar-Van ! E Kerne "bég" a zinifi genou Méd n'eus genou e-béd amañ !

Visant : Nann sur ! Ar hontrol eo ! Eur vreh kentoh eo a zo, eur vreh-zouar, eur penn. Amañ eo ema Penn an douar, penn ar béd. Pelloh n'eus netra nemed dour ha dour atao beteg an Amerik.

Soazig : Hag ar gériou Raz ha Van, petra 'zinifiont ?

Visant : Eur "raz" a zo eur vreh-vor el leh ma red an dour evel én eur ster ; amañ, etre an douar braz hag an Enez-Sun. "Ban", a deu euz ar verb banna, strinka. Bez' ez eo eur bég douar evel bannet pe strinket war ar mor. Kavet e vez ivez ar gér-ze e kichenn Kastellin : Bann-Nin. E galleg "Le promontoire du Seigneur Nin". Setu aze dit eun tamm sklêrijenn diwar-benn geriou hag a gaver aliez war or hartennou douaroniez.

Bég-ar-Raz

Soazig : Setu-ni e Bég-ar-Raz On tud-koz a lavare gwechall :

Dén ne dremen ar Raz héb spont pe hloaz. Setu perag e kasent ar bedenn-mañ da Zoue :

Va Doue, va zikourit da dremen ar Raz

Rag va bag a zo bihan hag ar mor a zo braz.

Visant : Ahann ne weler dirazom nemed reier ha mor e kounnar, dreist-oll d'ar mare-mañ euz ar bloaz. Ar mor a zo pevar-ugent metr izelloh egedom, e traoñ ar reier a welez, ha du-hont, er pellder, ema Enez-Sun, pe Enez-Sizun.

Soazig : N'eus forz da be vare euz ar bloaz, e c'hwez kreñv an avel amañ atao, n'eus forz euz peleh e teu. C'hwi a lavare e plij muioh deoh Bég-ar-Van. N'on ket souezet. An oll staliou traouachou a beb seurt a zo bet savet aze, n'int ket gwall v Rao da weled.

Visant : Gwelloh e vije bet o derhel pell diouz amañ, a-dra-zur. Méd petra 'fell dit ! el leh ma teu tud a-verniou eh erru ivez dioustu marhadourien a beb seurt, brein gand ar c'hoant gounid arhant.

Soazig : Gwelloh e kavan selled ouz ar statu pe an delwenn vraz a zo aze ! fromuz kenañ eo ar Werhez da weled gand he mabig Jezuz o kinnig e zorn d'eur paour-kêz martolod kouezet er mor. C'hwi anavez istor ar monumant-se ?

Visant : Ar werhez eo Intron Varia an dud a vor. Kizellet eo bet gand eun arzour braz : Gedebecky, én eñvor d'e vab marvet en Tonkin. Kinniget eo bet gantañ da eskob Kemper, an Aotrou Dubillard, evid beza lakeet amañ. Benniget eo bet er bloaz 1904 gand ar hardinal Labouré.

Soazig : Deom bremañ beteg ar reier braz a zo er bég. Gweled a ran tud oh ober dezo an dro. Me am-bije aon oh ober kemend all !

Visant : Me am-eus greet eur wech an dro-ze. Dañjeruz a-walh eo, koulskoude. Béb an amzer, kaer 'zo teuler evez, ez a unan bennag war e benn er mor. Kee 'ta da houde d'e glask ! Lonket eo dija gand ar raz.

Soazig : A-walh eo ! ne din ket pelloh N'on ket souezet bremañ e lavarfe a re goz :

Dén ne dremen ar Raz

Héb spont pe hloaz

Enez-Sun

Soazig : Dirazom 'ta, neuze, ema Enez-Sun ! Gwelet mad e vez du-hont, pelloh eged ar reier garo hag ar mor gwenn a-veh uhelloh eged an dour.

Visant : Enez-Sun, ya ! Enez-Sizun, pe Enez-ar-seiz-hun, ar seiz kousk a lavar lod. Nag a draou a zo bet kontet diwarbenni ! traou gwir ha traou faltaziuz Traou kaer ha traou divalo ivez !

Soazig : Abaoe ar film "Dieu a besoin des hommes" eo eet ar vrud anezi beteg penn pella ar bed. Abaoe ar brezel diweza. Ha c'hwi 'zo bet eur wech bennag én Enez-Sun ?

Visant : Ya, eur wech on bet. Kemeret am-boia ar vag e Bestre. Ar mor a oa fall, ha me 'lavar dit e oam bet oll hejet kenañ gantañ ! méd n'oan ket bet klañv evel kalz a re all. Gellet am-boia selled mad ouz an douar-braz keit ha ma pellaem dioutañ. En-dro d'ar berniou reier, ar mor a eonenne, a verve ! Diskenn or-boia greet e porzig mor an Enezenn el leh ma oa kalzig a dud o selled ouzom.

Soazig : Ha petra ho-peus gwelet en Enez ?

Visant : Skoet e oan bet o weled pegen stank e oa an tiéz, pegen moan ar ruiou, ha pegen bihan ar parkeier war ar mêz, kleuziou mein berniet én-dro dezo. An heñchou n'int nemed ribouliou, rag n'eus oto e-béd en ezezenn.

Soazig : Pegement a dud a zo enni o chom, ha penaoz e vevont ?

Visant : Eun eiz kant bennag Eun tammig muioh evel-just e-pad an hañv. Ar wazed a vez o pesketa. Méd ar merhed eo a labour an douar hag a zastum ar bezin war an aot, hag a zervij dezo da drempa o farkeier. N'eus ket keit-se e vezent devet hag al ludu anezo gwerzet evid ober "teinture d'iode".

Soazig : Klevet am-eus eo tud Enez-Sun kanerien dispar.

Visant : Evid ar han iliz n'eus ket par dezo. Kana a reont pe kana 'reent, dindan eñvor, latin ha brezoneg. En o iliz e kaver an hirra skrid brezoneg a heller lenn, kizellet er vein. Lavared a ra : *An iliz-mañ a zo bet savet gand aluzenn an dud vad ha labour denn ar barrezioniz. Ar wazed o-deus tennet ar vein, hag ar merhed o-deus o douget war o fenn beteg amañ. Rag-se e vezo gwir e peb amzer : Kement mên, kement greunenn sabl a zo er mogerioù a zo bet lakeet gand kristenien ar barrez (d'ar 5 a viz meurz 1901)*

Ar marh ourgouill

Visant : Goude beza gwelet Bro ar Hap-Sizun, gwella on-eus d'ober eo mond d'ar Vro-Vigoudenn. N'emaom ket pell diouti.

Soazig : Nann avad ! Bro ar Marh Ourgouill eo pe Marh an Ourgouill. N'ouzon ket re vad penaoz lavared e brezoneg "Le cheval d'orgueil". Gouzoud a rit, al levr-se ken brudet, savet gand Pèr-Jakez Heliáz. Feiz ! eur marh hag a oar daoulammad. N'ouzon ket beteg peleh ez aio a-benn ar fin ! An oll a zo sod gantañ !

Visant : Ha koulskoude n'ez eus èl levr-se nemed traou koz. Traou hag am-eus bevet, koulz ha te, moarvad, ha padal e lavarer c'hoaz hirio ne vez greet nemed fae war an amzer dremenet, ar gizioù koz, ar boued a-wechall, ar brezoneg.

Soazig : Ar yaouankizou a-vremañ a zeblant, er hontrol, beza eet skuiz gand ar vuhez vodern. Ken leun eo o hov gand ar vuhez-se, ma ne gavont ket mui blaz e-béd ganti.

Visant : Blaz e-béd ! inouamant hag heug zokén a-wechou. Euz peb tra o-deus tañvet, plijadurioù hag all. An amzer da zond a ra aon dezo. Setu ma troont o zellou ouz amzer o zadou-koz. Levr Pèr-Jakez a zo ennañ just ar pezh a glaskont, setu perag e lammont warnañ gand kemend a vall.

Soazig : Krogom neuze gand on droiad er Vro-Vigoudenn dre Bouldreuzig. Me a zo sur e vo kalz touristed o tond di én hañv a zeu da glask roudou ar Marh-Ourgouill.

Visant : Evel Pèr-Jakez am-eus dalhet eur zoñj vad-kenañ euz amzer va bugaleach. Sur on, va nized vihan a hirio n'o-deus ket muioh a blijadur gand o zraouérez Nedeleg eged n'am-boa-me gand va Mabig-Jezuz sukr ha va houign rouantèlèz, pe va daou wenneg toull da zeiz kenta 'r bloaz ! Nag an tele zokén ne ra ket dezo kement a ziduamant ha m'am-boa-me o selaou kontadennou Korn an oaled dirag an tan lann o sevel er ziminal du. Paour e oan, marteze, méd eüruz ha dizoursi.

Soazig : Kana 'heller neuze e gwirionez :

Dindan ar zoul én eul lochenn

Ar paour a hell c'hoarzin laouen !

Pe c'hoaz :

N'on ket pinvidig, n'on ket paour,

Méd din eürusted a dalv aour.

Visant : Hag an eürusted er béd-mañ n'eo ket ar binvidigez eo, méd kontantamant ar galon.

Poulldreuzig

Soazig : Pouldreuzig eo ivez parrez Intron Varia Pennorz, Gwerhez kurunet ar Vro-Vigoudenn evel m'eo Rumengol, ar Folgoad, ar Porzou ha Kernitron. Ar pardon braz a zo er memez deiz gand ar Folgoad : d'an eiz a viz gwengolo, eun deiz santel mar deus unan !

Visant : Hirio avad, ne vez ket lidet ar pardon nemed d'ar zul a-raog pe war-lerh. Anaoud a rez kantik kaer Intron Varia Pennhorz ? Kan anezañ neuze :

Soazig :

Etre Pennmarh ha Bég-ar-Raz
Zo savet e plég ar mor braz
Eur chapelig euz ar vraoa,
Evidoh, Intron Varia.

Visant : Ha gouzoud a rez gand piou eo bet savet ar hantik-se ? Ton ha son ?

Soazig : N'ouzon ket avad !

Visant : Gand va henvroad an Aotrou Gwilliou. Person e oa neuze e Pennmarh Savet eo bet gantañ én eur vond d'ar pardon war e droad dre an aot. Ha dre ma save an ton hag ar zon, én eur zelaou ar mor én e gichenn, e lavare d'e vatez a oa gantañ : « Lavarit din 'ta Marijan ha plijoud a ra deoh ? » Hag e responte houmañ : « Ya, brao eo ! brao da gleved evel ar mor o c'hoari war an trêz gwenn pe gand ar bili ront. »

Soazig : Luskellèrèz ar mor e gwirionez a glever er hantik-se. Ha koz eo chapel Intron Varia Pennorz ?

Visant : Al lodenn gosa anezi a zo euz amzer iliz vraz ar Pont hag Intron Varia Gerineg e Poullan. Evel-just eo bet nevezet ha kresket meur a wech abaoe.

Soazig : N'on bet morse e pardon Intron Varia Bennorz. Ha c'hwi ?

Visant : Me a zo bet. Eur pennadig mad 'zo abaoe. Neuze e oa eun dudi gweled niver ar merhed ganto c'hoaz o hoefou uhel. Diapozitivou a jom ganin da zougen testeni a gement-se. A-hend-all eo heñvel a-walh ar pardon ouz an oll bardoniou braz all. Kalz kaerroh e oa neuze avad al lidou sakr. Brasoh ivez devosion an dud. En eur vodernnaad re al lidou santel eo bet brallet devosion ha karantez ar gristenien evid ar relijion. Amañ ivez e santer ar c'hoant da zistrei d'ar hantikou pe da vihanna d'an toniou anavezet a-bell. Hag ar brosesion 'ta, a-héd an aot, pegen kaer e oa da weled keit ha ma kane an oll ar hantikou koz.

Soazig : N'on-eus ket echu c'hoaz gand ar Vro-Vigoudenn ?

Visant : Nann, na tost ! e peb parrez or-bije eun dra bennag da weled. E Plovan ema dismantrou kaer iliz Langidou. Mantruz e kavan e vije bet lezet ar japel-ze da goueza en he foull.

Soazig : Ha pelloh ema Ploneour-Lanvern, hag ivez dismantrou iliz koz Langivoa, gand he zour bet diskaret gand Loeiz ar pevarzeg da-geñver Dispah ar Bonedou ruz.

Visant : Méd lezom ar parrezioù-ze ha deom dre Zant Yann beteg Tronoan. Eno or-bo eur bern traou da weled.

Soazig : A ! ya ! eur halvar braz, koz-kenañ hag eur japel gaer én e-gichenn.

Visant : Just avad ! ar halvar braz kosa a zo e Breiz-Izel eo, savet e mein greun tri mil uzet gand an amzer. War-dro ar bloaz 1450 e tle beza bet savet. Kavet e vez ennañ skeudennou ha n'emaint e nebleh all e-béd evel gwéz bihan al liorz olived, re bar da gabellou touseg.

Soazig : Eul leh digenvez eo Tronoan. Penaoz 'ta e vije bet savet eno eur monumant ken talvouduz, hag eur japel ken brao ?

Visant : Al leh-se, sur a-walh, a oa dija eul leh santel, eul leh a belerinaj pell araog an Aotrou Krist. Peb tra hen diskouez : an aoter er japel n'eo nemed ar peulvan, pe ar menhir a oa eno a-raog amzer ar gristenien. Kredi a ran eo an hirra mên aoter a gaver er chapelioù : pemp metr hanter a hirder e-neus.

Soazig : Gwir eo ivez ez eus bet kavet, tostig a-walh da Dronoan, eur vered koz, gand milieroù a eskern tud koñservet mad ?

Visant : Ya. E Sant-Urnel hag e Kerviltre. Hag e-mesk an eskern-ze, braoigou euz ar re gaerra, én arhant hag én aour euz amzer ar Gelted koz hag ar Romaned.

Soazig : Ouz peseurt parrez eo stag chapel ha kalvar Tronoan ?

Visant : Bremañ ouz parrez Sant-Yann-Trolimon, méd gwechall e oa eun dreo euz parrez vraz Kap-Kaval, deuet da veza parrez Pleur pe Plomeur. Klask a reer savetei ar pezh a jom euz iliz koz Kap-Kaval. Talvezoud a ra ar boan, rei buhez d'eur gêriadenn hag a zo bet ken talvouduz gwechall. Gouzoud a rez eo deuet ar gerioù-ze : kap : penn, kaval : marh, da veza hirio Pennmarh

Soazig : Kap-Sizun, Kap-Kaval, Pennmarh ! setu gerioù êz kenañ da gompren pa zoñjer mad.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Bég-an-Dorchenn

Soazig : Da beleh ez aim bremañ euz Tronoan ?

Visant : Gwella on-eus d'ober eo heulia an aot beteg Bég-an-Dorchenn, a reer anezañ e galleg : "La pointe de la torche". Eun droidigez fall adarre, rag eun dorchenn a zo e galleg : "un coussin", ha nann "une torche".

Soazig : Souezuz eo memez tra, ar vogeriad bili-mor, a-héd an aot, etre Tronoan ha Bég-an-dorchenn. Eur pez trouz a reont pa lamm warno an tarziou-mor. Ruill a reont, bern-war-vern, en eur storlokad evel ar gurun. Euz peleh eo deuet ar bili-ze ?

Visant : Ruillet int bet beteg aze, gand ar mor euz a bell kenañ, war a gonter, rag n'eus ket a zanvez mein evel-se er reier a gaver tro-dro da vro ar Vigoudenned. Parrez Tregenneg gand he diou iliz eo en em léd penn-da-benn d'ar voger vili-ze. Kavoud a reer eno ivez chapel Sant Vig, anvet Sant Noug a Leon. Kollet eo ar japel-ze evel én eur goueleh alaouret he hein gand ar hinvi. Laouer ar Zant a gaver atao én he hichenn.

Soazig : Setu-ni, erfin, erruet e Bég-an-Dorchenn. Kaer dispar ha gouez kenañ eo al leh. An tarziou mor, penn-da-benn d'an aot, a zo eun dudi selled outo. Emaint evel kezeg gwenn o taoulammad, o moue o nijal én avel.

Visant : Bég-an-Dorchenn, evel a welez, n'eo nemed eur bern braz a reier. Ar roh uhella a zo heñvel a-walh ouz penn eun dén. En he hichenn, sell ! ez eus peulvanou ha taoliou-mein diskaret. Kavet ez eus bet amañ zoken roud euz eur boblad tud, kalz kosoh eged an taoliou-mein. Restachou kegin chomet war o lerh hen diskouez.

Soazig : Gweled a ran eo dañjeruz al leh !

Visant : Ya, rag dond a hell euz an donvor gwagennou braz hag a hell dibrada, en eun taol, ar re a ziskenn re dost d'an dour. Beuzet ez eus bet evel-se, én amzer dremenet, meur a zén re zievez. Eur famill a-béz, zoken, a zo bet sammet evel-se gand ar mor.

Soazig : Gwelet am-eus én eur zond, parkajou trêz labouret brao. Petra 'hounezer enno ?

Visant : Kroget eur, nevez 'zo, da hounid amañ bleuniou tulip a vez gwerzet o ognon da vro Holland. Eur binvidigez nevez evid al labourerien-douar.

Tour-tan Eckmühl

Soazig : Setu tour-tan Eckmühl dirazom. Evid gweled mad ar Vro-Vigoudenn, netra gwelloc'h eged pignad én e vég.

Visant : Ma karez avañ ! N'eo ket ken diêz. Méd arabad beza gand ar hleñved-
kalon, rag tri-hant seiz skalier pe derez a zo da zevel. Greet eo an diri-ze evel
eun viñs. An tour e-neus pevar metr ha tri-ugent a uhelder.

Soazig : Perag eo bet roet dezañ an ano a Eckmühl ?

Visant : Savet e oa bet dre largetez merh ar priñs a Eckmühl er bloaz 1897, da
rei sklêrijenn d'an dud a vor.

Soazig : Hag e hell kas e sklêrijenn da begeid ?

Visant : N'eus ket nerzusoh tour-tan egetañ er bed. Skuba 'ra an noz du gand e
daoliou balaenn sklêrijenn beteg kant kilometr tro pa vez sklêr an amzer. E nerz
a zo par da hweh milion a voujiennou.

Soazig : Biskoaz kemend all ! C'hweh milion a voujiennou !!! Pignom neuze
beteg ar bég dre an diri korvigellet.

Visant : Gwall skuiz om bet o pignad ! Euz ar bég, sellom bremañ ouz ar vro
tro-dro. En-dro deom eur gompezenn vraz a-veh uhelloc'h eged ar mor : Bro
Bennmarh, Kap-Kaval gwechall d'ar mare ma oa parrez Pennmarh anvet
Treoul-tre. Dre-oll ne weler nemed tiéz. Stank ivez ar parrezioù : Sant-Gwénolé,
Pennmarh, ar Gelvenneg, Lechiegad, Triegad, Pleur. Pelloh emañ Pornaleg,
Leskonil, Loktudi, Pont'n-Abad hag én tu all Tregenneg, Sant Yann, Treogad,
Plovan, Pouldreuzig, ha Plozeved. Goude e teu ar vro da veza torgenneg:
Kombrid, Tremaog, Plogastell, Ploneour, ha Peurid, ha setu greet ganeom tro
oll barrezioù ar Vro-Vigoudenn.

Soazig : Da dosta deom e gwirionez, ne weler nemeur a wez hag ar re a zo n'o-
deus bodou koulz lavared, nemed diouz eun tu.

Visant : Én tu eneb d'an avel. Hag an avel-ze, peurluvia, a hwez kreñv euz ar
mor, peogwir ne gav netra war e hent da derri dezañ e nerz.

Soazig : Bro an avel eo houmañ ! Ar pezh na vir ket ouz ar merhed da lakaad
war o fenn an uhella koefou a zo e Breiz evel ma vije bet evid diskouez ne reont
forz e-béd euz an avel.

Visant : En deiz a hirio e tapont beteg daou santimetr ha tregont a uhelder.
Moarvad, diweza koef a varvo e Breiz a vo hini ar Vro-Vigoudenn.

Mirdi Pennmarh

Soazig : Goude eun taol lagad da weled penaoz ema ar vro, me 'garfe ivez gouzoud eun dra bennag euz an amzeriou kosa.

Visant : Deom neuze d'ar mirdi pe d'ar "musée" e Porz-Karn. Ema aze tost. Plijuz ha kenteliuz braz eo da weled.

Soazig : Emaom dirazañ. Méd ne welim nemed an diavêz, rag ne vez digor nemed e-pad an hañv. A-walh a draou avad a zo da weled er memez tra. Sellit nag a vein koz ! Euz peleh e teuont ?

Visant : Kavet int bet er Vro-Vigoudenn. Ar peulvanou, ar hromlehiou, an taoliou-mein a oa niveruz-kenañ gwechall er vro-mañ evel e Karnag én amzer hirio. Distrujet ez eus bet, siwaz, kantchou anezo. Koulikoude, chom a ra c'hoaz eun tammig mad. Ar haerra peulvan eo menhir Kerskavenn, e-kichenn bourh Pennmarh. Ar peulvanou kizellet a weler aze avad, a zo euz amzer ar Gelted. Anvet int bet e galleg : "Stèles gauloises".

Soazig : Petra 'zo da weled neuze en diabarz ?

Visant : A-beb seurt traou koz. Méd eskern tud dreist-oll.

Soazig : Eskern tud ! eur garnel eo neuze ?

Visant : N'eo ket. An eskern-ze a zo bet dizoloet tostig amañ, e Sant-Urnel, e Roz-an-Tremen, e Kerviltre. Gwelet e vezont er mirdi, koñservet brao, astennet evel én o beziou, daou-ha-daou, gwaz ha gwrég én eur gichenn. An dachennad trêz el leh m'int bet kavet, da lavared eo Sant-Urnel ha tro-war-dro, he-deus eun ugent devez-arad bennag. Hervez an Aotrou Nedeleg, en e levr diwar-benn chapel Treminou, e vije beziet eno ouspenn kant mil a gorfou maro.

Soazig : Perag an dra-ze, hag a beleh int deuet ?

Visant : Diêz a-walh eo gouzoud. Hervez an Aotrou Nedeleg, ar re gosa a dle beza Kelted. Arabad dizoñjal emaom amañ e bro ar Huz-Heol hag evid ar Gelted, Bro ar Yaouankiz peurbaduz, el leh ma ya an eneoù goude ar maro, a zo du-hont, én tu all d'an douar, don-don er mor, el leh ma kuz an heol. Ar horvou a zo chomet amañ. An eneoù a zo eet pelloh da Enez ar Yaouankiz. Tronoan a zo e-kichenn ha dalhom soñj ivez e oa al leh-se eul leh santel a-raog amzer ar Gristenien.

Soazig : Komzet ho-peus euz al leh-se anvet Sant-Urnel. Eur Zant Breizad eo hennez ?

Visant : Ha setu eur mister all ! Goulenn a reer ouzor an-unan ha n'eo ket an ano-ze eun distresadur euz ar gér latin Saturn a oa evid ar Romaned tad an Doueou. Méd pe ano a veze roet d'al leh-se a-raog amzer ar Romaned ? Setu ar pezh a rofe deom eun tamm sklêrijenn muioh hag a vefe mad da houzoud.

Pennmarh

Soazig : Pegement a dud a zo o chom e Pennmarh ha tro-war-dro én amzer hirio ?

Visant : Etre Pennmarh, Keriti ha Sant Gwenole ez eus war-dro seiz mil a dud. War a gonter ez eus bet kalz muioh gwechall-goz. Beteg pevarzeg mil a zo bet er pemzegved kantved. Méd nebeutoh a zo bet ivez peogwir e mil eiz kant daou (triweh kant daou) (1802) ne oa nemed nao hant.

Soazig : Petra 'zo bet kaoz d'an diskar spontuz-se ?

Visant : Er c'hwezegved kantved, ar besketêrèz a oa mad-kenañ e Bro-Bennmarh. Ano 'zo, er skridou koz, euz pemp kant bag pesketa er memez amzer. Méd er bloaz mil c'hweh kant pemzeg ha pevar-ugent (c'hwezeg kant pemzeg ha pevar-ugent) (1695) e tirollas war ar vro, dre vor, o tond euz enezenn Tristan e Douarnenez, ar forban braz Fontanella, gand e vandenn soudarded. Komzet on-eus dija euz hemañ ha gouzoud a reom piou eo. Laza, devi, distruja a reas ha laerez peb tra, bagou hag all, da gas gantañ d'e enezenn. Pennmarh a oa rivinet ha ne zeuas morse a-benn d'en em zével.

Soazig : Hirio, koulskoude, ar vro he-deus an êr da veza pinvidig a-walh !

Visant : Gwir eo. Ar besketêrèz adarre hag al labour douar o-deus degaset êzant a-walh er vro. Porziou-mor Sant Gwenole, Keriti, Leskonil ha Loktudi, ha dreist-oll ar Gelveneg, a zo beo-kenañ hag a labour kalz. Ar porz diwezamañ a zo eet war-raog én eun doare souezuz, ha kreski a ra atao. Red eo gweled ar porz, koulz hag hini Sant-Gwenole pa vez toud ar batimañchou pesketa enno gand o gwerniou. Evel koajou e vezont da weled.

Soazig : Petra 'ra da besketêrien ar Vro-Vigoudenn mond kement-se war-raog, pa 'z eus kemend a ziskar e Douarnenez ?

Visant : Danvez mad a dud a gaver eno, emichañs. Kaloneg int, dispont hag ampart war o micher, ha kaled ouz al labour. Ne harp netra outo p'o-deus lakeet en o fenn ober eun dra bennag Ar merhed, kennebeud, ne jomont ket war-lerh ! Labour a gavont én uziniou-koñserv, ha mad kenañ int ivez d'ober dantéléz, gouzoud a rez.

Soazig : Ya ! hag e kement korn euz ar Frañs e vezont kavet. En eur dreuzi ar vro am-eus gwelet eo pinvidig an douar : parkeier leun enno a drevajou a beb seurt.

Visant : Ya, kaloneg eo ivez ar beizanted. Traou a-bréd o-devez én o farkeier. An êr-vor a vir ouz ar goañv da veza re galed, setu ma lakaont avalou-douar-prim evel e Bro-Gastell-Paol, ha legumach ivez a beb seurt. Porz Loktudi, n'eus ket keit-se, a gase kalz avalou-douar nevez dre vag, er-mêz euz ar vro.

Ilizou koz Kap-Kaval

Soazig : Kalz ilizou koz a gaver er Vro-Vigoudenn. Meur a hini anezo, siwaz ! a zo gwall zismantret pe kouezet én o foull evel iliz koz Sant-Gwenole, ha ne jom anezi nemed diazez an tour braz.

Visant : Eur mell tour e tle beza bet, liou ar binvidigez warnañ. Ar bagou pesketa, kizellet er vein, koulz ha war iliz bourh Pennmarh, a ziskouez mad e teue ar binvidigez-se euz ar mor. Ken brao ha ken braz eo an iliz diweza-mañ, ma 'z eus bet greet anezi gand ar skivagner breizad Le Goffic : "Iliz-veur ar mor".

Soazig : Pehini eo oad kosa an ilizou-ze ?

Visant : Euz an unnegved kantved eo al lodennou kosa anezo. Roud a jom warno euz arzourien Pont-e-Kroaz. Eun amzer binvidig eo bet hennez p'e-neus roet deom kement a vonumañchou kaer !

Soazig : Én he haerra edo neuze parrez Beuzeg-Kap-Kaval ?

Visant : Ya. Ha brasoh e oa c'hoaz parrez Plomeur. Chom a reas da veza parrez beteg ar Revolusion vraz. Sant Gwenole ha Tronoan a oa stag outi neuze. He iliz, ha ne jom én he sav nemed eul lodenn anezi, a oa braz-kenañ ha kaer ivez, heñvel a-walh ouz chapel Treminou.

Soazig : Iliz Sant-Gwenole a zo bet adsavet én eul leh all, n'eus ket keit-se, gand an Aotrou Ricou hag a oa neuze person enni. Gwerza a reas an tiegez pe ar ferm a heritas diouz e dud evid sikour he faea. Ober a reas e-unan an tisavour, ar mañsoner, ar halvez hag an toer. Evid Keriti eo bet reñket an iliz koz, brao ha mad. Kouezet e oa én he foull. Eun dudi eo selled outi hirio.

Soazig : Meur a zant koz euz or bro o-deus staget o ano ouz douar ar vro-mañ, evel Sant Gwenole.

Visant : Ya, kavoud a reer Sant Nonna e Pennmarh, Sant Budog e Beuzeg-Kap-Kaval, Sant Tudi e Loktudi, Santez Tunvez e Pleur hag e Keriti, Sant Riagad e Triagad.

Soazig : An Intron Varia ivez he-deus he lod chapeliou. Gwelet on-eus dija Intron Varia Bennhorz, Intron Varia Dronoan. Gweled a raim ivez Intron Varia ar Sklêrded e Kombrid hag Intron Varia Garmez e Pont'n-Abad ; hag aze dirazom ema Intron ar Joa, he zreid én dour, hag a zo devosion vraz Pennmarh d'ar Werhez.

Visant : Hag ar vraoa anezo : Intron Varia Dreminou. Talvezoud a ra houmañ e komzfen hirroh diwarbenni, ar pezh a raim diwezatohig.

Gwerz Pennmarh

Visant : A-raog pellaad diouz Pennmarh e karfen klevet ahanout o kana Gwerz Pennmarh. Eur ganaouenn iskiz eo honnez, ton ha son.

Soazig : C’hwi ‘oar euz peleh e teu ? Ha petra eo ar flod-se deuet euz Bourdel hag eet da goll war reier braz Pennmarh ?

Visant : Eet da goll ablamour ma oa goulou e-kreiz an noz e iliz Pennmarh. Diêz eo gouzoud petra e oant. Bagou euz Gwaien, sur a-walh, peogwir ez eus ano, er werz, euz seiz intañvez ha seiz-ugent o vond d’an aot én eur vandenn. Méd kan anezi deom.

Soazig :

Bremañ bloaz da Zantez Katell
Sortias ar flod euz a Vourdel (bis)

Pa oent erru e-tal Pennmarh
O-devoa kavet avel a-walh (bis)

Petra ‘hoarvez gand Penmarhiz
O terhel goulou noz ‘n o iliz (bis)

Kriz e galon neb na ouelje
E-tal Pennmarh neb a vije (bis)

O wél’d ar mor braz o ruzia
Gand gwad ar gristenien (bis)

Néb a welje merhed Gwaien
O vond d’an aot én eur vandenn (bis)

Seiz intañvez ha seiz-ugent
O vond d’an aot én eur vandenn (bis)

O houl an eil digand é-bén
N’ho-peus klevet kelou va dén ? (bis)

Kelou ho tén ha va hini,
E-tal Pennmarh ‘maint o veuzi (bis)

Malloz ! malloz ! da Benmarhiz
A zalh goulou noz ‘n o iliz (bis)

‘Zalh goulou noz ‘n o ilizou,
Ma yel’ d’an aot ‘r batimañchou (bis)

Treminou

Soazig : Emaom neuze dirag chapel Intron Varia Treminou e Plomeur. Eur berlezenn, kuzet brao e-touez ar glaster. Méd an êr he-deus da veza nevez ?

Visant : Ya, an doenn, a-drugarez Doue ! an tour, evel e Tronoan ha Beuzeg-Kap-Kaval, hag ivez e chapel ar Vadalenn on-eus gwelet e-kichenn bourh Pennmarh, a zo e-kreiz an doenn. Kement-se a verk eo koz kenañ. Al lodenn-ze anezi a dle beza euz an XIIved kantved. Hag amañ adarre e kavom merk arzourien ar Pont.

Soazig : Lennet em-eus e virer eul lizer bet skivet gand ar Pab Klemant VII e 1385 da rei induljañsou da hounid d'ar re a zikourfe adsevel pe reñka chapel Intron Varia Tremoznou.

Visant : TREMOZNOU ! Ya. An ano koz eo hennez, Méd n'ouzer ket petra ziniñ na penaoz eo deuet da veza Treminou.

Soazig : Pa 'z eus eur japel ez eus ivez evel-just eur feunteun ?

Visant : Unan a zo bet, e gwirionez. Méd stanket eo bet heb gouzoud perag.

Soazig : Eur pardon braz, a gav din, a vez amañ bep ploaz d'ar bevare sul a viz gwengolo.

Visant : Just avad ! Eur bern pelerined a zeu én devez-se da Dreminou. Méd ar re n'o-deus ket a zevosion, a jom e Pont-'n-Abad, el leh ma vez an dermajied gand o hoariou a beb seurt. N'eo ket falloh e vije disparti evel-se, etre ar pardon kristen hag ar pardon sivil.

Soazig : Eun dra a zo amañ ha ne weler ket aliez : eur gador-zarmon e-harz treid eur halvar.

Soazig : Ral eo gweled an dra-ze e gwirionez. Bez' ez eus re all koulskoude, evel e Kerineg. An hini vraoa a zo e Pleuvihan (Aochou-an-Arvor). Amañ, éndro d'ar gador-zarmon-mañ, eo eh en em vodas Ar Bonedou Ruz euz pevarzeg parrez diwar-dro da zivenn o gwiriou a-eneb Loeiz ar pevarzeg. Hemañ, evid o hastiza, a grougas meur a beizant e Kombrid hag a reas diskar touriou Kombrid, Lambour, Lanvern, Langivoa ha Ploneour.

Soazig : Lod a lavar eo ablamour da ze e lakaas merhed ar Vro-Vigoudenn koefou uhel war o fenn, heñvel ouz touriou !

Visant : Ya, an dra-ze a zo bet lavaret ha skrivet. Méd ne gredan ket e vefe gwir kement-se, rag o hoefou n'int deuet da veza uhel nemed nevez 'zo.

Pont-'n-Abad

Soazig : Euz Treminou, deom war-eün bremañ da Bont-'n-Abad. Houmañ eo kêrbenn ar Vro-Vigoudenn. Eur gêr goz eo.

Visant : Eur hastell koz kentoh rag ne oa da genta nemed eur hastell. Eno edo o chom Baroned ar Pont ha ne oant ket n'eus forz piou.

Soazig : N'eo ket heb rezon, emichañs, eo bet anvet al leh-se Pont-'n-Abad ? Pont an Abad ? Méd peseurt Abad ?

Visant : Gouzoud a rez e oa eur manati gwechall-goz e Loktudi, eul leo hanter bennag euz ar Pont Mad, an Abad a oa e penn ar manati-ze eo e-neus bet savet ar pont kenta war ar ster, pe kentoh war ar vreh-vor, rag sevel a ra ar mor beteg eno, diou wech bemdez.

Soazig : Parrez Pont-'n-Abad, neuze 'ta, a zo nevez a-walh ?

Visant : Ya sur ! Beteg ar Revolusion Vraz, an tu dehou d'ar ster a oa stag ouz parrez Loktudi, hag an tu kleiz ouz Kombrid, pe kentoh a oa eun dreo euz parrez Kombrid anvet Lambour da genta dindan paeroniez Sant Jakez, a-raog dond da veza Intron Varia Lambour.

Soazig : Iliz Lambour eo an hini a weler hirio c'hoaz, dismantret siwaz ! e-kichenn ar ster ?

Visant : Ya ! Hag eun iliz vrao kenañ eo. Euz an XIIIved kantved hag ar XVved kantved e tle beza, heñvel a-walh ouz ilizou koz all ar vro. Méd deom da weled an dismantrou kaer a jom anezi c'hoaz. Beteg fin ar hantved diweza edo en he sav, nemed an tour. Hemañ, evel m'em-eus lavaret dija, a oa bet diskaret a-berz ar roue braz Loeiz ar pevarzegved.

Soazig : Evid kastiza peizanted ar Vro-Vigoudenn da veza én em zavet a-eneb d'e lezennou. Rag-se 'ta, e-keit ha ma save ar roue-meur kastell kaer Versailles e lakee freuza, e Breiz-Izel, ar pez a gaerra on-oa : on touriou dantelezet.

Visant : A-drugarez Doue n'int ket bet diskaret toud. Chom a ra c'hoaz berniou anezo, da lavared peseurt tud eo bet on tadou-koz, ha peseurt gwad nobl a rede dindan o ivinou. Tud hag a ouie labourad ar vein kaled evel ma reent, ne oant ket tud kouezet euz lost ar harr ! Pell ahano !

Baroned ar Pont

Soazig : Lavaret ho-peus ne oa ket Baroned ar Pont n'eus forz piou.

Visant : Ar pezh a zo gwir. Er seizved kantved e kaver dija roud anezo er skridou koz, hervez an istorour braz Dom Lobineau. Méd ne anavezet mad o istor nemed goude an XIved kantved.

Soazig : Eur famill hallouduz e oa eta Baroned ar Pont ?

Visant : Gallouduz-kenañ. Dre o dimeziou e oant kar da famillou brasa Breiz, ha war ar memez reñk ganto. Kas a reent kannaded da Stadou Breiz. Herve, kenta euz an ano, Baron ar Pont e penn kenta ar XIVved kantved, a zo bet unan euz ar re vrasa Ar hastell koz a welom c'hoaz hirio dirag on daoulagad a zo eur merk euz o galloud. Unan anezo e-noa e-giz gér-stur, én e ardameziou, ar gér brezoneg-mañ : "Héb chañj".

Soazig : Petra 'zo er hastell koz-se bremañ ?

Visant : An ti-kêr a zo én eul lodenn anezañ. Eur mirdi folkloreg euz ar Vro-Vigoudenn a gaver ivez e-barz. Kenteliuz braz da weled ha gweladennet e vez bep ploaz gand kalz touristed.

Soazig : Unan euz Baroned ar Pont, war am-eus lennet, eo a reas d'an Tadou Urz Karmez dond da Bont-'n-Abad. Abaoe ez eus pell !

Visant : Er bloaz 1383, Herve, trede euz an ano, hag e wreg Paronella, a zavas amañ eur manati evito : Intron Varia Garmez. Iliz an Tadou-ze eo a zo deuet da veza iliz parrez goude ar Revolusion Vraz. Méd deom d'he gweled.

Soazig : Kaer-kenañ eo méd disheñvel diouz an ilizou all on-eus gwelet. En tu dehou n'eus prenest e-béd. Eur mell moger nemetken.

Visant : Én tu all d'ar voger-ze edo ar gouent. Méd sell ouz ar prenest a zo a-dreñv an aoter vraz, heñvel eo ouz eur mell rod dantelezet. N'eus ket kaerroh rod én eskopti a-béz, nemed marteze er Folgoad hag e iliz-veur Kastell-Paol.

Soazig : Feiz ! lorch a hell beza e tud Pont-'n-Abad gand eur berlezenn ken dispar ! Méd an tour a zo e-kichenn an iliz ne blij ket kement-se din. N'eo ket eun tour mein dantelezet evel on touriou-all.

Visant : Nann, rag an tour-ze n'eo ket bet greet da genta evid beza eun tour iliz parrez. Setu perag, moarvad eo eun tour koad toet gand mein glaz.

Loktudi

Soazig : Ano 'zo bet ganeoh meur a wech euz Loktudi. Eno eo ema, moarvad, kosa roudou kristen ar Vro-Vigoudenn ?

Visant : Ya. Evel ma lavar an ano, eno eo e savas Sant Tudi e vanati. Diskibl e oa hemañ, war a greder, da Zant Kaorantin pe da Zant Vaodez, war-dro ar Vived kantved. Beva a reas da genta e-giz ermit en enezenn a zoug c'hoaz e ano : Enez-Tudi. Méd houmañ n'eo ket mui eun enezenn. An trêz, poulzet gand ar mor, o-deus staget anezi ouz Kombrid.

Soazig : Méd chom a ra eun enezenn all e-kichenn hag a vez greet anezi hirio e galleg : "L'île Chevalier". Perag ?

Visant : Ar re goz a ree anezi da genta : Enez Marh hag ivez Enez Sant Mark. Eno, emezo, e oa gwechall eur hastell d'ar roue Marh hag eur japel da Zant Mark. D'ar mare-ze, an daou hér-mañ a veze skrivet er memez mod : March Setu ma 'z int bet kemeret an eil evid egile. E Landevenneg, a-raog an dégved kantved, e komañsamant Aviel Sant Mark, e kaver an avieler-mañ dindan skeudenn penn eur marh.

Soazig : Lavared a reer ouspenn e vije bet savet ar hastell koz-se gand Duked Breiz, a zeue di da jom e-pad an hañv, evid diskuiza ha kemer an êr-vor.

Visant : A hellfe ivez beza gwir, marteze. Pep hini a gredo ar pez a garo. Ar pez a zo sur avad, eo e savas Sant Tudi e vanati el leh m'ema bremañ iliz Loktudi.

Soazig : An iliz-se, koulskoude, pa zeller outi en eur erruoud, ne lavarfed ket e vije ken koz-se !

Visant : Gwir eo. Ar pez a weler da genta n'eo na koz na kaer. Divalo ne lavaran ket ! Méd deom en diabarz. Pebez cheñchamant, neketa ?

Soazig : Ya 'vad ! Eun dudi ! an arz roman en e gaerra !

Visant : Sell ouz ar pilierou-ze. Sell ouz o zreid hag ouz o fenn dreist-oll. Na pegen souezuz o hizelladurioù ! Sell ouz prenestou moan hag hir ar mogerioù. Sell ouz ar gwaregeier ront, evel rodou trohet e daou hanter, ha lavar din petra 'zoñjez.

Soazig : Heñvel buhez eo an iliz-mañ ouz hini Sant Gweltaz a Ruiz er Morbihan. Euz ar memez amzer eo ivez a-dra-zur.

Visant : Euz an degved hag an unnegved kantved. Evid beza savet eun iliz ken kaer, d'ar mare-ze, e oa sur pinvidig braz ar manati, hag ar vro ivez heb douetañs.

Ar ster Oded

Soazig : Greet brao on-eus tro ar Vro-Vigoudenn. Kalz a dra on-eus gwelet ha desket. Da behañ ez aim bremañ ?

Visant : Kemerom hent Kemper, pe kentoh, ma karez, deom da gemer ar vag da Zant-Voran, deuet da veza Sainte-Marine e galleg ! Ha pignom gand ar ster beteg Kemper.

Soazig : Netra kaerroh eged ar bourmenadenn-ze. Ma vez ar mor o sevel e vezim kaset gand réd an dour.

Visant : En eur vond, setu-ni o treuzi parrez Kombrid. War an tu kleiz ema ar vourh. An iliz, bet diskaret gand Loeiz XIVved, a zo bet adsavet. Pelloh ema maner ar Gosker, e-touez ar gwéz. En tu diouz ar mor ema chapel Intron Varia ar Sklêrded. Ha penn-da-benn euz Enez-Tudi beteg Penn-Oded, eun aot leun a drêz gwenn, euz ar re gaerra.

Soazig : Etre Sant-Voran ha Benoded e oa eur bak n'eus keit-se da dreuzi an dud, al loened hag an otoiou.

Visant : Hirio n'eus bak e-béd kén. Eur pont kaer-kenañ a zo bet savet e-kichen : Pont Kerne eo anvet, hag a gas ar veajourien en eul lamm dreist ar ster. Gwél pegen brao eo da weled euz Benoded !

Soazig : Hag ar vro tro-dro a zo eun dudi selled outi ! Sell pegen brao e ruz ar vag war an dour, luskellet eun tammig !

Visant : Lavarom kenavo da Gombrid. Emaom bremañ etre Gouesnah ha Ploveill.

Soazig : Koajou a beb tu, gand kalz a wéz pin ha sapin. Gwéz dero a zo ivez ha stoui a reont a wechou o fenn beteg an dour evel m'o-defe sehed.

Visant : Ne anavezan parrez e-béd kaerroh eged Ploveill penn-da-benn da ribl ar ster. Setu perag e kaver enni kemend a vaneriou : Keravel, Perennou, Kêr-ar-bleiz, ar re vrudeta anezo. Pourmenadennou dudiuz a heller ober dindan ar gwéz, dre ar gwenojennou kamm-digamm a weler a-gleiz hag a-zehou, a zaver warno beteg ar parkeier kent diskenn beteg an dour da weled ar bagou o vond pe o tond euz Kemper.

Soazig : An êr ho-peus d'o anaoud mad ?

Visant : Ya, sur ! nag a euriou dudiuz am-eus tremenet eno gand mignonned, dre beb seurt amzer, en hañv koulz hag er goañv. P'az-po ezomm da ziskuiza, ne zouetan dit netra gweloh, na dudiush.

Lokmaria

Soazig : Setu-ni goude or pourmenadenn vrao war ar ster Oded, erruet e Kemper. Eur gêr goz-kenañ eo houmañ.

Visant : Ya, ken koz eo ma kaver roud dija anezi e amzer ar Romaned. Anvet e oa neuze Aquilonia. Diwezatoh eo deuet da veza Lokmaria, da lavared eo : Leh Maria.

Soazig : Kemper neuze 'ta a zo bet ganet e Lokmaria ?

Visant : Ya, beteg-henn e kreded an dra-ze. Hervez ar skridou koz e vije bet eno eur manati bet savet gand sant Kolomban. Hemañ 'zo eur zant keltieg euz Breiz-Veur hag e-neus bet savet kalz manatiou dre an Europ a-béz, gand e ziskibl sant Gall.

Soazig : Bez' ez eus bet neuze eur manati evel hini Landevenneg e Lokmaria ?

Visant : Daou zoken a zo bet. Unan evid ar wazed hag eun all evid ar merhed. Goude beza heuliet Reolenn Sant Kolomban, evel manatiou all Breiz, o-deus ranket ivez degemer Reolenn Sant Benead. A-raog ar XVIIved kantved, ne oa en eskopti nemed manati Lokmaria evid ar merhed.

Soazig : Ha ma 'z afem d'ober eur zell ouz iliz koz Lokmaria ?

Visant : Evel-just ! rag n'heller ket tremen e Kemper héb ober eur zell hir ouz an iliz koz-se. Dezi e vo or gweladenn genta.

Soazig : Gand an taol-lagad kenta e weler dioustu ema warni an arz roman, ha penn-da-benn, ar pezh a zo ral-kenañ e Breiz.

Visant : N'eus iliz all e-béd én eskopti, nemed hini Intron Varia Gernitron e Lanneur, hag a vije muioh roman egeti. Sell ouz an tour teo, toet gand mein glaz, ouz he frenestou hir ha moan evel e Loktudi, ouz he filierou hag he gwaregou war-gelh. Ma hellfent kaozeal, nag a draou e lavarfent deom !

Soazig : Lokmaria a zo brudet a-bell 'zo evid he friachou, beteg penn pella ar béd !

Visant : Abaoe amzer ar Romaned e vez greet priachou e Lokmaria. Poderien héb diskrog a zo bet gwelet amañ, hag a weler atao, o labourad ar pri. Chomet ez eus diouto, podou listri a beb seurt, statuiou euz an amzeriou kosa a virer c'hoaz er mirdi.

Soazig : Anaoud mad a ran priachou kaer Lokmaria euz an amzer hirio. Dre oll, e kement kêr, e vezont kavet. Eun dudi selled outo. Eur wech on bet o weled penaoz e vezont greet. Netra plijusoh.

Kemper

Soazig : Me 'garfe, bremañ, goude beza gwelet Lokmaria, mond d'ober eur bourmenadenn dre Gemper.

Visant : Deom 'ta neuze. Eur gêr v Rao-kenañ eo Kemper. Din-me e plij kalz. Kalz muioh eged Brést. Ar gêr-mañ he-deus eun ene e gwirionez.

Soazig : Ar gêr Kemper a dle ivez signifia eun dra bennag ? Ne ra ket ?

Visant : Eo ! kredi a reer ez eus daou hér en ano-ze : kén ha bera : diou ster o kenvera, da lavared eo o vera o dour an eil en é-bén.

Soazig : Setu eun dra êz da gompren. Ha ma komprenan mad, ez eus e Kemper, diou ster o vond an eil en é-bén ?

Visant : Ya, just : Ar Ster-Oded e-kreiz kêr, a reseo ar Ster Hir pe ar Steir. E galleg a reer "confluent" euz an dra-ze, neketa ! E Kemperle e c'hoarvez ar memez tra. Eno ivez ez eus diou ster o kemmeska o dour : ar Ster Izol hag ar Ster Ele : Kêr-ber-Ele : "confluent de l'Ellé".

Soazig : Kemper ! Kemperle ! Anaoiou brao eo ar re-ze !

Visant : Tud desket 'zo avad ha n'emaint ket a-du gand an dra-ze. Disklêria a reont e tlefed lavared Kamp-êr, da lavared eo Kamp an êr : le champ de l'aigle.

Soazig : Ha perag 'ta ?

Visant : Armead ar Romaned hag a oe amañ o kampi d'ar houlz-se, he-doa e-giz arouez eun êr. Bremañ da bep hini da choaz ar pezh a gav dezañ eo ar wirionez.

Soazig : Eun toullad mad a diéz koz a gaver c'hoaz e Kemper, a-drugarez Doue ! én-dro d'ar blasenn "Terre-au-duc" penn-da-benn da ru Kereon hag e-kichen Plasenn an amann eo ema an tiéz kosa, hag ar re v Rao.

Visant : Ru Kereon ! Gouzoud a rez petra 'lavar an ano-ze ?

Soazig : N'on ket re zur avad. Ar gêr "kere" a dle beza ennañ, emichañs ?

Visant : Ya. Kere, Kereour. Ha pa vez meur a hini e vez lavaret ar gereon pe ar gereourien. Er Grenn-Amzer, ar hiz a oa neuze da voda ar micheriu pep hini en he ru.

Soazig : N'eus ket kalz a ruiou pe a strêdou, en or hêriou hag a zoug evel-se anoioù brezoneg.

Visant : Nann siwaz ! Méd amañ e kaver c'hoaz : Ru Feunteunig-al-laez, Plasenn toull al laer, Ru trouz an dour. Hag ar ru Elie Freron a vez greet anezi c'hoaz gand ar re goz : ar Ru deñval.

Soazig : Ar pezh a blij din e Kemper eo pourmen penn-da-benn d'ar ruiou koz ha selled ouz ar gwerennou braz, a-dreñv dezo marhadouriu a beb seurt.

Visant : Hag e vezez, beb tro, evel-just, sachet da brena tra pe dra ! Ar varhadourien a oar mad penaoz ober evid tenti ar merhed, neketa !

Soazig : Hag ar wazed kemend-all !

Visant : Marteze. Hag ar Ster Oded, ne blij ket dit heulia anezi e Kêr ?

Soazig : Eo avad ! pa vez uhel ar mor dreist-oll. War ribl he dour e weler c'hoaz eul lodenn euz ar mogeriu kreñv a ree gwechall-goz an dro d'ar gêr.

Visant : Meur a wech o-deus bet ar mogerioù teo-ze da stourm ouz brezelioù a beb seurt. E-pad ar brezel Kant Vloaz, e-pad ar brezel etre Charlez Bleiz ha Yann Vonfort. E-pad brezelioù al "Ligue", ar forban Fontanella a glaskas meur a wech sailla war Gemper, koulz hag ar Bonedou ruz, méd heb dond a-benn. Trehet e oe ar re-mañ el leh anvet c'hoaz Prad-ar-mil-gov. An ano-ze a lavar sklêr e oa bet greet anezo eul lazadeg spontuz.

Soazig : Traou trist eo an dra-ze. Gwelloc'h deom komz euz traou all eged euz brezelioù.

Visant : Komzom neuze euz ar Zantig Du, pe kentoh Sant Yann Discalseat, lesanvet c'hoaz Sant Yann Diarhenn ablamour ma kerze atao divotou. Genidig e oa euz Sant Noug, e Bro-Leon, er bloaz 1280. Koll a reas amañ e vuhez dre forz ober war-dro ar re glañv kouezet warno ar vosenn, eur gwall gleñved mar deus unan !

Soazig : Ar Zantig Du, ya ! Gwelloc'h a reer e benn a-dreñv an aoter vraz en iliz-veur. Gouzoud a ran o-deus Kemperiz eun devosion vraz dezañ.

Visant : Komzom c'hoaz, ma karez, euz Elie Fréron a stourmas ouz Voltaire. Roet eo bet e ano d'ar Ru Deñval a gas euz Plasenn ar medisin brudet Laenneg d'an Tourbihan, anvet hirio e galleg "La Tourbie".

Soazig : Kalz tud vrudet a zo bet ganet e Kemper. Red e vo deom, memez tra, komz hirroh diwar o fenn, evel sant Kaorantin, ar Roue Grallon. Ha re all c'hoaz, tostoh deom hag o-deus lezet o ano en istor.

Visant : En dro a zeu, ma karez, e krogim da gomz eus kement-se. Levrioù a-walh a gavim da rei deom sklêrijenn.

Iliz-veur Kemper

Soazig : Kaerra 'zo e Kemper, evel-just, eo an iliz-veur.

Visant : Ya, eun dudi eo da weled. Ma hellfe komz, na pebez istor a gontfe deom ! Gweled a rez du-hont, etre an daou dour, eur roue, a-haoliad war eur marh ?

Soazig : Ya, hennez eo ar Roue Grallon meur, Roue kenta Bro-Gerne. Eñ eo diazezour Kêr-Gemper, war-dro ar Vved kantved, d'ar mare ma oa konfontet Kêr-Iz, e gêr genta.

Visant : Hag eñ eo ivez a reas da Gaorantin dond amañ da jom goude beza greet anaoudegez gantañ e Koad-Nevez, e parrez Ploudiern el leh ma veve e-giz ermit. Kas a reas anezañ da gêr Tours evid beza sakret eskob gand Sant Martin.

Soazig : Goude, neuze, eo e teuas da veza kenta eskob Kerne ?

Visant : Ya. Hag on tadou-koz, dre anaoudegez vad evitañ, a zavas, en e enor, an iliz-veur dispar-mañ, kaerra perlezenn vein a zo e Breiz-Izel.

Soazig : N'eo ket houmañ koulskoude, an iliz kenta a zo bet savet amañ ?

Visant : A-dra-zur ez eus bet en he raog eun iliz roman, heñvel ouz hini Lokmaria on-eus gwelet dija. An iliz-veur-mañ a zo euz an XIIIved kantved al lodenn gosa anezi. Kendalhet ez eus bet goude d'he hreski e-doug ar XVved hag an XVIIved kantved.

Soazig : Gwelet em-eus bet imachou koz anezi, hag a ziskouez ne oa ket c'hoaz warni an daou dour kaer a welom hirio.

Visant : Gwir eo. N'eo bet beget an daou dour-ze nemed er bloaz 1856 gand an Aotrou 'n Eskob Graveran genidig euz Kraozon. Evid-se e houlennas digand peb kristen euz e eskopti Kemper ha Leon eur gwenneg bep ploaz e-pad pemp ploaz. Al labour a goustas 150.000 lur euz an amzer-ze.

Soazig : Anaoud a ran mad iliz-veur Sant Kaorantin, Méd deom enni er memez tra, d'ober eur zell muioh en he diabarz. Pa 'z eer e-barz dre ar porched braz e vezer atao souezet o weled n'ema ket ar heur war-eün gand ar horv braz. Petra 'zo kaoz d'an dra-ze ?

Visant : A beb seurt abegou a vez kavet. Lod a lavar eo evid beza heñvel ouz ar Hrist war ar Groaz, stouet gantañ e benn war e vreh dehou. Lod all a lavar, ma vijed bet eet eün gand ar heur, e vije eet an diazezou re dost d'ar ster, el leh ma oa re a lagenn.

Soazig : N'eus forz avad ! evel m'ema eo eun drugar selled outi.

Visant : Kan 'ta neuze, evid echui, kantik Sant Kaorantin.

Soazig :

Sant Kaorantin, Patron Kerne,
Diwallit mad or bro.
Grit ma virim Lezenn Doue,
Beteg eur or maro.

Goueliou koz

Soazig : Kêr-Gemper, gand he mogeriou teo, eun hanter leo tro dezo, a waske anezi a beb tu, a dlee beza neuze eur gêr drist ?

Visant : Pa veze ar zeziz warni, a-dra-zur, e veze trist beva enni. Méd a-drugarez Doue, an dra-ze ne hoarveze ket aliez.

Soazig : Goueliou a veze ivez, emichañs, evel ma vez bremañ.

Visant : Ya. Pardoniu, goueliou, festou, marhajou, foariou, a veze aliez muioh a louenidigez ganto marteze eged gand or goueliou ha foariou a-vremañ.

Soazig : Klevet em-eus ano euz goueliou pe hoariou farsuz kenañ.

Visant : Evel ma oa er XVved kantved, pa veze degemeret eun eskob nevez. Hemañ, en nozvez a-raog, a ranke mond da loja da vanati leanezed Lokmaria. Eno e kouske war ar plouz, hag e ranke lezel gand an abadez e vantell, e vanegou, e voned hag e yalh, a-raog mond kuit.

Soazig : Penaoz e veze degemeret e kêr ?

Visant : Diouz ar mintin e pigne war varh da vond e kêr. E penn bali vraz Lokmaria, e chome a-zav dindan eun dervenn. An Aotrou a Wengad e zikoure neuze da ziskenn diwar e varh, hag evid ar zervich-se e ranke rei dezañ e varh, e heuzou, hag e gentrou. Goude e veze douget war eur gador d'an iliz-veur gand ar pevar aotrou brasa euz Kerne. Dirag dor vraz kêr e ranke tui da zivenn atao gwiriou ha frankizou tud Kemper. Goude hepkén eo e veze degemeret en iliz-veur, hag e veze kanet an overenn-bréd.

Soazig : An eskob d'ar mare-ze n'oa ket hépken eskob méd ivez kont. Da lavared eo e veze evel eur roue er gêr, ha setu perag e ranke tui da zivenn gwiriou an oll.

Visant : Eur hiz all farsusoh c'hoaz a lennom diwar bluenn Cambry en e levr "Voyage dans le Finistère", goude ar Revolusion.

Soazig : Ha petra 'gont evel-se ?

Visant : Setu amañ : eur wech ar bloaz, da houél Santez Sesilia, oll veleien Gemper a bigne beteg statu ar Roue Grallon etre an daou dour braz, kanerien ha muzisianed ouz o heul.

Soazig : D'ober petra e savent ken uhel all ?

Visant : Selaouit ! Kana 'reent ha muzikal. E-pad an amzer-ze, eun dén euz kêr a yee a-haoliad war gein marh ar roue, gantañ eur voutaillad win, eur werenn hag eur zerviedenn. Diskarga a ree eur banne d'ar roue, méd eñ eo a lonke anezañ. Goude beza greet an neuz da zeha genou ar priñs, e strinke ar werenn d'an traoñ war ar blasenn leun a dud. An hini a bake anezi héb he zerri a houneze kant skoed.

Soazig : Setu eur hiz koz da zegas én-dro. Lakom da geñver goueliou braz Kerne. Sur on e vefe re vihan ar blasenn, ne gav ket deoh ? D'ar mor a dud en em gavfe eno da glask paka ar werenn !

Krampouez Kemper

Soazig : Brao eo pourmen dre ruiou Kemper ha selled ouz ar gwerennou braz. Méd an dra-ze ne garg ket ar hov. Kreisteiz eo ! Ha ma yafem da zebri krampouez ? Krampouez Kemper a zo beuz.

Visant : Deom 'ta neuze en ti-koz-mañ. Ne zantez ket eo leun ar ru gand c'hwez ar hrampouez ?

Soazig : Ya. Deom e-barz. Ouz an daol vihan-mañ e vezim brao on-daou. Tost emañ ouz ar grampouezéréz. Me 'blij din atao gweled penaoz e vez greet ar hrampouez a zebran. Peb korn-bro e-neus e hiz.

Visant : Ne reer ket krampouez 'ta er memez mod e peb leh ?

Soazig : Nann sur ! Evel-just, e peb leh e kemmesker lêz gand bleud, viou, holen, sukr. E peb leh e larder ar billig gand amann pe eun tamm kig druz. Méd an doare d'o meska, da leda ar haot pe an toaz krampouez war ar billig gand ar rozell hag a ra d'ar grampouezenn beza teo, tano, pe tano-kenañ, a jañch hervez al lehiou.

Visant : Pa vez tano an toaz, neketa, ha ledet tano-kenañ gand ar rozell, e vez ar grampouezenn evel dantéléz.

Soazig : Ya. Ha neuze e ranker beza dornet skañv evid cheñch tu dezi gand eun taol spanell. Sell ouz ar grampouezéréz-se, ha gwél pegen brao e teu ganti. Êz eo gweled n'ema ket war he zaol kenta.

Visant : Din-me e plij, dreist-oll, ar hrampouez krazet en amann, ha soubet goude el lêz-ribot da zebri.

Soazig : Mad ! Goulennom neuze krampouez kraz. Me avad a gav gwelloh souba va re el lêz dous. Ma vije bet lêz goedenn pe lêz-teo em-bije bet kavet gwelloh c'hoaz.

Visant : En-dro deom e welan gwazed hag a zebr o re gand chistr. N'eo ket fall kennebeud. Krampouez Kemper gand chistr Fouenn o-deus ar vrud da veza gwella krampouez a zo.

Soazig : Krampouez kraz Kemper, krampouez dantéléz seh, lakeet e boestou brao, a zo brudet er béd a-béz. Teuzi 'reont dindan an dent. Pa vezo ho kouél e kinnigin deoh eur voestad evel-se.

Visant : Trugarez dit ! Me ivez a raio kemend-all pa vezo da houél. Méd setu ar hrampouez o tond war an daol. Gwella on-eus da ober eo staga ganto. Seul-vui ma vezont tomm, seul welloh ne vezont kén.

Tud vrudet Kemper

Soazig : Ano a zo bet ganeom euz Grallon, Gwenole, Kaorantin, Santig Du. Méd tud all a zo c'hoaz, tostoh deom, hag a zo ivez evid Kemper tud veur.

Visant : Ya sur ! Hag ar brasa anezo moarvad eo Laenneg, bet ganet e Kemper er bloaz 1781. Gweled a reer e statu, e-kreiz ar blasenn, dirag an iliz-veur.

Soazig : Bet eo Laenneg, unan euz brasa medisined an amzeriou tremenet, brasa madobérouer an denéléz, dre ar gavadenn greet gantañ da aoskulti ar glañvourien, ha da houzoud, evel-se, petra 'dremen e diabarz korv an den.

Visant : Ya ! eur madoberour braz e gwirionez ! Hag an den-meur-ze a oa ivez eur brezoneger mad, hag a zivenne kaloneg or yéz. Echuet e-neus e vuhez, evel a houzout, e maner Kerlouar-neg, e Ploare, el leh ma plije dezañ, ken aliez ha ma helle komz brezoneg ouz an dud.

Soazig : Komzit din euz tud all c'hoaz, bet ganet e Kemper. Euz René ar Madeg da skwér. Eun dén souezuz eo bet henez, a gav din.

Visant : Gwir a lavarez. Goude beza tapet gantañ eun tammig deskadurez, e kemeras plas war eur vatimant en Oriant, heb gouzoud d'e gerent, da vond d'an Indez. Chom a reas eno da veva. Goude nousped darvoud e timezas d'eur briñsez euz ar vro, hag e teuas neuze da veza nabab hag eñ e penn eur vro ken braz ha Bro-Hall a-béz.

Soazig : Méd distrei a reas da Gemper, pinvidig-mor. Gweled a reer c'hoaz, er ru a zoug e ano, an ti kaer a zavas evitañ hag ar briñsez.

Visant : Hag e bered Penharz int bet beziet o-daou, hi hanter-kant vloaz bennag war-lerh he fried, er bloaz 1841.

Soazig : De Kerguélen ha Du Gouédic o-deus ivez staget o ano ouz ruiou Kemper ? Daou Gemperad int ivez ?

Visant : N'int ket. Ar henta a zo genidig euz Landudeg, hag an eil euz Pouldregad. Kergelenn, gouzoud a rez marteze, a zo bet eur reder-mor, eun dizoloer inizi e penn izella ar bed : eun tri-hant enezenn bennag anvet hirio Inizi Kergelenn. Gouedig a zo bet eur brezelour braz war vor, a-eneb ar Zaozon. Paka a reas e varo diwar unan euz an emgannou ha beziet e oe e iliz Sant-Loeiz e Brést, bet distrujet gand ar brezel diweza.

Soazig : Bretoned all ken brudet, heb beza ganet amañ, o-deus c'hoaz staget o ano ouz Kemper ?

Visant : Ya. Ha kalz a zo anezo zokén : Ar skrivagner ar Braz, an daneveller Luzel, ar barz Frederic ar Gwiader ha meur a hini all c'hoaz. Méd ar brudeta Kemperad ganet e Kemper eo moarvad, Max Jacob hag a zo kement a ano anezañ d'ar mare-mañ.

Menez-Fruji

Soazig : Me 'garfe sevel ivez war Menez-Fruji ! Ahano ez eus eur gwél euz ar re gaerra war Gemper.

Visant : Pignom 'ta neuze war Menez-Fruji. Gwechall, en eur skrid koz, e veze greet anezañ Kernec'h Chuchi. Hag e-pad ar Revolusion, ablamour d'ar menez-se, Kemper a zo bet anvet eur pennad : "Montagne sur Odet" gand an dispaherien. N'eo ket gwall uhel koulskoude : eun duriadenn hoz kentoh, a lavarfe paotred ar Pireneou.

Soazig : Ar gwél a zo kaer memez tra ! sell ! Ni a zo ken uhel ha bég touriou an iliz-veur hag o-deus war-dro pemzeg metr ha tri-ugent, a gav din. Gweled a reer mad an diou draonienn, hini ar Steir o tond da bokad da hini ar Ster Oded. Iliz Sant Vaze pe Sant Vao, gand he zour skañv dantelezet, a zo aze tostig deom. Ha toennou an tiéz, sell 'ta pegen souezuz int da weled !

Visant : En traoñ, ouz troad ar Fruji, eur blasenn vraz hag he-deus bet douget nousped ano e-doug he istor. Warni, en eun tantad braz divent, eo ez eas e moged statuiou koad ha relegou sent koz Kemper e-pad an Dispah Braz, nemed Santig Du, peogwir e kouezas diwar ar harr p'edo o vond d'an tan.

Soazig : Aze ivez, atao e-pad ar Revolusion Vraz eo e oe greet gouél an Doueez Rezon. Braoa plah yaouank Kemper a ree an Doueez-se, gwisket e dantelez skañv ha sklêr penn-kil-ha-troad.

Visant : Aze c'hoaz, abaoe ouspenn hanter-kant vloaz, e vez kurunet Rouanezed Kerne, war-lerh eur zizunveziad goueliou ha n'eus ket kaerroh egeto marteze er béd a-béz.

Soazig : Euz goueliou braz Kerne eo e fell deoh komz !

Visant : Evel-just ! E gouél e-béd ne weler kemend a wiskamañchou kaer o tond euz Breiz a-béz. E nebleh ne weler kemend a zañserien, a zonerien, a ganerien. Tri mil a wiskamañchou a beb seurt, eur mil a zonerien pe ouspenn o c'hweza er beuz, ken e tregern ganto ar gêr en he fez !

Soazig : Hag eur mor a dud deuet a-bell hag a-dost, da strakal dezo o daouarn.

Visant : Goueliou Kerne, bep ploaz, da fin miz Gouere, o-deus kaset ar vrud euz Kemper-Kaorantin beteg penn pella ar bed.

Soazig : Gwir eo ! Hag anaoudeg braz e hellom beza e-keñver ar Vretoned vad a gemer bep ploaz kemend all a boan da zevel goueliou ken dispar ! Buhez hir da houeliou Kerne !

Intron Varia ar Geoded

Soazig : Komzet ho-peus euz skeudennou Sent koz Kemper, bet devet e-pad an Dispah braz war blasenn ar Fruji. Evel-se 'ta oll deñzoriou koz Kemper n'int ket bet deuet beteg ennom ?

Visant : Siwaz ! nann ! Soñjal a ran dreist-oll, er japel goz-se, anvet Intron-Varia ar Geoded hag a oa e-kreiz kêr. Bez' e oa honnez chapel ar vourhizien, hag ivez al leh m'en em vode ar pez a vije anvet hirio ar "municipalité", da lavared eo ar pennadureziou braz a rene ar barrez pe ar gêr, e diabarz ar mogerioù.

Soazig : Ar gêr keoded, hag a gaver e meur a gêr all, a zinifi a gav din "cité" e galleg, hag e brezoneg "kêr vogeriet".

Visant : Ya. Deuet eo ar gêr-ze war-eün euz al latin "civitatem". Mantruz eo pa zoñjer penaoz ha perag eo bet distrujet ar japel er bloaz 1816 gand tud diboell war-zigarez kaoud enni mein brao da zevel eur japel nevez er skolach. War ar memez tro e oa distrujet he hoatach kizellet, ha dreist-oll he frenestou gwêr livet hag a oa dispar, war a lavar deom Cambry. Ne jom anezi nemed he hloh Maria Pia hag a heller gweled, etre daou dour an iliz-veur, e-kichenn ar Roue Grallon. War ar hloh-se eo e sko atao morzol an orolach da rei an eur da Gemperiz.

Soazig : E eskopti Landreger e kaver c'hoaz eur japel hag a zoug ar memez ano ?

Visant : Ya. Intron-Varia ar Goz-Yeoded, e penn ar Ster-Leger, el leh ma oa eur gêr goz e amzer ar Romaned.

Soazig : Chomet ez eus koulskoude, eun toullad mad a diéz koz war-lerh an distrujerien ?

Visant : A-drugarez Doue ! e ru ar Geoded e kaver kizelladuriou dispar er vein hag er hoad hag a dalvez ar boan selled outo !

Soazig : Er mirdi ivez, e palez an eskibien, etre an iliz-veur hag ar Ster-Oded, ez eus da weled traou koz prisiuz euz an amzer dremenet.

Visant : Moyen 'zo, ya, da dremen eno eun hanter deveziad heb beza inouet. Ar pez a weler a zo kenteliuz braz hag a ro lorh deoh da veza Breizad. En enor da Gemper, kan adarre !

Soazig :

O Breiz-Izel, o kaerra bro,
En da enor me 'gano, lonleno, lonla !
Kanom ha meulom, Bretoned,
Breiz-Izel or bro garet, lonleno, lonla !

Foariou ha marhajoù

Soazig : Eun dra 'zo hag a gavan kasauz amañ e Kemper, re voan ar ruiou diouz niver an otoiou a dremen enno. Hag e-kreiz an hañv eo gwasoh c'hoaz.

Visant : An dra-ze a zo gwir. Kemper n'eo ket greet evid an amzer-vremañ. Keuz am-eus ne vije ket miret ouz ar hirri da vond e ruiou 'zo. Eun torr-penn eo ivez pa ranker kavoud eur plas evid an oto, dreist-oll pa vez deiz marhad.

Soazig : Just ema ar marhad hirio ! Ha ma rafem eun droiad er hohu koz, ha goude war ar plasennou da weled ar staliou.

Visant : Kemper a zo eur gêr leun a vuhez. Eur greizenn dalvouduz eo evid ar prena hag ar gwerza. Amañ, er hohu koz, gwél nag a werzerien ha nag a brenerien. Kavoud a reer peb tra, bara, boeson, kig, pesked, lêz, amann, fourmaj, kouignou, frouez, krampouez, koñserv, a beb seurt hag ispisiri.

Soazig : Er hohu nevez, e-kichenn iliz Sant Vao, e houzon e kaver peb tra evid al liorzou hag ar parkeier : oustilli pe benviji, plant, bleuniou, hajou. Ha me oar-me !

Visant : Deom war blasenn Laenneg. Goloet eo a staliou : amañ, sell ! Dillajou evid ar merhed, aze evid ar vugale, a-hont evid ar wazed : dillajou da zul ha dillajou da bemdez. Danvez dillad ivez : mezer ha koton, voulouz ha gloan, dantéléz ha seiz, nilon ha me oar me !

Soazig : Pelloh ne vank netra evid ar gegin nag evid an daol : priachou a beb seurt ment, a beb seurt liou, hag a beb seurt priz. Ha tud, merhed dreist-oll, o varhata peb tra. Ne vije ket lavaret e vankfe an arhant ganto, rag prena a reont forz !

Visant : Pignom gand ar ru Deñvel hag e kavim d'an neh ar blasenn-foar. N'eo ket mui avad na ken beo na ken livet ha ma veze gwechall pa veze kavet warni kemend loen a zaver war ar mêz, nemed ar hizier marteze. Hirio, ar seurt marhadourez a vez greet en tiegeziou zokén war ar mêz. Ha gwelet az-peus bet a-wechou gwerza pe brena eur vuoh, eul lean-kezeg pe eur pemoh bennag ?

Visant : An dra-ze neuze a vank dit. Dén e-béd, d'ar houlz-se, n'e-noa e deod en e hodell. Ar merhed a veze kentoh war-dro ar zaout, ar moh hag ar yér. Ar wazed war-dro ar hezeg hag ar bouchou bihan. Lakeet e vezent da drotal ha da lammad. Digoret e veze o genou d'ar hezeg. Klevet e veze ar priziou, hag an daouarn o sklakal pa veze greet marhad. Ha banneou goude én ostaliri forz pegement.

Ar Stangala

Soazig : Bremañ, da aveli or penn, e karfen mond beteg ar Stangala. Ne anavezan ket al leh-se ha klevet am-eus eo kaer-kenañ.

Visant : Deom neuze da baka an oto on-eus lezet e-kichenn iliz Kerfeunteun. En eur vond e hellim ober eun droig, ma karez, beteg chapel Ti-Mamm-Doue : eun neiz brao e-kreiz eur blokad gwéz. Eno eo, war a gonter, e-neus bet desket an Tad Maner ar brezoneg dre vurzud.

Soazig : Hemañ ivez a oa eur Hemperad neketa ?

Visant : Eur Breiz-Uhelad e oa. Méd oh ober skol e Kemper edo, e skolaj ar Jezuisted, a-raog komañs da brezeg e visionou e Breiz-Izel, hag evid ober al labour-ze e ranke gouzoud ar brezoneg. Edod neuze er XVIIved kantved.

Soazig : Brao eo ar japel ! He anaoud a reen dija. Soñj ho-peus euz ar Bleun-Brug kaer on-eus bet amañ ? Pell a zo dija abaoe ! Méd deom bremañ buan da Stangala.

Visant : En em gavet om. Lezom on oto amañ e-kichenn al lann hag ar balan alaouret ha diskennom gand ar wenojenn beteg ar Ster-Oded.

Soazig : O ! ar wenojenn a ya war he fenn ! Aon am-eus da rikla. Eüruzamant e heller kregi er bodou gwéz a beb tu. Biken n'am-bije kredet e oa ken don an draonienn ! Feiz ! ar ster he-deus toullet amañ eur mellad riboul don ha striz ! Sell 'ta pegen uhel an daou du anezi !

Soazig : Setu-ni war bord ar ster. Tomm eo an amzer. Méd dindan ar gwéz uhel ha stank, e santer freskadurez an dour. Eonenni 'ra ha strinka zokén beteg ennom evel eur vrumachenn skañv.

Visant : Ar pezh a blij din eo liou an dour. Sklêr eo ! n'eus dindan nemed mein ha reier. Gwelet am-eus bet amañ eur wech, rag bep ploaz e vez eur redadeg kanoe, eur mor a dud o oa o selled. Leun e oa ganto an draonienn, a beb tu !

Soazig : Moyen 'zo da vond en tu all d'ar ster ?

Visant : N'eo ket diêz. Ne welez ket a-hont eur pont koad hag a lamm dreisti ? N'eus ket keit-se e oa aze eur vilin goz. Gwelet e vez c'hoaz he mogerious pe tammou anezo, goloet a ilio.

Soazig : Eun dra goz muioh eet da goll. Damantuz eo ! Peur 'ta e tigo a-walh or spered hag or halon hag or yalh, da rei bolontez deom da zavetei an teñzoriou-ze ?

Kerdevod

Visant : Peogwir emañ war ar mêz, deom bremañ, ma karez, beteg Kerdevod. Eno e karfen diskouez dit eun dra gaer all, eur berlezenn muioh kollet e-touez ar glaster, evel ma 'z eus kement dre or mêziou.

Soazig : Felloud a ra deoh komz euz chapel Intron Varia Gerdevod ?

Visant : Ya, just ! n'ema ket gwall bell ahann. Gwechall em-eus bet anavezet eur gwall hent da vond di. Hirio avad eo brao.

Soazig : N'om ket pell o tond rag setu ar japel dirazom. Eun tour giz Kerne a zo warni, uhel ha kaer, gand diou douribell hag eur garidou a-rez kambr ar hleier.

Visant : An tour eo al lodenn nevesa eus ar japel. Diskaret e oa bet an tour koz er bloaz 1701 gand ar gurun. Bloaz goude eo bet adsavet. Ar japel a zo euz ar XVved kantved. Ar halvar braz euz ar XVIved. Méd gwall zismantret eo bet gand an Dispah Braz. Daoust da-ze, kaer-kenañ c'hoaz an tamm anezañ.

Soazig : Kerdevod, pe Kerzevod a zo eul leh a belerinaj evid tud ar vro, neketa ?

Visant : Eur pardon kaer a vez amañ bep ploaz da geñver an 8 a viz Gwengolo. En dro ziweza m'on bet em-eus kemeret diapozitivou dispar euz ar brosesion el leh ma weler kaerra gwiskamañchou Bro-Gemper ha Bro-Elliant, eun dudi selled outo.

Soazig : Anad eo e vez kalz tud er pardon, rag kalz a blas a zo én-dro d'ar japel hag hi he-unan a zo braz evel eun iliz. Kalz traou kaer a zo enni, a welan.

Visant : Ar pezh a gaerra a zo e-barz eo ar retabl-mañ, sell ! n'eus ket kaerrou en eskopti. Dond a ra euz Bro-Flandrez. Konta 'reer eo bet prenet e foar ar Merzer e-kichenn Landerne, gand fabrisianed an Erge-Vihan, ha degaset beteg Kemper dre vor hag ahano charreet beteg amañ gand daou ejenn. Siwaz ! n'eus ket keit-se, ez eus bet eet skeudennou anezañ gand al laer.

Soazig : Mantruz eo nag a draou evel-se a ya euz on ilizou ha chapelioù gand laeron diskorpul ! Dleet e vije d'ar Vretoned beza muioh war evez evid mired o zeñzorioù ha lakaad o hraban war al laeron villiget-se.

Visant : Gwél pebez Rouanez eo amañ an Intron Varia, evel e chapel Ti-Mamm-Doue e Kerfeunteun. Eur vamm leun a nerz hag a vuhez, he mabig Jezuz ganti war he barlenn. Delwennou koz all a welez c'hoaz aze, evel Sant Telo a-haoliad war eur haro.

Gouesnah ha tro-war-dro

Soazig : Gwelet on-eus Kêr-Gemper hag he zro-war-droiou. Petra a welim bremañ ?

Visant : Er mintin-mañ, ma karez, peogwir eo brao an amzer, e raim eun droiad e parrez Gouesnah.

Soazig : Ya 'vad ! ne anavezan tamm e-béd ar barrez-se. Petra 'zo da weled enni ?

Visant : Ar vro, penn-da-benn d'ar Ster-Oded, war-héd diou leo vad, a zo kaer dispar. Dre-oll, evel a welez, ar hlazvez a zo roue. Ar hleuziou n'int ket bet diskaret c'hoaz, ha warno e sav a beb seurt gwéz. Pa vez darév ar herez e heller ober korvajou. Kemend a vez anezo ma ne zeuer ket a-benn d'o dastum.

Soazig : Emaom dirag eur japel. Gweled a ran bég he zour mibin dreist ar gwéz. Peseurt chapel eo ?

Visant : Chapel Sant-Kadou. Gouzoud a rez eo hemañ patron ar hourenerien. Setu ma veze amañ, da zeiz ar pardon, gourenadegou braz. O veza ma veze, er hantved diweza, kalz dizurz d'o heul, eo bet lezet ar pardon hag ar japel da goueza. Méd adsavet eo bet, ha gourenadegou a vez adarre muioh eged biskoaz.

Soazig : Lenn a ran ivez, war va faper, ez eus ivez e Gouesnah eur japel da Zantez Barba, nemed eo kouezet en he foull.

Visant : Felloud a ra dit gweled ar japel-ze ? Ne anavezan leh e-béd kaerroh. Méd, n'eo ket êz da gavoud. Korvigelluz eo an hent ha cheñch-dijeñch bepred. Fall eo ivez. Méd deom memez tra.

Soazig : Feiz ! va-unan biken ne vijen bet deuet a-benn da zizolei eur japel ken kuzet. N'eus mui warni na tour na toenn ! Méd sellit pegen brao eo c'hoaz mein kizellet an doriou hag ar prenestou ! Mein an tour bihan avad a zo o c'hoari ruillaig e-touez ar raden hag ar yeot dindan ar gwéz braz.

Visant : Ne jom en he féz nemed ar feunteun hag a zo kemend a zour-réd enni atao. Diskenn a ra d'ar Stêr-Oded a zo aze tostig en eur hiboudi sioulig. Deom da zouba on treid e dour ar ster, ha da ziskuiza or memprou, goude ar haloupadenn on-eus greet.

Soazig : Anoiou parrez ar vro-mañ a gavan souezuz : Gouesnah, Fouenn, Perged, Kloarz. N'eus amañ ma plou na lan, na lok evel el lehiou all on-eus gwelet dija.

Visant : Gwir eo. Anoiou brezoneg int koulskoude. Gouesnah am-eus gwelet skrivet Gouesnec'h en eur skrid koz. Daoust ha ne vije ket : Gouez : "sauvage" ; neh : "hauteur" - Gouesneh : "hauteur sauvage".

Perged a deu euz Berhed : "Brigitte" - Eur zantez eo houmañ, a Vro-Iwerzon, anavezet kalz e Breiz. Patronez eo da Loperhed (Lok-Berhed) e-kichen Plougastell-Daoulaz. Kloharz a zo eur hloz gand eun harz. O ! setu amañ dirazon eur feunteun gaer dirag eur japel.

Visant : Feunteun Intron Varia Landevenneg eo honnez. Mar 'deo nevez ar japel, ar feunteun a zo koz. On tadou a zeue amañ da houlenn amzer vrao.

Soazig : Ha pa felle dezo kaoud glao ez eent daved Sant Alar da Erge-Armel, rag evel ma lavarent :

Da Zant Alar evid kaoud glao,

Ha d'an Dreneh 'vid amzer vrao.

Visant : Setu iliz koz Perged pe Santez Berhed. Hi eo patronez ar japel. Houmañ oa iliz-parrez gwechall. Deuet eo bremañ da veza parrez Benoded (Penn-Oded). Parrez Santez Berhed a oa koulskoude koz-kenañ. Al lodenn gosa euz ar japel a zo roman euz an XIIved kantved.

Soazig : Gweled mad a reer eo nijet kuit ar vuhez eus al leh-mañ. Eun ti bennag a jom c'hoaz da verka ar vourh. Ar gwéz koz ivez o-deus poan o stourm ouz an aveliyou.

Visant : Ar wezenn ivin aze, e-kichenn ar halvar koz, a zo kleuz mantruz. Gweled a reer mad c'hoaz pegen teo eo bet. Méd he bodou, kalkennet gand an amzeriou, n'int nemed ar skeud euz ar pezh m'edont gwechall.

Soazig : Aliez e kaver gwéz ivin en or beredou koz. Perag an dra-ze ?

Visant : Ar wezenn-ivin a oa gwezenn zakr ar Gelted, setu perag eo bet lakeet a-wechou gant on Tadou-koz, da houdori park ar re varo. Amañ edo bered ar barrez gwechall. Gweled a reer c'hoaz ar garnel, Méd goullo eo bremañ. Ar vered nevez a zo e Benoded.

Fouenn

Soazig : En tu all da Zantez Berhed emañ e parrez Fouenant, neketa ?

Visant : Ya. Fouenant gand he "ant" hag he zraonienn leun a hlaester, hag a frouez Fouenn gand he aochou brudet, Mousterlin, Beg-Meil, Kap-Koz.

Soazig : Aochou brao int, tomm ha glaz, a-wél d'an heol pa vez en e gaerra. Setu perag e vezont, beb hañv, darempredet kement gand an douristed.

Visant : Touristed vrudet a-wechou. Gouzoud a rez pa veze Pompidou amañ, (Doue r'e bardono), e maner Kernaered o tremen e vakañsou. Méd evidon-me e vez gwelloc'h ganin mond war aochou Fouenant, pa vez nebeutoc'h a dud d'an nevez-amzer pe d'an diskar-amzer. Neuze e gwirionez, e heller tañva douster ar vro. Neuze eo e vez warni ar haerra liviou mimoza, kamelia, balan ha lann alaouret. Skedi a ra ganto ar vro a-béz.

Soazig : N'eus ket kaerroc'h eged ar bleuniou-ze da lakaad ar mêziou da veza laouen. War o lerh e teu ar bleunv er gwéz-kerez hag er gwéz-avalou. Bro ar frouez eo Fouenant.

Visant : Ha bro ar chistr mad ivez. Siwaz ! re a wez-avalou a zo bet distrujet ha n'eus ket bet plantet re all en o flas. Méd deom ivez da weled an iliz.

Soazig : Eun iliz koz-kenañ eo, war a zeblant.

Visant : Ya, ken koz ha chapel Santez Berhed, da vihanna eul lodenn anezi. Nevesaet eo bet meur a wech, n'eo ket, siwaz, evid he braoaad. An tour he-deus bremañ a zo euz an XVIIIved kantved. Ne dalvez ket an hini koz hag a oa war greiz an doenn.

Soazig : N'heller ket tremen dre Fouenant heb mond beteg chapel Santez Anna. Tostig emañ d'ar vourh war hent Kemper. Eno, e heller c'hoaz, pa vez ar pardon, gweled gwiskamañchou kaer ar vro.

Visant : Gwechall, war a gonter, e teue di da bardona tud Konkerne. Dond a reent dre vor beteg ar Hap-Koz, hag ahano e reent ar rest euz an hent war o zroad en eur bedi hag en eur gana.

Porz-ar-Forest

Soazig : Kemerom bremañ hent Konkerne. En eur gemer hent nevez ar Forest, ne vezim ket pell o vond.

Visant : Hag en eur dremen dre ar Forest e welim ar porz nevez a zo bet savet eno evid an dud eo o flijadur mond war vor e-pad ar vakañsou.

Soazig : Setu-eñ dirazom. Ne pegen braz eo ! nag a vigi a zo ennañ : bigi dre lien ha bigi dre dan, re vraz ha re vihan ! Kantchou a zo anezo, nevez flamm, koulz lavared oll.

Visant : Eur porz eo hag a zo bet koustet ker daonet. A-dra-zur n'eo ket braoaad ar horn-bro eo a zo bet greet. Méd petra ne zistrufed ket evid rei plijadur d'an dud, d'an douristed dreist-oll. Hag an dra-ze d'ar mare m'o-deus ar besketèrien kemend all a-boan o kaoud arhant da vodernnaad o ferzier mor pesketa.

Soazig : Pa 'z eus ken nebeud a dud hirio war-dro, greom eur bourmenadenn penn-da-benn d'ar haeou.

Visant : Deom ivez, ma karez, war ar haeou a zo war-neu. Gwelloh e welim evel-se ar bagou a zo stag a beb tu dezo. Lod anezo, pinvidig evel ma 'z int, a zo bagou mondianed vraz a-dra-zur.

Soazig : E-barz ar poull, ez eus re vihannoh. Bagou dre-lien int, evid ar re yaouank da zeski mond ganto war vor. Eur sport plijuz-kenañ eo hennez, ha yahuz ivez. Gouzoud penaoz kas én-dro eur vag dre-lien a houlenn eun tamm skiant-prena hag ivez beza dornet mad.

Visant : An êr az-peus da houzoud ar vicher, 'mezaon ! marteze out bet eur wech bennag en eur skol evel-se ? Lakom, en inizi Glenan ? Eno ema brudeta skol bagou-dre-lien ar Finister.

Soazig : Fazia a rez. N'on bet morse oh ober sport-a-vor e-béd. Méd anzav a ran, ma vijen bet yaouankoh, n'em-bije ket lavaret nann. Eet e vijen bet ivez da heul ar hiz nevez-se, heb douetañs e-béd.

Visant : N'am-eus poan e-béd o kredi ahanout. Méd hastom buan bremañ evid deom da veza a-raog an noz e Konkerne. Warhoaz on-eus da weladenni ar porz. Gouzoud a rez eo brasa porz-pesketa ar Finister.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Konkerne

Soazig : Ar gér galleg “conque” a zínifi e brezoneg krogenn. Daoust hag ahano eo e teufe Konkerne ?

Visant : A-dra-zur, evel ma teu Konk-Leon (Le Conquet) euz ar memez gér. Cancale e Breiz-Uhel, a hellfe beza ennañ ar memez gér ivez : Konk-Gall, da lavared eo Konk Bro-Hall.

Soazig : Ne anavezan kêr e-béd heñvel ouz Konkerne. N’eo ket eur gêr hepken eo a zo, Méd diou.

Visant : Gwir eo. Al lodenn gosa anezi a zo eun enezenn vihan dindan paeroniez Sant Gwenole. Eur voger greñv a weler atao én-dro dezi ha bez’ he-deus bet e-doug ar hantvejou da stourm ouz peb seurt enebourien, Saozon dreist-oll. Dond a rejont a-benn, zokén, da veza mestr warni.

Soazig : Bertrand Duguesclin, neketa, eo a ziframmas anezi a-dre o hrabanou.

Visant : Ya, gand kalz a amzer hag a boan. Méd an Hugunoded ivez, e-pad ar Brezelioù a Relijion, a lakaas o zreid enni e-pad eur pennadig amzer.

Soazig : O ! eur pennad berr-kenañ, peogwir e oent oll toullgovet, hag e berr-amzer, gand tudjentil euz Kemper.

Visant : Konkerne a zo hirio, evid ar pesketa, brasa porz-mor Penn-ar-Béd, hag eil porz-mor Breiz, goude an Oriant. Souezuz eo pegement eo eet Konkerne war a-raog abaoe ar brezel diweza. Dén ne hellfe biken lavared niver ar sardined a zo bet paket amañ, gand rouedou glaz pesketêrien Konkerne.

Soazig : Ablamour da-ze eo e reont bep ploaz, moarvad, Gouél ar rouedou glaz

Visant : Ya, eur gouél braz folkloreg hag a blij kenañ d’an douristed

Soazig : Méd n’eo ket sardined hepken eo a vez pesketet e Konkerne ?

Visant : Nann sur ! kement seurt pesked a zo er mor a ziskargont euz o bagou. Sell, pegen niveruz, ha pegen braz eo ar bagou-pesketa a zo er porz. Kaer o-deus kreski o forz-mor e chom atao re vihan.

Soazig : Ma karez, a-raog kuitaad Konkerne, deom d’ober eur gwél da unan euz ar batimañchou braz pesketa a weler du-hont a-héd ar hae.

Visant : Ya, deom ‘ta ! gand ar weladenn-ze e paouezim on tro Breiz-Izel evid ar bloaz-mañ. Berr e vo bet on tro e Konkerne, Méd red eo echui.

Krogom adarre

Soazig : Ya, krogom adarre gand on divizou. Echu eo ar vakañsou. Pep hini a zo bet én eun tu pe du. Kalz o foeta bro a-bell pe a-dost.

Visant : Lod o-deus kavet gwelloh galoupad Breiz : Breiz-Uhel pe Breiz-Izel. E peb leh ez eus korniou brao da weled war an aochou hag e diabarz ar vro.

Soazig : War am-eus klevet ez eus bet kalz muioh a douristed e Breiz en hañv-mañ.

Visant : An amzer vrao, moarvad, eo a zo bet kaoz. Biskoaz jamez n'ez eus bet gwelet eun amzer ken brao all !

Soazig : Ken brao all a lavarez ! Lavar 'ta kentoh eo bet re vrao ! Selaou 'ta al labourerien douar ! ne vez ganto nemed klemmou ablamour d'ar zehor.

Visant : Gwir eo. An amzer re vrao. Ar zehor a zo deuet da veza eur gwall zarvoud, eur rivin, evel ma lavar ar beizanted. Ar peuri, e peb leh, a oa deuet da veza seh korn. N'ouzon ket penaoz eo chomet beo ar chatal. Eun druez e oa o gweled o klask peuri er parkou kraz. E meur a leh ez eus bet ranket rei deliou dero d'ar zaout.

Soazig : An dud ivez o-deus bet poan. E kalz plasou eo bet manket an dour. Hag ar gwasas 'zo bet eo an tan-gwall. Milierou a zeveziou arad gwéz a zo bet devet, dreist-oll er menezioù. An dra-ze a zo trist !

Visant : Ha tremenet out bet dre ar menezioù ? Me am-eus o gwelet o tevi éndro da Gastellin : Menez-Hom, Menez-Kelh, Garreg an tan. Gwelet em-eus Menezioù-Are duet, suliet gand an tan. Ha ne gomzan nemed euz ar Finister.

Soazig : Ha n'eo ket echu gand ar vizer. War-lerh eur seurt sehor e vo keraouez war an traou.

Visant : Dija ez eus. Ha klevet ez-peus pegement e vez gwerzet ar zahad avalou douar ? Beteg pemzeg mil lur hag ouspenn ! mantruz eo, neketa !

Goueliou ha pardonioù

Soazig : En dro diweza on-eus skañvbennet diwar-benn an amzer hag ar geraouez a zo war an traou. Ouspenn traou trist a zo bet e Breiz evelato ?

Visant : Levenez ha plijadur a zo bet ivez a-dra-zur. Ar re a oa war on aochou o kouronka, o veleni o hrohenn, n'eo ket bet tost dezo klemm euz an amzer. Kollet en o flijadur, n'o-deus ket soñjet e oa ar zehor eur gwall-zarvoud evid al labour-douar, nemed marteze ar re a zo bet manket dezo an dour.

Soazig : Renerien ar goueliou niveruz a zo bet e Breiz n'int ket bet kennebeud darbaret gand ar glao : Pardonioù, goueliou a beb seurt, festou-noz, redadegou. E peb leh ez eus bet tud e-leiz ha moarvad ivez gounezet kalz arhant dindan an heol tomm.

Visant : Or pardonioù braz, dreist-oll, a zo bet kaer : Rumengol, Ar Releg, Kernitron, ar Porzou, Santez Anna ar Palud, Pennorz, ar Folgoad, ar Salet evid komz hepken euz pardonioù Penn-ar-Béd.

Soazig : Tud 'zo a fell dezo rei da gredi ne vez mui ar gristenien ken niveruz en o fardonioù. Hervez ar pezh am-eus klevet ha gwelet, kement-se n'eo ket gwir. Pardonioù ar Werhez, dreist-oll, a zo darempredet muioc'h eged biskoaz.

Visant : Or prosesionou, kennebeud, n'int ket eet c'hoaz da goll. Ma 'z eus chapelioù hag a varv, e weler re all o sevel a varo da veo, hag én-dro d'ar remañ e weler ar bannielou adarre o ficha en avel, ar hroazioù aour hag arhant o skedi en heol, hag or statuoù douget war skoazioù ar wazed hag ar merhed.

Soazig : En or chapelioù ivez e klever atao or hantikou koz hag aliez overennou e brezoneg, evel e chapel Intron Varia Dreminou hag a zo bet skignet end-eün war ziouskell ar radio. Péd ha péd overenn vrezoneg a zo bet lavaret e-doug an hañv ? Eun toulladig mad, me a zo sur.

Soazig : Ha ma krogfem erfin gand on tro Breiz-Izel. Ne gav ket deoh eo an dra-ze a hortoz or zelaouerien ?

Visant : Eo, evel-just. Chomet e oam a-zav e Konkerne, a-raog ar vakañsou. En dro a zeu eta, e hellom lavared ez aim da Bont-Aven hag e komzim euz ar gêrig koant-se hag euz ar vro.

Pont-Aven

Soazig : Setu-ni e Pont-Aven, prést adarre da genderhel gand on tro Breiz-Izel. Taolom eur zell war ar gêrig da genta, hag a zo ken koant. Savet eo penn-da-benn d'ar Ster-Aven ha setu perag e toug an ano a Bont-Aven (Pont war an Aven).

Visant : Eur gêrig vrao gand he milinou koz, he iliz koant, Méd ivez eur gêrig vrudet dre ar béd a-béz. Amañ ez eus bet o chom eur strollad liverien veur, evel Gauguin, Bernard, Serusier, hag o-deus ijinet amañ eun doare dezo o-unan da liva taolennou.

Soazig : Ahano e teu ar pezh a vez anvet "L'école de Pont-Aven". Chomet ez eus bet war o lerh eur bern taolennou hag o-deus, en amzer-vremañ, eun dalvoudègèz spontuz. Méd tud vrudet all o-deus c'hoaz bevet e Pont-Aven ?

Visant : Ya ! Ar haner braz Botrel da skwér, marvet amañ, e-neus amañ e statu, hag a zo bet ken brudet dre e ganaouennou. Ar barz Emil Cuffe, o chom ivez e Pont-Aven, a gendalhas d'o hana goude e varo.

Soazig : Emil Cuffe. Soñj mad am-eus da veza e glevet. Eur henvroad e oa din peogwir eo genidig euz Kastell-Paol. E vouez a oa dispar. Méd gouzoud a ouie ivez displega rimadellou e brezoneg, evel Yann ar paotr mad, bet savet evitañ gand an Aotrou Conq hag a lakae an dud da regi o c'hoarzin.

Visant : Me ivez am-eus bet e glevet. Doue r'e bardono ! rag maro eo. Méd e wreg hag e vugale hag a vév amañ atao o-deus kendalhet da gana war e lerh. Lakeet em-eus bet anezo da gana e Bleun-Brug Moelan er bloaz 1962. Moelan a zo amañ tost. Soñj az-peus er Bleun-Brug-se hag a zo bet ken brao ?

Soazig : Ya 'vad ! Eur Bleun-Brug souezuz eo bet.

Visant : Souezuz dreist-oll evid tud ar vro : eur pardon braz ! hag ivez eur gwir ziskouezadeg arzel gand e hoariva meur dirag chapel Sant Filiberz adnevezet ha feunteun Sant Roh.

Soazig : Pont-Aven, bro an arzourien ha bro ar varzed hag ar ganerien, méd ivez bro an dañserien ha bro an dillajou kaer. N'eus ket moarvad kaerroh koefou e Breiz Enor da vro Pont-Aven !

Tro-war-dro Pont-Aven

Soazig : Tro-war-droiou Pont-Aven a zo kaer da weled. Deom 'ta neuze d'ober eun dro.

Visant : Diskenn gand ar ster Aven betek ar mor, da lavared eo betek Porz-Meneh, a zo eun dudi.

Soazig : An Aven, izelloh eged Pont-Aven, n'eo mui eur ster, Méd kentoh eur vreh-vor ledan-kenañ, dreist-oll azaleg Tremour.

Visant : He riblou, evel ar ster Oded, a zo leun a hlazvez. Dislonka 'ra he dour, en eur zegouezoud er mor, ar memez genou gand ar Ster-Belon, hag a ziskenn, houmañ, diouz kostez Rieg.

Soazig : Eno eo e kaver an istr hag a reer anezo Istr ar Belon.

Visant : Ya, just ! n'eus ket, war a lavarer, gwelloh istr e Breiz. War ar Belon, ouz kostez Moelan, e kaver eur porzig pesketa kaer-kenañ, hag eno tost ema chapel Intron Varia Lanriot hag a zo sikour ar martolod, evel ma lavar ar hantik. Er bloaz 1962 em-boea gwelet benniga eno ar mor, deiz pardon braz Lanriot.

Soazig : E-kichenn Pont-Aven ez eus ivez eur chapel hag a zo brudet. Enni eo e kavas al liver Gaugin ar Hrist a reas dezañ eun daolenn anavezet mad, hag a reer anezi "Le Christ jaune" (Ar Hrist melen).

Visant : Chapelig Tremalo eo, e-touez ar gwéz, hanter-hent etre Pont-Aven ha Nizon, pe Nin evel ma lavar tud ar vro.

Soazig : Nizon, Nin. An ano kaer-ze a lavar din eun dra bennag !

Visant : Ya, eno eo ema maner Jenovefa Rustefan, a varvas gand ar c'hoant dimezi d'eur paotr yaouank eet da veleg. Mervel a reas deiz e overenn genta, kanet e Iliz Nizon. Diwar-benn an afer-ze e kaver eur werz fromuz kenañ en eul levr anvet ar Barzaz-Breiz bet savet gand an Aotrou Kervarker pe De La Villemarqué hag a zo, her gouzoud a rez, genidig euz Nizon. Sell, lenn amañ an daou boz diweza euz ar werz-se :

Soazig :

An Aotrou Yann Ficher 'zo person,
Person eo bremañ e parrez Nizon.
Meur a wech 'm-eus hen gwelet o ouela,
Tostig-tost da véz Jenovefa.

Kervarker

Soazig : Emaom eta e Bro-Gervarker pe de la Villemarqué, tad ar Barzaz Breiz. Méd, me 'zo sur, eur bern euz or zelaouerien ne ouzont netra na diwar-benn Kervarker, na diwar-benn ar Barzaz Breiz !

Visant : Gwir eo marteze hag an dra-ze a zo trist. Kervarker, bet o chom e maner ar genkiz, e Nizon, a zo unan euz on tud-veur.

Soazig : Evid ar re n' o-deus morse klevet ano euz ar Barzaz Breiz e-pad o studiou, lavarom dezo petra eo al levr-se.

Visant : Eul leor teo a 600 pajenn eo, bet moulet e trizeg yéz disheñvel ha bet kurunet gand Akademiez Bro-Hall. Brezoneg ha galleg a zo ennañ, keñver-ha-keñver. Ar voulladenn genta a zo euz ar bloaz 1839.

Soazig : Penaoz ha perag e-neus Kervarker savet al leor-ze ?

Visant : Perag ? Da genta gand ar c'hoant da zervicha e vro ha da zihuna spered ar Vretoned, morgousket neuze evid ar pezh a zelle ouz Breiz. Penaoz ? Gand sikour e vamm, an Intron vad a Nizon, eur vaouez vadelezuz hag a reseve en he maner e-leiz a beorien hag a gane dezi gwerziou koz brezoneg.

Soazig : Evel-se eo e-neus bet dastumet e varzonegou hag o lakeet en eul levr e-neus anvet "Barzaz Breiz", da lavared eo, dastumadenn barzonegou a Vreiz ?

Visant : Ya ! evel-se eo. Ar re genta a zo bet dastumet gand e vamm. Goude, eñ eo e-neus kendalhet, hag evid-se e-neus galoupet Breiz-Izel euz eur penn d'egile. Sikouret eo bet evid o reñka ervad gand eur beleg, an Aotrou Henry.

Soazig : Tamallet 'zo bet dezañ beza braoeet e ganaouennou ha zoken beza ijinet lod anezo !

Visant : Ya ! hag honnez a zo bet eur gwall afer. Méd hirio eo bet dizoloet an dornskrid. Lavared a heller int bet braoeet gantañ a-wechou Méd nann ijinet. N'eus forz penaoz, avad, ar Barzaz Breiz a jomo da veza Bibl ar Vretoned. Eun oberenn veur eo hag a dlefe beza lennet ha studiet piz gand kement Breizad a zo .

Soazig : Kervarker e-neus war e ano ouspenn ar BARZAZ BREIZ ?

Visant : Ya sur ! Sikouret e-neus bet ivez ar GONIDEG, Tad ar Brezoneg, da embann e heriaduriou galleg-brezoneg ha brezoneg-galleg. Embannet e-neus bet ouspenn gand eur studiadenn da heul "Mister braz Jezuz" pe "Burzud braz Jezuz", da lavared eo Pasion ha Rezureksion Or Zalver, euz ar bloaz 1530. Al levr-mañ, moulet er bloaz 1866, a zo ivez evel ar Barzaz Breiz, e galleg hag e brezoneg.

Soazig : Kervarker e-neus eta, evel-se, dastumet traou pouezuz koulz war dachenn ar relijion ha war an tachennou all ?

Visant : Ha skrivet e-neus ivez kalzig e galleg diwar-benn traou Breiz, amañ hag a-hont : kemend a skridou ma vefe diéz o niverenni.

Soazig : An toniou a gaver er Barzaz Breiz a zo anavezet c'hoaz gand ar bobl ?

Visant : Ya, rag kalz anezo a zo bet lakeet da gana kantikou. Sell ! ma karez, kan deom an hini brudeta anezo evel m'ema er Barzaz Breiz : Bale Arzur pe Kan brezel Arzur, roue Breiz war lein menez Are.

Soazig :

Deom deom, deom, deom, deom, deom d'ar gad !,
Deom, kar, deom, breur, deom, mab, deom, tad !
Deom, deom, deom oll, deom 'ta, tud vad !

Mab ar hadour a lavare,
'Lavare d'e dad, eur beure :
- Marhegerien war lein ar bre !

Marhegerien o vond e-biou,
Mirhed dindanno, glaz o liou,
Hag o hourichal gand ar riou.

Euz Kerfani d'ar Poull-du

Soazig : Goude beza chomet eur pennad mad war ar Breizad meur m'eo bet Kervarker, e karfen mond da aveli va fenn war ribl ar mor.

Visant : Deom neuze penn-da-benn gand an aot, euz Kerfani d'ar Poull-Du. Tremen a raim da genta dre gichenn chapelig Intron Varia Lanriot, e Moelan, porz ar Belon ha Kerfani.

Soazig : Moelan a zo eur barrez vraz, neketa ?

Visant : Unan euz ar brasa parreziou diwar ar mêz eo. Enni e kaver hirio c'hoaz 6.500 a dud. E-leiz a japeliou a gaver enni ivez : Sant Filibert hag on-eus komzet anezi dija, Sant Pèr, Sant Gwenael, Sant Kado ha re all c'hoaz ha ne jom anezo nemed dismantrou. Kavoud a reer ivez, war he douar, eun toullad mad a beulvanou hag a daolioumein.

Soazig : Intron Varia Lanriot ! Me 'garfe gouzoud hirroh diwarbenni.

Visant : Anaoud a ran ar japel Méd nann he istor. Méd n'eo ket eur japel goz. An dra-ze ne vir ket ouz ar pardon da veza darempredet kalz. Eet on bet, va-unan, da heul ar brosesion a ya kuit euz bourh Moelan diouz ar mintin hag a ra c'hweh kilometr war droad a-raog erruoud er japel evid an overenn-bréd. Goude benedikcion ar mor e Porz ar Balon e tistro ar brosesion d'an iliz. Setu amañ kantik Intron Varia Lanriot. Kan deom ar houblad kenta :

Soazig :

Intron Varia Lanriot

A zo sikour ar martolod,

Esperañs ar mammou kristen

Ha souten al labourerien.

Visant : En eur vond penn-da-benn gand an aot a-héd nao hilometr, e welim perzier-mor Brigno ha Merrien, gwaskedet ken brao er glaster, hag ivez hini Douelan a-raog degouezoud er Poulldu, e Parrez Kloharz-Karnoed.

Soazig : Ya. Ha goude e hellim sevel gand dour al Laita, beteg Kemperle, en eur ober eun arzaou dirag abati koz Sant Moriz.

Sant Moris

Soazig : Mond a raim neuze, gand ar mor o sevel, beteg Kemperle, dre ar Ster Laita ?

Visant : Ya, ma kavom eur vag er Poull-Du. Gwechall, pa oa Kemperle eur Porz leun a vuhez, kement-se a vije bet êz deom. Hirio n'eo mui ar memez tra.

Soazig : En eur vond e vefe mad deom chom a-zav da weled Abati Sant Moris.

Visant : A-dra-zur ! Red e vo deom rei da houzoud petra eo bet ar manati-ze. Chom a reas ennañ ar vuhez beteg ar Revolusion vraz.

Soazig : Gouzoud a ran eo bet savet gand Sant Moris, a zeuas di gand daouzeg manah euz Langoned, er bloaz 1117, war am-eus lennet e Buhez ar Zent.

Visant : Roet e oa bet dezo ar vro gaer-ze goloet a gojous war bord al Laita gand Duk Breiz e-unan, Konan ar Pevare euz an ano. Siwaz ! euz eur manati hag a zo bet ken gallouduz, ne jom mui netra koulz lavared, nemed sal vraz ar chabistr, euz an XIIved kantved. Méd bez' ez eo c'hoaz eur wir berlezenn evel kollet hirio e-kreiz ar glaster.

Soazig : War an tu kleiz, pa zaver gand al Laita da Gemperle, e kaver eur hoad braz hag a oa eno dija, moarvad, e amzer Sant Moris.

Visant : Koad an duk a reer anezañ pe Koad Karnoed pe c'hoaz Kêr ar hoad evid komz brezoneg e-giz bremañ. Karnoed : Kêr-an-hoed.

Soazig : Perag an ano-ze ?

Visant : Konta a reer e oa eno gwechall-goz eur hastell kaer : kêr ar roue kriz Konomor, e-noa bet seiz gwrég, bet lazet gantañ o-zeiz. Lesanvet e oa hennez ar Baro Glaz. Anaoud a rez an istor-ze a gonter aliez d'ar vugale.

Soazig : Eun dra bennag a jom c'hoaz euz ar hastell-ze ?

Visant : Ar roud anezañ ha netra ken, merket gand eur bern atred goloet a strouez.

Soazig : Eno neuze eo bet o chom Santez Trifina a lakaas er béd Sant Tremeur, goude beza bet lazet gand ar roue Konomor, he fried ?

Visant : Eno pe en eul leh all, rag meur a gastell e-noa. Ar pezh a zo sur eo e servije ar hastell-ze da Zuked Breiz pa zeuent da jaseal e Koad Karnoed. Ma karez, greom eur bourmenadenn dre ar hoad. En diskar-amzer eo eun dudi bale ennañ.

Penn-da-benn d'al Laita

Soazig : Mond a reom euz eur ster d'e-bén ha souezuz eo pegement int heñvel
Ar mor a ya enno lark-kenañ, beteg ugent kilometr hag ouspenn !

Visant : Al Laita eo ar ster nemeti hag a reseo ar mor euz eur penn d'egile
Komañs a ra just el leh uhella ma sav ar mor, da lavared eo e Kemperle

Soazig : Gwir eo, peogwir uhelloh eged Kemperle ez eus anezi diou ster : Ar
Ster-Izol hag ar Ster-Elle, hag an diou-mañ, en eur vond an eil en e-bén eo a ra
ar Ster-Laita

Visant : Ablamour da-ze eo anvet ar gêr KEMPERLE da lavared eo : Kenber
Elle : confluent de l'Ellé Pebez anoiou kaer, neketa ! Anaoud a rez ar barzoneg a
skrivas eur barz diwar-benno ?

Soazig : Ya 'vad ! desket em-eus bet an dra-ze er skol gwechall, en ho leor : Me
a zesk brezoneg Klevit ahanon ! soñj mad am-eus c'hoaz :

Mil ster a lamm euz ar menez ;
Hini nemed Ster goant Elle,
A vo par da Ster goant Izol

Visant :

O Ster-Izol, O Ster-Elle !
Dour hag ano, c'hwi 'zo flour oll
Bleuñv ha kan tro-dro d'ho kwele
O Elle flour, o flour Izol !

Soazig : Amañ war al Laita emaom etre daou eskopti !

Visant : Ya ! eskopti Gwened hag eskopti Kemper. Hag ivez etre daou
zeparthant : ar Morbihan ha Penn-ar-Béd. En eun tu ema Gwidel, en tu all
Kloharz-Karnoed. Genou al Laita eo a ra ar Poulldu, eur vro hag en em léd war
an diou barrez.

Soazig : Eur vro vrao, darempredet a-bell 'zo. Arzourien Pont-Aven a veze eno
dija e fin ar hantved diweza. Eur vatimant bennag a weler c'hoaz o pignad
gand ar ster ?

Visant : Bez' ez eus c'hoaz. Mond a reont da ziskarga trêz dreist-oll war kaeou
Kemperle. Gwechall e veze pesketet kalz eged enni hag ivez penn-da-benn
d'ar Ster-Elle. Hirio 'vad eo ken louz he dour ma varv enni ar pesked.

Kemperle ha Sant Gunthiern

Soazig : Kemperle ! Kemper-Elle ! eur gêrig vrao eo, en eul leh dudiuz-kenañ !
Eur gêr goz ivez moarvad !

Visant : Eur gêr goz hag a zo pinvidig he istor. Ganet eo bet ar gêr-mañ, evel kalz kêriou all e Breiz, én-dro d'eur manati.

Soazig : Kared a rafen gouzoud hirroh diwar-benn istor goz Kemperle.

Visant : Selaou neuze. Deom war-a-dreñv gand an amzer, beteg ar c'hwehved kantved ha klaskom gweled penaoz edo neuze al leh-mañ. Izol hag Elle a daol braoig o dour sklêr, an eil en e-bén, war eur gwiskad kaer a drêz alaouret. Setu perag e veze greet euz al leh-se "Anourot", da lavared eo "An aour-aot", an aot alaouret. War ar bég douar etre an diou ster, leun a beoh hag a hlaster, e teuas eur manah anvet Gunthiern da jom.

Soazig : Euz peleh e teue ar manah-se ?

Visant : Dond a ree euz Breiz-Veur da ober pinijenn pell diouz savar ar béd en abeg m'e-noa lazet mab e hoar, en eur ober brezel d'e enebourien. Heulia 'ree en e ermitaj reolenn galed Sant Kolomban. E zantelez hag e viraklou a reas da galz a dud dond da veva en e zerr. Evel-se eo e oe ganet kêr Kemperle.

Soazig : Ha Kemperle a zeuas buan da veza eur gêr vraz ?

Visant : Ha pinvidig. Ken pinvigig ma reas c'hoant d'an Normaned. Ar re-mañ a lammas warni dre vor, a laeras hag a rivinas ar gêr. Ar strouez a holoas an dismantrou ha ne veze mui gwelet war-dro nemed chaseourien.

Soazig : Méd, eun deiz e teuas Alan Kagnard, Kont Kerne, di ivez, da jaseal ar moh gouez.

Visant : Eur hastell-chase e-noa eno tost, el leh ma kouezas klañv-braz eun deiz. Pareet dre vurzud e kinnigas, e donezon, da vanati Redon "An Aour-Aot" el leh ma oe savet eun abati Sant Uriou pe Gurioe eo a oe an abad kenta.

Soazig : Hennez eo an hini a weler c'hoaz e véz dindan an iliz, en eur japel goz romaneg ?

Visant : Ya An iliz-se avad, iliz ar groaz Santel, hag a weler hirio, n'eo ket koz, daoust dezi kaoud eur stumm romaneg. Savet eo bet war-dro ar bloaz 1850, e plas eun iliz all hag a gouezas neuze en he foull. An tour koz a zo bet savet evel ma oa a-raog, Méd distag diouz an iliz nevez evel m'ema hirio.

Manati Sant Urlou

Soazig : Euz peseurt Urz e oa manati Kemperle ?

Visant : Euz urz Sant Benead, da lavared eo e oant Benediktined evel meneh Landevenneg.

Soazig : Pinvidig e oa ar manati-ze ?

Visant : Da genta ne oa ket, méd dond a reas buan da binvidikaad ha da veza unan euz ar manatiou galloudusa e Breiz. War an tu dehou d'ar Ster-Elle ha d'al Laita e-noa douarou braz ha zokén e meur a leh all e Breiz, dreist-oll e Enez ar Gêr-Veur, e galleg "Belle-Ile".

Soazig : Klevet em-eus e oa kalz milinou e kêr.

Visant : Ya, ar veneh o-doa amañ pemp pe hweh milin. Dezo e oa ivez ar pesked euz ar steriou, a veze enno neuze dluzed e-leiz hag eoged. Gwirioù a douchent c'hoaz diwar an holen, ar gwin hag ar foariou a veze war blasenn Sant Mikêl, lod anezo foariou braz kenañ, dreist-oll e-pad ar Zizun Zantel.

Soazig : Int 'oa eta evel rouaned ar vro ! méd ar garg o-doa ivez da zifenn an dud a oa dindanno ha da lakaad ar marhajoù hag ar foariou da vond én-dro, da zoursial ouz ar beorien ha da brezeg ar feiz kristen.

Visant : Evel-just, kement-se oll a oa en o harg. Sevel a rejont ilizou kaer : Iliz ar Groaz Santel (Sainte Croix) a zo bet savet ganto. Al lodenn gosa anezi a zo euz ar bloaz 1029. Sacha a rejont e kêr kalz marhadourien a ree d'ar hoñvers mond mad én-dro. Kêr a-béz a zeuas da veza pinvidig-mor.

Soazig : Hag o manati, pe oad a roer d'ar pezh a jom anezañ

Visant : Ar pezh a welom c'hoaz hirio a zo euz an XIIIved kantved. Ar manati a-raog a oa kalz kaeroh moarvad.

Soazig : Eun iliz all a weler c'hoaz e Kemperle.

Visant : Ya, war an uhel, e gorre-kêr, Iliz an Intron Varia eo hounnez, bet da genta gouestlet da Zant Mikêl. He zour teo, hirio divég, a zo euz ar XVved kantved. Eur porched euz ar re gaerra a zo war an iliz. En he hichenn eo e veze hag e vez atao ar marhajoù hag ar foariou.

Soazig : Plijoud a ra din liou an amzer dremenet a jom c'hoaz war eun toulladig mad euz he ziez koz, ha gweled a ran e laka tud Kemperle o foan hag o arhant da zerhel d'an tiéz-se stummou kaer an amzer wechall. Meuleudi dezo.

An Abati Gwenn

Soazig : Ouspenn eur manati a gaved e Kemperle a-raog ar Revolution ?

Visant : Daou vanati a oa neuze : an abati du hag an abati gwenn.

Soazig : Perag an anoiou-ze ?

Visant : Ar Venediktined a oa gwisket e du, hag ar re all, an Dominikaned, anvet ivez Jakobined, a oa gwisket e gwenn.

Soazig : Peur ha penaoz e teuas an Dominikaned e Breiz ?

Visant : Duk Breiz, Yann ar Rouz, en XIIIved kantved, eo a reas dezo dond. Sevel a rejont o manati war an tu kleiz d'al Laita, war zouar eskopti Gwened.

Soazig : Eskopti Gwened a oa neuze ken tost da Gemperle ?

Visant : Ya. A-raog ar Revolution e teue beteg al Laita penn-da-benn hag uhelloc'h eged al Laita. Ar Ster-Elle eo a ree an disparti etre an daou eskopti, da lavared eo Kemper ha Gwened.

Soazig : Parreziou Redene, Gilligomarh hag Arzano pe Arhanaou a oa neuze e eskopti Gwened ?

Visant : Evel ma lavarez. En-dro d'an abati gwenn war zouar eskopti Gwened eta, e savas eur gêr all, treuz en dour diouz e-bén. Anvet e oa Ar Vourh nevez (Le Bourgneuf). Foariou ha marhajoù a oa ivez enni : konkurañs a zavas etre an diou gêr, dreist-oll pa zeuas a-benn an Abati Gwenn da zavel eur pont etre an diou gêr, ar pezh ne blijas, tamm e-béd d'an Abati du.

Soazig : Hag e savas trouz etrezo moarvad !

Visant : Hag eur prosez hag a badas hir amzer.

Soazig : Koueñchou all a gaved c'hoaz e Kemperle ?

Visant : Ar Gapusined a zigouezaz er bloaz 1624, hag an Urzulinezed kant vloaz bennag goude. Ar re-mañ evid ober skol d'ar merhed.

Soazig : Setu eur gêr ha ne vanke ket dezi ar houeñchou !

Visant : Nann avad ! diou iliz, daou vanati, diou gouent, ha chapelioù Sant Mikêl, Santez Katell, Sant David, ha dismantrou iliz koz sant Kolomkan war ar marhad !

Soazig : N'eo ket unan euz duked Breiz eo a zo e véz en Abati Gwenn ?

Visant : Eo ! Yann Vontfort. Koll a reas e vuhez e emgann Henbont e-pad brezelioù Herez Breiz hag e gorf a oa degaset d'an Abati Gwenn e Kemperle el leh m'ema atao.

Soazig : Ar veneh n'int ket distroet ken da Gemperle goude ar Revolution ?

Visant : Nann. Leanezed a gaver bremañ en abati gwenn hag en egile ema an ti-kêr hag eun toullad burevioù dindan ar houarnamant.

Gwall-zarvoudou ha brezelioù

Soazig : Kêr Kemperle, koulz ha kêriou all, he-deus bet ouspenn amzeriou mad ?

Visant : Evel-just, evel e buhez peb dén he-deus bet houmañ ivez, plijadur ha displijadur.

Soazig : Goude eur zell war he istor, e welim ez eus bet warni, tro ha tro, naonégéz, dour beuz, kleñvejou hag ivez brezelioù.

Visant : Brezelioù, ya ! Brezel etre Yann Vontfort ha Charlez Bleiz da houzoud piou a zougefe kurunenn Vreiz. Kemperle a oa diouz kostez Yann Vontfort. Ar seziz a zo bet lakeet warni meur a wech gand eun tu pe egile. Ar Gwesklév, pe Duguesclin, a zeuas a-benn zokén da lammad dreist he mogerioù er bloaz 1373.

Soazig : Ha brezel al "Ligue" ivez, a gredan, a lakaas kalz freuz enni.

Visant : Freuz ha reuz, e gwirionez, er bloaz 1590. E-kreiz an noz, dre drubardèrèz, e hellas soudarded al "Ligue" antreal e kêr. Ne jomas war o lerh nemed distruj ha maro : laeret ar pinvidigezioù ha dibradet ar merhed da vond ganto.

Soazig : Traou gwall drist e gwirionez ! méd beb tro goude ar gwall-zarvoudou-ze, ar gêr, gand sikour ar veneh hag an oll, a zeue buan a-benn d'en em zével én-dro.

Visant : Ar vosenn ivez a gouezas war Kemperle, evid an eil gwech, er bloaz 1623, hag a gasas eun toullad mad a dud d'ar béd all. Neuze eo e reas tud Kemperle al le, pe ar bromesa, da vond bep ploaz e pelerinaj da japel ha feunteun Sant Roh e Moelan. Hag e kendalhont atao da vond.

Soazig : Beteg an Dispah Braz ne oe nemeur a jeñchamant e Kemperle, a gredan.

Visant : Diwar neuze, a-vad, an traou a jeñchas kalz. Ar veneh hag an noblañs a rankas tehed pe mond da guzad war ar mêz. Koulskoude, konta 'reer ne oe ket kement-se a freuz e kêr e-skoaz meur a gêr all. Unan euz meneh an abati du, Deveau e ano, a zeuas zokén da veza person republikan ha mêr. Mignon braz e oa d'an Aotrou Laenneg, tad ar medisin brudet euz Kemper.

Soazig : War a lavar an istor, kouent an Ursulinized a zeuas neuze eur prizon evid enebourien ar Republik.

Visant : Eur hrogad bennag a zo bet ivez neuze etre Chouanted ar Morbihan ha soudarded Kemperle. Méd dond a reas buan ar peoh hag e oe unaniez adarre etre tud Kemperle. An noblañs a zistroas. Ar veneh avad ne zistrojont ket.

Tud vrudet Kemperle

Soazig : Evel e Pont-Aven ez eus ivez, moarvad, tud hag o-deus staget o ano ouz Kemperle.

Visant : Bez' ez eus meur a hini. Komz a raim amañ, ma karez, euz tri anezo : ar manah Dom Moris de Beaubois, bet ganet e Kemperle, Brizeug, ar barz bleo melen, ha Matilin an Dall, ar bombarder laouen.

Soazig : An daou ziweza am-eus klevet ano anezo aliez, méd an hini kenta a zo dianav-krenn evidon.

Visant : Koulskoude e-neus lezet war e lerh eul labour braz ha talvouduz. Eun istorour eo bet.

Soazig : Eun istorour war istor Breiz heb douetañs !

Visant : Ya, eun istorour war istor Breiz, evel Dom Lobineau en e raog hag a oa manah eveltañ e abati Sant Melen, e Roazon. Evid dastum danvez da zevel e istor, e redas Breiz a-béz, euz eun abati d'egile, euz eur hastell d'egile, euz eun iliz-veur d'eun all, da furchal o diellou. Al leoriou a zavas diwar an diellou-ze a zo enno n'ouzon ket péd mil pajenn diwar-benn Breiz.

Soazig : Ar barz Brizeug a zo muioh anavezet. Gouzoud a ran eo bet ganet en Oriant, er bloaz 1803. Gouzoud a ran ivez eo bet o chom e presbital Arzano, gand e eontr beleg a oa eno person. Er skol, gwechall, soñj mad am-eus e tesken barzonegou berr tennet euz e leor kaer anvet "Marie".

Visant : Mari ar Vouster ! Anaoud a reas ar plahig-se hag a hounezas e galon p'edo o veva e presbital Arzano. Er hatekiz e vezent assemblez. Lennom eul lodennig euz ar barzoneg kaer a skrivas diwarbenni, en e leorig Telenn Arvor, rag skriva a reas ivez e brezoneg :

Soazig :

Pa zeuen ken trist dre ho kêr,
Na spontit ket, tud ar Vouster,
Me 'glask va hoant, n'on ket eul laer.

Visant :

Peleh ema ar plahig kaer ?
Na spontit ket, tud ar Vouster,
Me 'glask va dous, n'on ket eul laer.

Soazig :

Gand he hoof digor d'an avel,
Hi 'oa e-giz eun durzunell,
Pa 'n em zispak he diouaskell.

Visant :

Kollet eo an durzunell gér,
Na spontit ket, tud ar Vouster,
Me 'glask va hoant, n'on ket eul laer.

Brizeug

Visant : Komzom c'hoaz euz Brizeug ha peogwir e-neus savet kanaouennou e brezoneg, e rafes plijadur d'or zelaouerien, sur on, ma kanfes dezo unan euz e ganaouennou.

Soazig : Kana 'rin neuze. "Ni a zo bepréd Bretoned", war don "An hini goz" :

« O Breiz-Izel, o kaerra bro !
Koad en he hreiz, mor en he zro.
Ni a zo bepréd Bretoned, Bretoned, tud kaled.

Allaz ! ma tleen Breiz kuitaad,
Me 'ouelo leiz va daoulagad.

Mirit, breudeur geiz, ho penn-baz,
Ho pleo hir, ho pragou braz.

Gourenit mad, eur gourener,
E-neus kalon ar merhed kaer.

Me 'droho va zeod em bég
Kent dizeski ar brezoneg.

Koulskoude, dreist an oll vadou,
Karom ar Hrist, Doue on tadou. »

Visant : Ma tlean Breiz kuitaad, me 'ouelo leiz va daoulagad. Brizeug, neuze, e-neus gouelet kalz, rag ranket e-neus bet kuitaad Breiz evid gounid e dammig buhez.

Soazig : Méd distroet eo bet da Vreiz ! rag e gorr a zo douaret en Orient.

Visant : Marvet eo e Montpellier er bloaz 1858. E gorr avad a zo e bered an Orient. War e véz, evel m'e-neus skrivet e-unan, e heller lenn ar werzenn-mañ :

« Tal va béz, tud yaouank, c'hwi 'lakay eun dervenn
Hag an eostik klemmuz a gano war he fenn :
Brizeug, barz bleo melen, amañ, a zo beziet
Hennez a wir galon 'gare ar Vretoned. »

Matilin an Dall

Soazig : A-raog kuitaad Kemperle e vefe mad deom ivez lavared eur gér euz Matilin an Dall hag a zo ivez unan euz tud vrudet Kemperle. Perag e veze greet an Dall anezañ ?

Visant : Perag ? feiz ! ablamour ma oa dall. Méd an dra-ze ne vire ket outañ da veza eur zoner dispar. War a gonter, n'eus bet biskoaz, e Breiz, eur bombarder all par dezañ.

Soazig : Gwir eo ! hag ablamour da ze, hervez ar zon savet gantañ, ez eas da zeni da léz ar roue Loeiz Fulub e Pariz.

Visant : Ya, peogwir e lavar e unan euz e ganaouennou :

« Bet on e Pariz eun devez
O seni dirag ar roue
Hag eñ, koulz ha tud e balez,
Gand ar blijadur a hoarze,
A hoarze kreñv, a hoarze pell,
Heb gelloud miroud da hoarzin
O kleved an Dall Matilin
O tistaga toniou Breiz Izel. »
Méd peogwir eh anavezez ar zon-ze, kan anezi deom 'ta !
Soazig : Mar karit avad. Beh dezi neuze !

« Me eo Matilin an Dall,
Ar bombarder laouen
A lak an dud da zañsal
Diwar va barrikenn.
Eun taol sut ha souden,
Paotred skañv d'an abadenn
Eur bomm sonn ha raktal,
Paotred o fringal, ge !

Breiziz, va henvroiz karet,
Hirio siwaz ! me a zo koz,
Méd na péd gwech am-eus sonet
Da zañsal en deiz hag en noz.
Ma plij gand Santez Anna
E klevfot c'hoaz war an dachenn
Son skiltruz va bombard velen
O lakaad tud or Breiz da dridal. »

A-héd ar Ster-Elle

Soazig : Echuet on-eus gand Kemperle. Da beleh ez aim bremañ ? Ha ma 'z afem da vale eun tammig dre ar vro, héd-a-héd ar Ster-Elle.

Visant : Deom 'ta neuze. Ha da genta, greom eun droig beteg Arzano en eñvor d'ar barz Brizeug. Eno eo e valeim e gwirionez war e roudou.

Soazig : Brizeug ha dreist-oll Mari, fleurenn e garantez, o-deus bevet eno pa vezent, o-daou, oh heulia katekiz an Aotrou Person.

Visant : E-kichenn Pont-Kerlo, e parrez Arzano, ez eus eur monumant hag a zegas soñj anezo. Eno e vezent o-daou o c'hoari gand dour ar ster, o z Reid en dour, dindan ar pont koz. Brizeug e-unan eo a gan kement-se en eur barzoneg fromuz hag a grog evel-henn :

« Eun deiz ma oam azezet war Bont-Kerlo. »

Soazig : Ar monumant a welan aze, kuzet gand ar gwéz a boulz én-dro dezañ. Nag a jeñchament a dle beza deuet er vro abaoe ! Ha Dousig koant Brizeug, petra eo deuet da veza ?

Visant : Mari Pellen a oa he ano. Ne ouie tamm galleg e-béd ; setu perag n'he-deus ket morse lennet an traou kaer skrivet diwar he fenn gand an hini he hare.

Soazig : Lod a lavar n'eo ar Vari-ze evid Brizeug nemed eur skeudenn euz ar Vreiz a gare hag a wele en e spered evel eur plah yaouank karantezuz.

Visant : Marteze ! Mari Pellen a zimezas da vond da barrez Gilligomarh. Eno eo marvet. He béz a weler hirio c'hoaz, er vered, e-kichenn an iliz.

Soazig : Distroom war bord ar Ster-Elle.

Visant : Ya, hag en eur vond e welim eul leh kaer meurbed : eur bern reier hag a zav uhel o fennou a-zioh ar ster, evel pennou loened gouez, hag anvet ablamour da-ze : Reier an Diaoul.

Soazig : Lokunole a zo eno tost, neketa ? Daoust ha Sant Gwenole a vije bet deuet da jom war-dro amañ ?

Visant : Ne gav ket din. Méd meneh Landevenneg o-defe bet eur manati e bourh Langoned, hag o-dije skignet devosion o Zant Patron dre ar vro, hag ivez devosion Intron Varia 'r Folgoad peogwir he-deus houmañ eur japel e bered Lokunole. Salaun ar Foll, gouzoud a rez, e-neus klasket beza manah e manati Landevenneg.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Ar Faoued

Soazig : Ano a zo bet ganeoh, en dro diweza, euz Langoned. N'emaom ket pell diouz al leh-se ?

Visant : Nann, tamm e-béd ! c'hoant az-peus da vond di ?

Soazig : Perag n'ez afem ket, p'emaom ken tost all !

Visant : N'edo ket em zoñj mond er Morbihan. Méd peogwir e fell dit, n'on-eus nemed mond. Tremen a raim dre ar Faoued : bro ar fao, evel ma lavar an ano. Eno e e chomim a-zav da weled chapeliou Sant Fiagr ha Santez Barba.

Soazig : Klevet em-eus bet aliez a-walh ano anezo. Méd n'on bet morse ouz o gweled. Petra 'zo da weled e Sant Fiagr ?

Visant : Eur japel goz kaer-kenañ bet savet er XVved kantved en enor da Zant Fiagr, eur zant genidig a Iwerzon. Gouzoud a rez eo hemañ patron al labourerien-douar, pe kentoh ar jardinerien. Abalamour da ze e vez pedet kalz war ar mêz e Breiz-Izel. Ar pezh a gaerra a zo er japel-ze eo ar "jubé". N'eus ket kaerroh e nebleh, kizellet war goad.

Soazig : Setu-ni, neuze, erruet e Sant Fiagr. Pegen kaer eo an tour e-kreiz ar gwéz ! tri eo a zo, kentoh ! unan braz e-kreiz, hag unan bihan a beb tu.

Visant : Bremañ, deom da Zantez Barba. En eur dreuzi ar bourk e selli ouz ar hohu. N'eus hini all heñvel outañ nemed e Ploueskad. Hemañ a zo kaerroh ha brasoh.

Soazig : Santez Barba a vez pedet da ziwall ouz ar gurun : « Santez Barba, on diwallit diouz an tan hag ar gurun », a veze lavaret du-mañ gwechall er pedennou diouz an noz.

Visant : Gwir eo ! hag ar japel-mañ, just, a zo bet savet d'he zrugarekaad evid se. Eun Aotrou euz ar vro a oa o chaseal pa zirollas warnañ eun taol arne spontuz. Ar gurun a ziframmas diouz kostez ar menez eur mell roh a ruille war-eün d'e frigasa. Hemañ 'vad a bedas ar Zantez, ha kerkent ar roh a jeñchas hent. Dre anaoudegez vad e savas el leh gouez-mañ, ar japel a welez krapet ouz kern eur bern reier.

Soazig : Feiz ! talvezoud a ra ar boan d'he gweled. Hag al leh, na pegen brao eo ! Pegen don an draonienn a zo aze en traoñ ! Perag avad kement a skalierou mein ?

Visant : An dra-ze a zo evid ma hello ar bardonerien sevel ha diskenn én-dro d'ar japel, rag deiz ar pardon, e vez amañ e-leiz a dud. Peb pardoner a glask seni ar hloh a welez aze, disparti diouz ar japel, evid pellaad dioutañ ar gurun.

Langoned

Visant : E Langoned on-eus daou dra da weled : iliz koz ar vourh hag ar manati, eul leo pelloh war bord ar Ster-Elle. Houmañ 'ree an disparti, gwechall, etre eskopti Kemper hag hini Gwened. Hirio, evel m'am-eus lavaret dija, ema Langoned gand kanton Gourin a-béz e-barz eskopti Gwened, da lavared eo er Morbihan.

Soazig : Ar pezh a blij din, er vro-mañ, eo ar glaster. Ar gwéz, ar hleuziou a zo, evid c'hoaz, espernet. N'eo ket goudor a vank amañ d'al laboused, d'ar gedon, d'al lapined.

Visant : A drugarez Doue ! Diskennom bremañ da weled an iliz. Sell pegen koz, ha pegen souezuz ar pilierou en he diabarz !

Soazig : Ar gér a Langoned a verk e oa amañ eur manati, neketa ?

Visant : Lan Sant Kened moarvad. Hennez a hellfe beza bet, marteze, eur manah euz Landevenneg, rag meneh Landevenneg o-doa eur manati gwechall-goz el leh-mañ. Ne jom anezañ avad nemed an iliz-parrez.

Soazig : Deom buan bremañ, a-raog ma vo noz, da weled an abati all hag a zo c'hoaz en e zav, war bord an Elle.

Visant : Savet eo bet hemañ gand Sant Bernard e penn kenta an XIIved kantved. Evel a houzaout, ar zant-mañ a oa kustum da zevel e vanatiou e goueled an traoniennou, e-leh Sant Benead a zave e re war an torgennou. Unan a blije dezañ hiboud an dour, egile c'hwez kreñv an avel tost d'an neñv.

Soazig : Me a blij gwelloc'h din beva e goudor an traoniennou da zelaou kan al laboused e-kreiz ar prajou marellet. An avel vraz a ra aon din.

Visant : Pep hini e houd. Ar veneh kenta a zifraostas ar vro, a labouras an douarou, a blantaz gwéz frouez, ma teuas al leh-mañ da veza eur baradoz. En amzer-ze edo Sant Maoriz o rén en abati a-raog ma 'z eas da zevel e abati all war bord al Laita.

Soazig : Amañ ema bremañ Tadou ar Spered Santel o-deus roet kemend a visionerien d'an Iliz da vond da Vro-Afrik.

Visant : Ya, ar veneh o-deus bet ranket tehed e-pad ar Revolution. Dond a reas neuze ar manati da veza eur hraou-kezeg pe eun haras beteg ma oe prenet gand Tadou ar Spered Santel. Euz amzeriou kenta ar manati ne jom nemed eur zal vraz hag a zo kaer meurbed : sal ar Chabistr.

Soazig : Eun tad baro hir a zeu war-zu ennom. Laouen e vo sur a-walh da ziskouez deom diabarz ar gouent hag ivez da bourmen ahanom dre ar baliou hag ar chardinou.

Visant : Ha peogwir ema an noz o tond, e houlennim digantañ repu beteg warhoaz vintin. En eur manati e vezer atao degemeret mad.

Kernaskleden

Visant : Peogwir emañ er Morbihan, e karfen kas ahanout dioustu da weled ar gaerra iliz, bet savet e Breiz-Izel, en enor d'an Intron-Varia.

Soazig : Peseurt iliz eo honnez ?

Visant : Iliz Intron Varia Gernaskleden, pe Kernasen. Ahalenn, n'emaom ket pell diouti. Pa 'z eer d'ar Faoued ha da Langoned ez eer ivez da weled iliz Kernasen. Goude ar haloupadenn-ze er Morbihan, e tistroim d'ar Finister. Kemerom hent Prizieg. Eno, e chapel Sant Nikolaz, e welim eur "jubé" all, kaer-meurbed. Mond a raim goude dre ar Hroazti ha Sant Karadeg da Gernasen. Lohom buan !

Soazig : Ar vro a gendalh da veza ken kaer. Kalz gwéz atao, dre-oll. Ma vije bet an nevez-amzer, e vije bet skeduz ar mêziou gand kemend all a valan a beb tu d'an hent !

Visant : Gwir a lavarez. Treuzet em-eus bet ar vro meur a wech d'an ampoent-se, ha skoet on bet gand kemend all a gaerder. Setu amañ bourhadennig Kernasen, hag en he hreiz an iliz kaer.

Soazig : Lavaret e vije eun iliz-veur vihan gand kemend all a douriou warni, kizelladuriou dispar dre oll, ha daou borched mar plij !

Visant : Porched ar wazed hag hini ar merhed gand an daouzeg abostol. Eun iliz goteg eo euz ar XVved kantved. Famill vraz ar Rohaned he-deus bet sikouret sevel anezi. Méd deom en diabarz. Skoet e vezi gand meur a dra ha ne gaver e nebleh all e-béd.

Soazig : Eur gaer a Werhez Vari gand he mabig Jezuz ! Hag ivez livaduriou dispar hag o-deus en êr da veza koz.

Visant : Euz ar XVIved kantved int. Ar re a zo aze d'an neh euz ar bolziou, er heur, eo ar flamma.

Soazig : Lavaret e vije emaint a-nevez beza bet livet ! Hag ar re all du-hont war ar mogeriou, sell 'ta pegen souezuz int !

Visant : Souezuz ? Skrijuz kentoh. Diskouez a reont, war eun tu, dorn ouz dorn, o tañsal gand an Ankou, oll bennou braz ar vro, tud a Iliz ha tud all, ha war an tu all, sell ! eo taolennet an ivern. Paol Gornog hag e vevelien o kastiza pep hini dre beleh e-neus pehet. Eun daolenn all damheñvel, a gaver c'hoaz e Kermaria-an-Inskuit, e eskopti Sant-Brieg.

Soazig : Leurenn an iliz a welan a zo teir bazenn anezi !

Visant : Ya, teir leurenn uhelloh-uhella a ranker da bignad da vond beteg an aoter vraz, teir derez ar zantèlèz, skeudenn an Dreinded Santel.

Skaer

Soazig : Distroom bremañ buan d'ar Finister.

Visant : Krog neuze e rod-stur an oto ha war-eün da Skaer, dre ar Faoued ha Gwiskri.

Soazig : Gwiskri ha Skaer eo bro ar ar hourenerien, neketa ! Soñj am-eus da veza lennet kement-se e leor an Aotrou Martin, anvet Mouez Kerne. Evel-henn e tigor gantañ e leor : Skaer, Gwiskri ha Gourin, gwir vro ar hourenerien.

Visant : Ya, ar hrogadou gouren etre tud Skaer ha tud Gwiskri a zo chomet brudet en amzer dremenet. El leor e kaver eur foto souezuz : eur park tirienn leun a hourenerien, hag a dud, gand eur maout hag eur wern uhel e-kreiz ar park, outi priziou a beb seurt o tistribilla ha dindan e lenner ar homzou-mañ bet skrivet gand Brizeug :

Soazig : Scaër l'emportait partout, Scaër le Pays des luttes et des joyeux chanteurs aux savantes disputes."

Visant : Emaom neuze war-dro fin ar hantved diweza. Iliz Skaer a zo bremañ eun iliz nevez. An tour koz, killog hag all, a zo bet eet da barrez Gwiskri, ar pezh e-neus lakeet eur barz yaouank euz an amzer-ze, da skriva eur barzoneg hir-kenañ diwar-benn eur pegad etre an daou gog, kog Skaer ha kog Gwiskri. Kemend-all 'zo bet c'hoarvezet ivez etre Treboul ha Douarnenez.

Soazig : Farsuz-kenañ eo ar barzoneg-se, e brezoneg flour ar vro, hanter-hent etre brezoneg Penn-ar-Béd hag hini ar Morbihan. Alia a ran or zelaouerien da lenn kement-se e leor an Aotrou Martin, "Mouez Meneou Kerne", m'o-deus tro da gavoud al leor plijuz-se eun tu bennag.

Visant : Kavoud a raint ennañ da lenn eur bern traou all evel pardon Skaer, kontadennoù euz ar vro, barzonegoù berr a beb seurt, krenn-lavarioù pe "proverbes" ha divinadennoù ivez.

Soazig : Divinadennoù ! Soñj am-eus c'hoaz euz houmañ. Roit din 'ta mar gellit ar respont anezi :

Petra 'ra al labous 'barz ar hoad

Pa ne bouez nemed war eun troad ?

Visant : Petra 'ra ? Feiz, sevel e droad all !

Mein Koadri (Koad Ri)

Soazig : Komzom c'hoaz euz leor an Aotrou Martin : "Mouez Meneou Kerne". Eul leor eo da veza lennet gand tud ar vro-mañ hag ivez gand kement hini a studi ar brezoneg. Klasket em-eus ennañ, Méd en aner, gouzoud petra zinifi an ano "Skaer". Souezet-kenañ on gand an ano-mañ pa n'eus "plou" e-béd ennañ.

Visant : Ya. "Skaer" a hellfe beza bet marteze "Plougaer", peogwir he-deus ar barrez-se e-giz patronez Santez Candide a hellfe beza troet gand ar gér Kaer e brezoneg. Unan bennag e-neus lavaret din e vefe deuet Santez Kaer da veza Skaer war muzellou tud ar vro, techet da verraad atao o brezoneg.

Soazig : Gourvil, koulskoude, en e leor "Noms bretons d'origine toponymiques", a lavar kentoh e teu ar gér-ze euz ano eur mên hag a gaver kalz er vro, anvet hirio mên Koadri pe "croisettes" e galleg, pe c'hoaz "staurotides".

Visant : Kavet em-eus bet, va-unan, euz ar vein-ze, dezo furm eur groaz, er parkeier nevez labouret. Neuze, dilavet gand ar glao, e vezont êz da gavoud. Gwerzet e vezent gwechall e pardon Koadri én-dro d'ar chapel goz a gaver etre Skaer ha Kore. Evid ar bardonerien, ar vein-ze o-doa ar vertuz da barea diouz kleñvejou 'zo. Setu perag peb pardoner a yee d'ar gér gand eur mên bihan en e jakot.

Soazig : Ha ma 'z afem neuze beteg Koadri ? Ne anavezan ket ar japel-ze. N'eo ket dao deom dalea e bourh Skaer, n'eus ket amañ a draou koz da weled, nemed, marteze feunteun Santez Candide.

Visant : Yao ! neuze, da Goadri Koad-Ri ! Méd n'eus mui koad e-béd eno. Sur eo, avad, ez eus bet. Ar japel a zo koz. Roud an XIved kantved a zo warni. Setu-ni erruet. Kroaziou koz, e mein, a zo én-dro dezi, evel ma welez. Savet eo bet ar japel-mañ en enor da Zant Yann Vadezour, ar pezh a ziskouez eo labour soudarded an Templ pe "Templiers". Hirio e vez greet anezi : Chapel Krist, pe Chapel an Aotrou Krist.

Soazig : Deom e-barz. Statuiou koz, kaer-kenañ, a welan a zo enni. Ar re-mañ, ar Werhez ha Sant Yann a beb tu d'ar groaz, eo ar re gaerra. Setu Santez Anna, Santez Appoline, Sant Alar, Sant Vaodez hag Or Zalver lakeet er béz. Bremañ, a-raog mond kuit, e karfen kaoud eur mên evel ar re ho-peus komzet din anezo. Ral int, peogwir n'o haver nemed amañ.

Visant : N'on-eus nemed, neuze, mond d'ober eur valeadenn dre ar parkeier tro-war-dro. Ma n'az-peus ket aon da louza da voutou, or-bo ar chañs, marteze, da zizolei unan bennag.

Yannig hag e gaz

Soazig : An Aotrou Per Martin, bet person e Gourin, e-neus bet, emezoh, skrivet kalz e brezoneg. Ar rimadell “Yannig hag e gaz”, hag ho-peus bet roet aliez da zeski d’ar vugale evid konkouriou ar Bleun-Brug, a zo savet gantañ, a gav din.

Visant : Ya ‘vad ! marteze, peogwir n’ema mui ar vugale-ze war on tro (lod anezo a zo dimezet a-benn bremañ) e hellfes, te, da-unan, displega anezi deom.

Soazig : Gand plijadur ! Selaouit neuze :

Azezet war dreuzou an ti,
Daou glohig e skourr ouz e fri,
Yannig a grign e grampouezenn
E gaz bihan en e gichenn.
Ar haz a ra chiboudou ken brao,
A astenn ken flourig e bao,
Ma kréd Yann e-neus e gaz
Evitañ eur garantez vraz.
P’e-neus ar haz e du kavet
Krapouezenn Yann a zo skrapet
Ha Minouz a dap héd e harr
‘Vid mond d’ober eur préd dispar.
Ha neuze Yannig difaziet
Da hopal d’ar haz dichapet :
« Me zoñje e oas din mignon !
D’am hrampouezenn eo, tamm ampoezon
Gwelloh eo eur gwir enebour
Eged eur hoz mignon treitour. »

Visant : Evid echui gand Per Martin ha bro Skaer, eun tañva ivez euz e “Furnez Breiz” pe zastumad Krennlavariou.

Paneved ar gemenerien
Ve eet an dud gand ar helien.

Soazig :

Laerez an amzer hag ar boued
Brasa pehejou ‘zo er béd.

Visant :

Ar prener a damall ar pez a gav ar gwella,
Hag ar gwerzer a veul ar pez ne dalv netra

An eil hag egile, 'vid gounid eun diner
A laro meur a haou a-raog distrei d'ar gêr.

QuickTime™ et un décompresseur sont requis pour visionner cette image.

Ar Menezioù Du

Soazig : A-raog kuitaad Skaer e vije bet mad deom d'ober eur gwél da uzin Kaskadeg hag a zo eur vilin-baper evel hini Oded e parrez an Erge-Vraz pe "Ergué-Gabéric".

Visant : Gwir eo ! méd d'ar mare-mañ ne zeblant ket an traou trei gwall vad gand ar milinou-ze. Mantruz eo ! rag rei a reont labour da galz a dud euz ar vro hag ivez peadra da veva deread. Mond a raim d'o gweled eur wech bennag all.

Soazig : Kore a zo amañ, tost Leuhen ha Tregourez ivez. Ha mond raim di ?

Visant : Gwelloh deom mond war-eün dioustu da vourh Laz, bro ar Menezioù Du. Ale, yao ! Eno or-bo meur a dra da weled ha da zeski.

Soazig : Ha pa ne ve kén nemed ar vro ken kaer all ! Komzet on-eus dija euz Kastell-Nevez-ar-Faou pa 'z eus bet ano ganeom euz Aotrou ar Faou.

Visant : Ya, eun nebeudig. Méd n'ez eus bet ano e-béd ganeom euz ar Menezioù-Du leun a dorgennou.

Soazig : Perag ez eus bet greet "Menezioù Du" euz an torgennou-ze ? N'int ket uhelloh eged ar Menezioù Are.

Visant : Nann. Nemed marteze da weled pa zeller outo a-bell, pa zeuer euz Montroulez da Bleiben pe euz ar Faou da Gastellin. An tu eneb d'an heol eo a weler neuze, ar pezh a ro dezo eul liou du.

Soazig : N'int ket ken uhel ha Menezioù Are ?

Visant : Eun tammig int izelloh. Menez-Hom, evel m'on-eus gwelet, eo o hern uhella : 330 metr. Mond a ra goude o zorgennou war izellaad eun tammig dre ma 'z eont war-zu ar zao-heol : Menez-Lokorn, Menez-Kelh, Garreg an Tan ha menezioù Laz. Pelloh, war-zu Gourin, ema Roh Toull-Laeron.

Soazig : Menezioù Laz eo a blij din ar muia. Kalz gwéz a zo warno pe én-dro dezo. O herniou ivez a zo sonnoh, evel berniou reier savet uhel o fennou ganto dreist ar glaster.

Visant : Me ivez a lavar evel dout. Plijadur or-bo eta o weladenni ar vro-ze.

Bloavez mad

Soazig : Deread e ve deom hirio, gand diviz kenta ar bloaz nevez, ober evel ma ra an oll, da lavared eo, soueti eur bloavez mad d'or zelaouerien.

Visant : Mad a rez, Soazig, lavared din an dra-ze. Anez, kenkoulz all am-bije bet ankounac'haet. Penaoz e raim an dra-ze ?

Soazig : Evidon, me a raio evel ma veze greet du-mañ e Mespaul pa oan yaouank. D'ar re oll a zo ouz va zelaou e lavaran : « Eur bloavez mad a zouetan deoh, kalz re all ouspenn, hag ar baradoz da fin ho puhez. »

Visant : Mad eo ! me avad a lavaro evel ma reer e Kerne : « Eur bloavez mad a zouetan deoh, yehed ha prosperite, hag ar baradoz e fin ho puhez ! »

Soazig : Meur a zoare all a zo c'hoaz da zoueti ar bloavez mad ?

Visant : Eur bern ! klevet am-eus bet a beb seurt. Re ziriuz ha re farzuz. Siriuz evel hemañ : « Eur bloavez mad da bep hini hag eürusted leiz an ti. »

Soazig : Perag e lavarit "re farsuz" ? Daoust hag e heller soueti ar bloavez mad en eur farsal ?

Visant : On tadou a veze ganto bommou farsèrèz aliez nemed pa gomzent euz Doue hag ar maro.

Soazig : Penaoz 'ta e souetent ar bloavez mad en eur farsal ?

Visant : Selaou ! klevet em-eus va zad koz o lavared :

Koz ha yaouank, kuitubinan,
Bloavez mad dezo a reketan,
Dillad didoull war ho tiskoaz,
Labour didorr, yod silet poaz,
Kerh ha gwiniz leiz an irhier,
Kaol ha panez er parkeier,
Krampouez lardet a-gorvajou,
Kig ha farz a-grabanajou,
Amann melen leiz ar ribot,
Da gousked beb a wele blod,
Eul lomm gwin-ardant d'ar wazed,
Eun tasad kafe d'ar merhed,
'Héd ar vuhez kalon laouen,
Hag en Neñv beb a gurunenn.

Soazig : Brao-kenañ ho rimadellou ! Me 'zesko anezi dindan eñvor. Ha kredi a ran ne vo dén trist e-béd ouz va hleved.

Bleizi

Visant : De Fréminville hag a skrive war-dro ar bloaz 1830, a lavar en e leor, ne gavas penn kristen e-béd war e hent pa 'z eas euz ar Hastell-Nevez betek Maner Trevarez : Eur vro houez, emezañ, leun a goajou.

Soazig : Koajou a oa eta, d'ar mare-ze dija, ouz menezioù Laz ?

Visant : Ya, koajou don, leun enno a hedon hag a lapined, Méd ivez a lern hag a voh-gouez hag ivez a vleizi.

Soazig : Abaoe pell 'zo, koulskoude, n'eus ket mui a vleizi e Breiz !

Visant : Ar pezh a zo gwir. Méd an anioù-lehiou a lavar deom ez eus bet kalz anezo gwechall-goz. Klevet em-eus gand ar re goz meur a istor bleizi pa oan yaouank. Ablamour dezo eo e veze lakeet d'ar chas kolierou gand poentennou lemm outo o begou en diavêz.

Soazig : Abalamour, ar bleiz pa lamm gand ar hi, en e houzoug eo e krog da genta.

Visant : Er bloaz 1874, eur strollad a eiz den hag hanter-kant, en o fenn al letanant Fougerous, a zeuas da jaseal ar bleizi da goajou Laz. Laza a rejont pemp mellad bleiz euz ar re gaerra hag o-doa taolet ar spont dre ar vro. Deñved, leueou bihan a oa eet ganto, ha meur a wech zoken o-doa klasket taga an dud.

Soazig : Feiz, ma tiskouezfe eur bleiz ganin, me am-befe aon !

Visant : Bez dizoursi, n'eus ket mui anezo dre amañ. Méd kant hanter-kant vloaz 'zo ne oa ket ar memez tra. Pa veze kaled ar goañv ha p'o-deveze naon, e tostaent ouz an tiegeziou da glask eun dra bennag da lonka. Ar vugale zoken o-doa da ziwall outo.

Soazig : War am-eus klevet, ar chas a zante buan o hwez. Ganto e veze klevet neuze harzadennou truezuz. Harz ar bleiz a veze greet euz an dra-ze.

Visant : Neuze ar wazed a rede gand o ferhier hag o filhier houarn. Méd kaer o-doa ober, ne hellent ket atao mired ouz maleuriou d'en em gavoud.

Soazig : Klevet ho-peus ano euz eur maleur bennag erruet evel-se ?

Visant : Person Gwineventer, e Bro-Leon, a skrive e 1697, beza bet interet eur paotr 11 vloaz bet laz et hag hanter zebret gand eur bleiz. E parrez Henvig ivez e c'hoarvezas ar memez tra bloaz war-lerh.

Roh Plên

Soazig : Kared a rafen hirio, p'eo sklêr an amzer, pignad war gern uhella ar menez evid gweled ar vro.

Visant : Pignom neuze war Roh-Plên. Dirag an ti-gard, war hent ar Hastell Nevez, e rankim diskenn ha mond goude war-droad. N'ez-peus ket aon da grabisad da zivesker ouz an dréz hag ar spern ?

Soazig : Tamm e-béd. Teurel evez a rin. Setu-ni neuze war ar roh. Plad eo evel eur grampouezenn war ar billig. Ha na pegen kaer an taol-lagad diwarni !

Visant : Er hontrol d'ar meneziou all, peurvuia moal o heinou, warno hepkén brug ha lann treud, Menez-Laz, evel a welez, a zo goloet a goajou, dreist-oll diouz kostez an hanternoz.

Soazig : Lavarit din 'ta petra a weler ahalenn.

Visant : Ster-Aon pe ar Ganol a ya euz Brést d'an Naoned eo a lugern aze én traoñ. Lennon ha Pleiben a zo dirazout. Brazparz én dremmwél, e-harz treid Menez-Mikêl, Kastell Nevez ar Faou gand tour lemm Intron Varia ar Porzou, amañ da dosta, ha Sant-Wazeg war an tu dehou. Goude ema Spezed, Landelo, Kleden-Poher ha Karaez, hag en tu all da Venez Toull-Laeron, ema Gourin er Morbihan.

Soazig : Amañ emaom brao da varvaillad eun tammig Eun istor bennag a houzh c'hoaz marteze d'ober din skrija evel deh, pa gomzeh euz ar bleizi.

Visant : War-dro ar XVIIved kantved ez oa, war a gonter, kalz a zorserien er Meneziou Du, sorserezed dreist-oll. E buhez an tad Maner hag a zo beziet amañ tost, e iliz Plevin, e komzer kalz anezo.

Soazig : Sorserien ! Sorserezed ! O va Doue !

Visant : En em voda a reent e-kreiz al lanneier gouez, ouz skleur ar gouleier rousin, da ebatal gand an diaoulou hag an dud o-doa gwerzet dezo o ene. Ar Zabat a veze greet euz an abadenno-ze.

Soazig : Klevet em-eus bet du-mañ, gwechall, eun toullad istoriou diwar-benn paotred ar zabat.

Visant : Evel-se, ya, e veze anvet ar gornandoned gand Leoniz. An diaoul hag e gerniel a gase én-dro an abadenno-ze. Enno e veze adoret Satan hag e vevelien. A-zioh an abadenn e fiched atao eur banniel du, warnañ poltred eur bouh, arouez ar gevredigez ivern.

Soazig : A-walh ! a-walh ! pe e troio va spered e dour !

A beb seurt

Visant : A-raog diskenn diwar Roh-Plên, komzom, ma karez, euz meur a dra all. Gouzoud a rez pegen uhel emañ.

Soazig : N'ouzon ket avad. Ankounac'haet em-eus, abaoe pell 'zo, va hentel douaroniez war ar poent-se.

Visant : 305 metr a uhelder. Hag emañ, evel e Kelern e Roskanvel, evel e Garreg-an-Tan e Gouezeg, e veze c'hwezet tan da gas keleier a-bell : dilestradeg an Normanded pe ar Zaozon peurvuia. Evel-se, euz eun tan d'egile, ar helou a helle ober 236 kilometr en eun nozvez a viz kerzu.

Soazig : War a gonter, e veze implijet an doare-ze da gas keleier, n'eo ket hepkén gand ar Halianed, Méd ivez gand ar Romaned, ha war o lerh, gand ar poblou all beteg ar Grenn-Amzer.

Visant : Emaom emañ ivez e bro ar vein hlaz. Darn a gred dezo e teu ar gér Laz ahalese. Marteze eo gwir. E-leiz a vengleuziou mein hlaz a zo bet penn-da-benn d'ar Ster-Aon. Chom a ra c'hoaz unan bennag, a-drugarez Doue. Méd nebeud e-skoaz ar pezh a zo bet.

Soazig : N'eus ket bet a dud vrudet genidig euz ar vro-mañ ?

Visant : Eo ! Trelluz a Vêzgouez, méd dreist-oll Loeiza ar Bot du Grego euz maner koz Trevarez. Mestrez e oa houmañ d'ar jeneral Hoche. Dre-ze, e konter, he-deus bet c'hoariet meur a dro-gamm d'ar Chouanted, dreist-oll da-geñver dilestradeg Kiberen. Tamallet eo bet dezi ivez beza gwerzet d'ar re hlaz ar jeneral chouant Charrette. Dimezi a reas erfin, goude beza en em roet da nousped hini all, d'ar beskонт ruz Bonté. O beziou a gaver c'hoaz e bered Sant Wazeg, hanter guzet dindan ar strouez.

Soazig : Chouanted a dle beza bet dre emañ ivez, a-dra-zur, en eur vro ma helled enni en em guzad ken brao.

Visant : Unan a zo bet chomet e memor ar re goz : ar Gow a veze greet anezañ. War-lerh Le Cat, muntrer an Aotrou Audrein, eskob intru Kemper, e teuas da veza kabiten Chouanted ar vro. Klask a oe warnañ. Mond a reas da guzad en eur gêriadenn e Laz, el leh ma 'h en em zifennas beteg ar maro, pa gouezas warnañ ar re hlaz. Evel-se e varvas Kabiten braz Chouanted ar Meneziau-Du.

Soazig : E peleh eo bet lazet an Aotrou 'n Eskob Audrein gand ar Chouanted ?

Visant : E parrez Kerfeunteun, e-kichenn Chapel Sant Herve war hent koz Kemper-Kastellin. Edo o vond da Vrést gand an "diligence" pa gouezas warnañ Le Cat hag e dud.

Maner Trevarez

Visant : Marteze out bet dija e Maner Trevarez ?

Soazig : N'on ket bet avad, Méd klevet em-eus bet ano anezañ. Gouzoud a ran eo perhennet bremañ gand an Departamant hag eo digor d'an oll, bemdez, nemed da veurz, war-bouez paea eun draig bennag, evel-just.

Visant : Mad, deom 'ta neuze ! Ar merher a zo. Setu-ni e-barz ar vali vraz a gas war-eün d'ar maner. Ma vije bet an nevez-amzer, ar girzier rododeñdron a beb tu a vije bet leun a vleuniou. Bez' ez eus lod anezo hag a vez ruz-moug.

Soazig : Petra eo an ti braz a zo war an tu kleiz ?

Visant : N'eo ket eun ti eo, Méd ar hraou-kezeg. Sell 'ta pegen braz eo ! Goullo eo bremañ. Eet eo kuit ar mirhed hag ar haroñsou. Eur mirdi eo deuet da veza da ziskouez a beb seurt traou koz, bet kavet war-dro amañ, en douar, gand eur strollad furcherien.

Soazig : Setu neuze, ar maner, an hini 'zo bet savet gand ar Markiz de la Ferronnaie e fin ar hantved diweza ! Eur haer a gastell eo, dign euz ar priñs pinvidika. Hirio avad eo eun druez da weled ! Ne heller ket mond e-barz ?

Visant : Re fall eo e stad abaoe m'eo bet bombezenet gand ar Zaozon da glask paka an ofiserien a vor almant a ree ennañ o demeurañs e-pad ar brezel diweza. Eul lodenn vad euz an doenn a zo toullgovet, ha glao a ra e-barz.

Soazig : Ar flourenn a zo dirazañ a zo kaer meurbed ivez. Deom da heul ar baliou a zo du-hont dindan ar gwéz. Eul lennad dour reñket brao a zo penn-da-benn dezo. Pebez dudi pourmen dre amañ !

Visant : An hent a ziskennfem warnañ, aze dindan ar gwéz, a gasfe ahanom beteg an tiegez-atant a zo en traoñ. Eur ferm-skwér eo, leh ma reer a beb seurt taoliou-êsa a zell ouz al labour-douar, da glask an tu da wellaad atao ar chatal pe an trevajou.

Soazig : Feiz, pa zeuio an nevez-amzer, me a zistroio amañ. Felloud a ra din gweled an domani-mañ en e gaerra toud. Ar péz a laka ahanon souezet avad eo gweled e vije lezet ar maner er stad m'ema. Perag ne vez ket kempennet ?

Visant : Re gér e koustfe. Ha neuze, peogwir n'eo ket eur maner koz, e kaver eo dibourvez a dalvoudègèz istorel.

Intron Varia ar Porzou

Soazig : Goude beza komzet keid-all euz Bro-Laz, ha ma 'z afem bremañ d'ober eur pelerinaj da Intron Varia 'r Porzou ? N'om ket evid tremen ken tost d'ar japel heb mond beteg enni.

Visant : Nann sur ! eur pehed e ve. Amañ, sell ! Er hoad a oa amañ neuze, eo e oe dizoloet skeudenn ar Werhez gand aotrou ar Hastell-Nevez. Ar skeudenn goad-se eo a zeuas da veza Intron-Varia 'r Porzou.

Soazig : Komzet on-eus bet dija anezi, pa 'z eus bet ano ganeom euz ar Faou, neketa ?

Visant : Ya, eun nebeud. Méd red eo gouzoud hirroh diwar-benni. Euz an amzeriou kosa ne jom e-giz test, nemed ar porched koz ha statu ar Werhez gand he mabig Jezuz.

Soazig : Soñj am-eus eo bet enoret kaer Intron Varia 'r Porzou, gand ar Bleun-Brug, er bloaz 1965. An abadenn-veur a daolennas he istor dirag eur mor a dud, aze, en eur park leton, war bord ar Ster-Aon.

Visant : Pebez prosesion gaer goude, euz ar park beteg ar japel, ouz kan ar hantik a dregern eno bep ploaz abaoe kantvejou. Kan anezañ deom 'ta !

Soazig :

Intron-Varia 'r Porzou,

Klevit mouez ho pugale.

Héd or buhez en or poaniou

On diwallit noz ha de.

Evid dond d'ar Hastell-Nevez,

Pelerined gand gwir feiz,

Da enori gwir vamm Doue

A-dreuz pevar horn or Breiz.

Visant : Gouzoud a rez perag e reer anezi Intron Varia 'r Porzou ?

Soazig : Ya, ablamour Aotrou ar Hastell-Nevez a lakaas ar skeudenn vurzuduz, kavet gantañ, a-zioh porzou pe doriou e gastell.

Visant : Intron Varia 'r Porzou a zo unan, te 'oar, euz pemp Gwerhez kurunet an eskopti hag an dra-ze a-berz ar Pab, gand Rumengol, ar Folgoad, Kernitron, ha Pennhorz. Ar pardon braz a vez bep ploaz d'an trede sul a viz Eost. Ar japel genta a zo bet savet gand an Duk a Vreiz Yann V. Ar japel a zo bremañ a zo euz ar bloaz 1880. Méd statu ar Werhez, an hini a welez aze war he zron, a zo euz ar XVved kantved. Kurunet eo bet er bloaz 1894.

Chapel ar Porzou

Soazig : Ar japel a zo amañ bremañ da Intron Varia 'r Porzou n'eo ket koz. Daoust hag anaoud a reer eun dra-bennag euz ar japel a oa en he raog ?

Visant : Nebeudig a dra. Sur eo ez oa kaerroh eged an hini a weler bremañ. Evid her hredi, gra eur zell ouz ar porched koz miret aze e-kichenn.

Soazig : Lavaret ho-peus bet e-neus bet Yann V a Vreiz sikouret sevel ar japel genta.

Visant : Ya. Ha chom a ra c'hoaz en on diellou koz, eul lizer euz e berz, bet kaset gantañ euz Kastell an Erminig, er bloaz 1440.

Soazig : Ha petra a lavar al lizer-ze ?

Visant : Setu amañ : « D'an oll dud vad karget da zastum arhant an taillou, salud ! Evid ma hello Yann ar Prad echui chapel Intron Varia 'r Porzou, on-eus ar blijadur da rei an diskarg euz an taillou dleet d'ar vro, da gement hini a zikouro sevel chapel Intron Varia ar Porzou. »

Soazig : Hag e oe klevet goulenn Duk Breiz gand tud ar Vro ?

Visant : Pep hini a fellas dezañ rei sikour da zével chapel an Intron Varia ar haerra posubl. Zokén e savas heligenta etrezo da houzoud piou a raje ar muia. Mengleuzerien en em ginigas da denna mein, mañsonerien da zével ar mogeriou, kizellerien da gizella ar vein benèrèz, labourerien-douar d'ober charreadou, toerien da lakaad an doenn ha kilvizien da labourad ar hoad. Ar merhed o-unan, a vroudaz diwar o houst an dillad overenna.

Soazig : Kaer eo an dra-ze ! N'eo ket souezuz eta e vije bet ken karet ha ken darempredet ar japel-ze gand tud ar vro. O zi eo !

Visant : Brud ar japel a yeas da bell. Tud ar mêziou ha tud ar hêriou, euz Breiz-Izel a-bêz, a ziredas da bedi d'ar Porzou, e chapel vrao an Intron Varia, da houlen diganti beza bepred evito "Dor ar Baradoz".

Gwall-amzer war ar Porzou

Soazig : Komzet on-eus dija euz gwall-amzeriou dirollet war Vreiz. War ar Porzou ivez ez eus bet savet a-wechou koumoul du ?

Visant : Evel el leh all. Er bloaz 1593, eur vandenn zoudarded, en o fenn an Aotrou Liscoet, a zaillas war ar Hastell-Nevez hag a reas kalz a zroug. Hemañ a oa eun Hugunod.

Soazig : Peseurt droug a reas 'ta an Hugunod-se dre amañ ?

Visant : Laza a reas gand eun taol kleze person Intron Vari 'r Porzou ! Edo hemañ o lavared an overenn er japel pa stlapas eur zoudard eun Osti zakr war an douar. Ar beleg a yeas war e zaoulin evid he debri. Neuze e oe skoet gantañ eun taol kleze e-kreiz e galon.

Soazig : Hag e-pad ar Revolusion vraz, petra 'zigouezas ?

Visant : An Dispah Braz, gouzoud a rez, a zerras e Breiz an oll ilizou, e-doug meur a vloavez. Pardonioù an Intron Varia a gouezas dre oll. Ar chapelioù santel a zeuas da veza grañchou, marchosioù, salioù dañs.

Soazig : Klevet em-eus evel er Follgoad hag e meur a leh all, eo bet amañ ivez saveteet skeudenn vurzuduz ar Werhez diouz an tan, gand kristenien ar vro.

Visant : Ha kuzet mad e chomo e-pad toud ar Revolusion. Méd raktal goude ar gorventenn e oa distroet d'he chapel gand kalz a zoujañs hag a enor. Eun heol benniget a baras adarre war ar vro.

Soazig : E-doug ar wech, labour an diaoul zo bet atao pellaad ar gristenien diouz devosion an Intron Varia. Méd kaer e-neus ober, an treh a jom atao gand Mamm Doue.

Visant : Hirio, gweled a rez, eo ar memez tra. Mar dema kemend-all ar Feiz war ziskar, eo dre ma klasker disterraad karantez ar gristenien evid ar Werhez. Klask a reer alia en o halonou yenijenn e-keñver he chapelioù, he fardonioù, ar japeled zokén, ha kement devosion o-doa on Tadou-koz Méd kement-se ne bado ket, bez dineh.

Chapel ar Vouster

Soazig : A-raog kuitaad ar Hastell-Nevez, mad e ve deom ivez lavared eur gér euz chapel ar Vouster.

Visant : Ma karez avad ! N'emaom ket pell diouti. Ha peogwir e tleom goude mond da Speied, ema war on hent. Evel ma lavar he ano, ez eus bet eno, gwechall, eur manati bet savet gand unan euz or Zent koz : Sant Ruelin, pe Ruvèeen. An dra-ze a oa war-dro ar VIved kantved.

Soazig : Hervez "Buhez ar Zent", m'am-eus soñj mad, diskibl eo ar zant-mañ da Zant Tugdual, kenta eskob Landreger, hag eveltañ e teue euz Breiz-Veur. Dond a reas zoken da veza eskob war e lersh.

Visant : Setu ar japel dirazom. N'eus ket ken pell-ze edo en eur stad truezuz, prest da goueza en he foull. Kempennet eo bet, a-drugarez Doue, gand tud a volontez vad, yaouankizou dreist-oll hag o-deus gouestlet o vakañsou da zavetei ar japel.

Soazig : Meur a japel, e Breiz, a zo bet saveteet evel-se gand strolladou yaouankiz, paotred ha merhed. Kevredigeziou a zo bet savet evid-se. Pennadou talvouduz Keranforest, en Télégramme, beb sizun, a gomz deom euz an oberenn vad-se hag a laka anezi da zougen frouez.

Visant : Nag a béd chapel a zo bet dija saveteet, pe zokén adsavet a nevez ! Méd nag a re all o koueza en o foull ! Hag a-wechou, dén e-béd, én-dro dezo, ne ra van !

Soazig : Koz eo ar japel a welom amañ bremañ ?

Visant : Al lodennou kosa anezi a zo euz ar XIVved kantved. Al lodenn vrasa avad, a zo euz ar XIXved kantved.

Soazig : Evel m'ema n'eo ket divalo, tamm e-béd. O ! sellit 'ta, nag a skeudennou kaer a zo enni !

Visant : Skeudennou war goad dero. Teñzoriou int hag a dalvez beza miret, evid enor or Breiz hag on arzourien goz.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Chapel ar Hrann

Intron Varia ar Hrann

Soazig : Deom bremañ neuze da Speied peogwir on-eus eno eur japel da weled.

Visant : Ya Intron Varia ar Hrann, eur berlezenn muioh e-kreiz ar mêziou glaz.

Soazig : Intron Varia ar Hrann ! Eun ano koz e tle beza hennez ?

Visant : Koz-kenañ. Kavet e vez dre-oll en eun toullad mad a anoiou-lehiou : Penn ar Hrann e-kichenn Landerne, Koad ar Hrannou e-kichenn Rumengol, a zo ar memez ano. "Kran", ar hrann a zo eur gér keltieg koz hag a dalvez kement hag ar gér "koad".

Soazig : N'om ket pell evid dond beteg ar japel. N'eo ket ken koz hag hini ar Vouster ?

Visant : Euz ar XVIved kantved eo. Méd konta a reer e oa ar japel-ze a-raog euz an XIIved kantved. Savet e vije bet gand Aotrou ar Hoz-Kastell euz ar Hrannuhel en distro euz ar Groaziadeg, evid trugarekaad ar Werhez Vari da veza bet e ziwallet diouz peb droug.

Soazig : Sellit, eur halvar bihan a zo e-kichenn. Ema aze evid lavared deom : « Aze ema ti va mamm It tre ! Prest eo d'ho tigemer. »

Visant : Deom 'ta neuze ! Setu dirazom skeudenn ar vamm, én-dro dezi e-leiz a êlez o vuzikad. Ema en eun armel gand he doriou digor, kizellet dispar. Serret e veze an armel gwechall en diavêz euz ar goueliou braz. Muioh a blijadur ne veze ken o selled outi pa veze digoret.

Soazig : Armeliou evel-se a gaver c'hoaz e meur a japel pe iliz, enno aliez, an Tad Eternel evel e Lokeored da skwér.

Visant : Méd ar pezh a gaerra a weler amañ eo ar prenestou ken kaer an eil hag egile. En despet d'ar hantvejou, d'an avel ha d'ar glao, int chomet flamm-kenañ en o liviou, evel ma vijent bet greet deh, ha koulskoude int euz ar XVIved kantved. N'eus na chapel nag iliz all e-béd en eskopti-mañ a vir enni eun teñzor ken presiuz.

Gwerennou livet ar Hrann

Soazig : Pa 'z eo ken dispar gwerennou a liou Intron Varia ar Hrann, me 'garfe selled piz outo.

Visant : Greom 'ta neuze, ha krogom ganto diouz an tu kleiz pa zeller ouz an aoter vraz. War an hini genta, sell, e weler bugaleaj Or Zalver. Gwél pegen sklêr eo chomet ar skeudennou. Treset int bet koulskoude er bloaz 1546 gand arzourien euz Kemper, koulz hag ar werenn a welez damheñvel, gand ar memez arzourien, diwar eur patrom euz Bro-Flandrez.

Soazig : Gweled a ran warni ginivéléz Jezuz, gand adorasion ar bastored, hag izelloh, adorasion ar vajed. Dirag ar bastored, Jezuz a zo en eur baner aozill, a zervij dezañ da gavell.

Visant : Ha dirag ar Vajed ema war barlenn e vamm gwisket kran. C'hoari a ra gand ar perlez hag an aour a zo bet kinniget dezañ.

Soazig : Gwerenn vraz an tu-eneb, a ziskouez ar Werhez o vervel, en traoñ hag a-zioh e weler anezi douget d'an neñv gand an êlez.

Visant : Liviou ruz ha melen ar werenn-ze a zo souezuz. Sell pegen flamm int chomet. Savet e vefe bet diwar skwér eur patrom italian.

Soazig : Evel-se 'ta, on arzourien a gemere o skweriou, e pevar horn an Europ. Ne oa ket Breiz eur vro diwar-lerh evel ma 'z eus bet klasket rei deom da gredi.

Visant : Nann sur. Méd ar werenn binvidika eo hini ar basion, a-zioh an aoter vraz. Bez' ez eus meur a hini all heñvel outi e Breiz-Izel : e chapel Sant Fiakr, er Faoued, hag e iliz ar Roh e-kichenn Landerne, da skwér.

Soazig : Ar gwerennou-ze a zo evel eul leor kaer, digor braz dirag daoulagad ar gristenien, da zeski dezo an Aviel. Ezomm e-béd da houzoud lenn evid-se. N'eus nemed selled da ober. Paour ha pinvidig, braz ha bihan, a hell kompren anezo.

Soazig : Ar gwerennou all, bihannoh o ment, a zo ivez euz ar memez amzer. Amañ, merzerenti Sant Laorañs e peder daolenn. A-hont, en tu all, e peder daolenn ivez, e weler penaoz eo bet douget korv Sant Jakez da Gompostel e Bro Spagn, dre vor da genta, dre zouar goude. Gouzoud a rez eo bet hennez brasa pelerinaj ar Grenn-Amzer. On tadou a yee di ivez a-vandennou.

Soazig : Eun devosion goz c'hoaz e Breiz eo hini Sant Alar. Setu perag e kaver dezañ amañ ivez eur werenn gaer diwar-benn e vuhez.

Karaez

Soazig : Euz Speied, gwell on-eus d'ober eo mond da Garaez, ne gav ket deoh ?

Visant : Eo ! Gouzoud a rez eo Karaez eur gêr goz-kenañ. Kêrbenn ar Romaned eo bet, e-keit ha m'o-deus bet greet o mistri war ar vro-mañ. Da lavared eo, hanter-kant vloaz a-raog Or Zalver hag e-pad ouspenn tri-hant vloaz goude.

Soazig : Perag eo bet anvet Karaez ? Ahez eo merh ar Roue Grallon, an hini a gasas Kêr-Iz da goll.

Visant : Gwir eo. Ha marteze ar gêr-mañ a oa he hêr-diskuilz e diabarz an douarou, e-kreiz ar mêziou glaz. Karaez ha Keraez a zo ar memez tra. Hag an hent koz braz a gase euz Douarnenez da Garaez a veze greet anezañ "Hent Ahez". Méd e amzer ar Romaned, Karaez a oa anvet Vorganium.

Soazig : Klevet em-eus e rede anezi, war-zu pevar horn ar vro, beteg nao strêd pe hent-praz paveet aliez. Gweled a reer c'hoaz roudou anezo amañ hag a-hont, dre Vreiz-Izel a-béz.

Visant : En eskopti, mond a ree an hentchou-ze da baka Plougerne, Brést, Douarnenez, Bég-ar-Raz, Kemper, Montroulez. Ar pont kosa a jom e zilerh ar strêdou-ze eo hini Santez Katell, eul leo bennag diouz Karaez pa 'z eer war-zu Kallag. Kosoh e vefe zokén eged amzer ar Romaned e Breiz.

Soazig : Pa 'z eo ken koz-se Karaez, e tlefe beza kavet enni kalz a draou euz an amzeriou gwechall ?

Visant : A-dra-zur, eun toullad mad a gavadennou a zo bet greet c'hoaz hag a reer c'hoaz, peziou moneiz, pladou arhant, peziou arem, gwalinier, skeudennou, priachou a beb seurt, beredou koz enno podou gand ludu eskern tud. Bewech ma touller an douar da zevel tiéz, e kaver atao eun dra bennag euz amzer ar Romaned. Chom a ra c'hoaz ar roud euz ar ganol zimant a zigase an dour azaleg Groñvel beteg e-kreiz kêr Karaez.

Soazig : A-héd an hentchou koz a yee kuit euz Karaez, e kaver c'hoaz ivez, a gav din, meur a dra euz amzer ar Romaned !

Visant : Ya, melladou mein-born a veze greet anezo "pierres milliaires". Darn anezo a zo bet lakaet kroaziou warno, evel hini Komana pe ar Grouaneg e parrez Plougerne.

Karaez goude ar Romaned

Soazig : Komzet on-eus, én dro diweza, euz ar pezh a houzer a-raog ar Romaned. Méd ar Romaned a zo bet trehet, hag a rankas kuitaad ar vro. Petra e teuas neuze Karaez da veza ?

Visant : Ne anavezet ket kalz a dra diwar-benn an amzer-ze. Lenn a reer koulskoude e levr Albert le Grand e vije bet Karaez distrujet er bloaz 878 gand an Normaned. Beteg neuze e oa Kêrbenn ar Pou-haer deuet da veza Poher en amzer hirio.

Soazig : Ar Poher ! Lennet em-eus bet eo bet staget ar vro-ze pe ar gontèlèz-se ouz Dugélèz Breiz er bloaz 938 gand Alan-Varveg, trehour braz an Normaned en Naoned ha kenta Duk Breiz.

Visant : Eur prioldi a oe savet e Karaez war-dro ar bloaz 1108 : hini sant Nikolaz, stag ouz Abati Redon. Etre 1341 ha 1347, Karaez a gouezas beb eil tro etre daouarn Yann Vonforz ha Charlez Bleiz, e-doug brezel Herez Breiz.

Soazig : Neuze eo e oe Charlez Bleiz toullbahet e Karaez goude beza bet trehet gand Yann Vonforz er Roh-Derhen, e-kichenn Landreger ?

Visant : Ya, just ! E-pad brezel al "Ligue" ivez e savas beh war Garaez. An aotrou Liscouet, hugunod, hag a reas kemend a reuz er Hastell-Nevez, a gemeras ivez Karaez. Ar beizanted a-ziwar-dro a en em zavas a-eneb dezañ. Trehet e oent hag an darnvuia anezo a gavas eur maro kriz.

Soazig : Méd ar brezel a gendalhas ?

Visant : Ar gouërien euz oll barrezioù ar horn-bro a zistroas niverusoh c'hoaz. Méd en aner Liscouet, eur wech muioh, a jomas mestr war an dachenn. Koll a reas eur vreh avad en eur laza ar beleg, an Aotrou Linouet. Neuze e lakaas an tan war gêr hag e tehas da Landreger. An dra-ze a hoarvezas er bloaz 1590.

Soazig : Gwall verzeriet eo bet ar paour kêz Karaez, en amzer goz !

Visant : Ha n'eo ket echu ! Gweled a raim c'hoaz gwall draou an dro a zeu, pa gomzin euz Fontanella.

Fontanella e Karaez

Soazig : Komzet on-eus bet dija euz Fontanella. P'emaom e Karaez eo red deom komz c'hoaz anezañ.

Visant : Eur gerig ma karez, da lavared ar reuziou e-neus bet greet dre amañ. Mad e vo d'ol lennerien, evid gouzoud hirroh, ober eur zell war on diviz diwarbenn Douarnenez. Eno on-eus bet kontet an darvoudou brasa euz e vuhez.

Soazig : Ya, soñj mad am-eus. Spontuz eo pebez reuz e-neus bet greet ar forbanze e Treger, Leon ha Kerne !

Visant : E Kastell Koad-Freg, e-kichenn Lannuon, edo e doull kuz. Pa zavas re a veh warnañ eno, e lammas war Garaez. Ober a reas eur hastell-kreñv euz iliz Sant Tremeur, dezañ d'en em zifenn er-vad a-eneb e enebourien.

Soazig : Chom a ra eun dra bennag euz an iliz koz-se ?

Visant : An tour braz nemetken An tour teo ha togn a welez aze war ar blasenn dirazout. An iliz a zo outañ bremañ a zo euz fin ar hantved diweza.

Soazig : Pell e chomas Fontanella e Karaez ?

Visant : Prizoniet e oe war urz an Duk Mercœur. Méd hemañ a bardonas dezañ e dorfejou dre ma'h asantas mond da zikour anezañ d'ober brezel d'e enebourien. Eur zoudard dispont hag eur habiten mad e oe. Méd an dra-ze ne badas ket. Kenta ma hellas, e tistroas adarre da Garaez en e iliz mogeriet kreñv.

Soazig : Hag e krogas én-dro gand e laeroñsou ?

Visant : Ken gwaz ha biskoaz ! Gwelloh e kavas avad lammad war gastell ar Granneg etre Landelo ha Kolloreg. Ober a reas anezañ eur plas didrehuz, goude beza e laeret digand e berhenn, hag a oa koulskoude diouz e du.

Soazig : Ne gavas ket ar peoh, evelato, en e doull-bleiz ?

Visant : Nann sur ! An oll beizanted diwar-dro a glaskas, eur wech muioh, ober ar stal outañ hag e lakaad da baea kér e daoliou trubardèrèz. Méd eiz kant anezo, siwaz, a jomas ledet war an dachenn. Goude an taol-ze ez eas da lakaad ar skrab war Rosko, a-raog mond da jom da Enezenn Tristan, e Douarnenez.

Sant Tremeur

Soazig : Anvet on-eus bet, meur a wech dija, Sant Tremeur. Patrom Karaez eo. Mad e ve deom rei da anaoud ar pezh a houzer euz e vuhez.

Visant : An tour braz a welez aze a zo bet savet en enor d'ar zant. 45 metr e-neus. Méd a-raog 1745 e oa warnañ eur bég plom a bigne er vann beteg 75 metr. Ar gurun a gouezas warnañ er bloavez-se, hag abaoe her gweler evel m'ema bremañ.

Soazig : E "Buhez ar Zent" em-eus desket e oa Tremeur mab da zantez Trifina, pried Konomor. Hemañ a oa eur priñs kriz ha fallagr. Konta a reer e laze e oll briejou kerkent ha ma wele warno roud eur bugel bennag.

Visant : Siwaz ! re wir eo ! Trifina a oa bet e bried diweza. Houmañ a oa merh da Waroh, kont Bro-Wened. Pa welas edo o vond da lakaad eur bugel er béd e tibennas anezi gand eun taol kleze.

Soazig : Ya. Méd Sant Gweltaz a viras outi da vervel ken e oe ganet he mabig. Hemañ, ablamour da-ze, a oe anvet "Trehour-meur", eun ano kaer ha gloriuz.

Visant : Ar bugel a oe savet gand ar zant, en e vanati en tu all da Wened. Eun deiz avad, deuet da baotr krenn, e dad Konomor a gouezas warnañ hag hen dibennas evel e vamm.

Soazig : Skrijuz eo kement-se ! Ahano eo e teu danevell ar "Baro glaz" pe "Barbe bleue" e galleg hag he-deus bet greet kemend-all a aon din pa oan plahig er gêr.

Visant : En-dro da Garaez e kaver parrez Plougêr, da lavared eo Plou-ar-Gêr hag a zo kalz kosoh he iliz eged hini Sant Tremeur. Talvezoud a ra ar boan ober eur gwell dezi. N'eo ket diêz, peogwir ema harp ouz amañ.

Soazig : Anaoud a ran anezi evid beza he gwelet eur wech bennag

Visant : Lodennou anezi a zo euz an XIved kantved. Enni ez eus e-leiz a skeudennou koz. Méd gand an tan-gwall eo bet distrujet kalz a goatach hag a oa teñzoriou heb o far. En-dro d'an iliz e kaver atao ar vered, ar pezh a weled e peb leh gwechall.

Brudeta mab Karaez

Soazig : Goude beza komzet euz Patron Karaez, komzom bremañ euz unan euz he brudeta bugale, da lavared eo euz Teofil Malo Korret, lesanvet “La Tour d’Auvergne”, kenta grenadour Bro-Hall.

Visant : N’heller tremen dre Garaez heb gweled war unan euz plasennou kêr, eur mell statu, kizelladuriou arzel war he sichenn, o verka darvoudou pouezusa e vuhez.

Soazig : Setu-ni dirag ar monumant. Skrivet eo warnañ eo bet ganet Teofil Korret er bloaz 1743. E di a weler c’hoaz en unan euz ruiou kêr.

Visant : E dad a oa alvokad. Ober a reas e studi e skolach ar Jezuisted e Kemper. Kreñv e oa war ar yezou. E blijadur, e-doug e vuhez, en e amzer vak, a vo deski ar brezoneg, hag ar yezou all a gavo war e hent, en eur ober brezel. Evel-se eo e teskas an euskareg, langaj ar Vasked.

Soazig : E vicher eo bet beza soudard e-pad e vuhez penn-da-benn, neketa ? Dindan Roue Bro-Hall evel-just ?

Visant : Mond a reas ivez, e servij ar Spagnoled azaleg ar bloaz 1781. Méd e-pad ar Revolution e vez kavet oh ober brezel dezo e kêr Hendaye war harzou an diou vro.

Soazig : Eun dén dihloar e oa. Konta a reer ne fellas ket dezañ kaoud galoñsou uhel, en arme.

Visant : Ne oa nemed kabiten pa guitaas an arme, echu gantañ e amzer. Neuze e tistroas da Garaez, da veva war e leve d’e 52 vloaz (d’e zaou vloaz hag hanterkant)

Soazig : Méd mond a reas da zoudard én-dro ?

Visant : Ya. Kemer a reas plas mab yaouanka unan euz e vignoned kouezet warnañ ar zort. Brezel a raio, da genta er Suis, ha goude war ar Rhin. War-dro eno e kouezo e emgann Neubourg, skoet gand eun taol lañs, er bloaz 1800, en e galon.

Soazig : Ouspenn beza soudard e-neus bet ivez skrivet meur a levr diwar-benn Breiz ?

Visant : Diwar-benn ar brezoneg, dreist-oll, hag ivez diwar-benn Karaez, e barrez henidig. Eun dorn-skrid a zo chomet war e lerh ha n’eo ket bet moulllet. Ennañ e laka geriou brezoneg keñver-ha-keñver gand eun daou-ugent yez bennag. Eur Breizad a ouenn vad eo bet Teofil Korret, e gwirionez.

Diwar lein tour Karaez

Soazig : Me 'garfe ober eur zell war ar vro diwar lein tour Sant Tremeur. Sklêr eo an amzer. Pignom 'ta d'an neh !

Visant : Setu-ni pemp metr ha daou ugent a-zioh an douar. En-dro deom ema Bro ar Poher, pe ar Pou-Hêr, da lavared eo Bro-ar-Gêr. Ar gêr, evel-just, eo Kêr-Ahez.

Soazig : Aze ema ar gar. Nebeud a lavig a zo enni bremañ. Chom a ra c'hoaz, koulskoude, hent-houarn Karaez-Gwengamp. Méd euz an hent-houarn a gase da Gastellin ne jom mui netra kén.

Visant : Koulskoude, pegen brao e veze mond gand an treñ-ze. Amzer a roe deoh da zelled ouz ar vro. Etre Speied ha Landelo e heulie braoig ar ganol, a-raog treuzi douarou pinvidig ar Hastell-Nevez ha Pleiben. Soñj am-eus e veze atao leun a gan-ha-diskan. Na péd tro-lavar am-eus klevet evel-se !

Soazig : Parrez Kerglov eo a weler da dosta toud. Pelloh ema Poullaouen, Kolloreg, Plonevez-ar-Faou ha Landelo.

Visant : Kerglov, gouzoud a rez, eo bro hinidig ar Balp, mistr ar Bonedou Ruz, hag a reer hirio kement a ano anezo, evel ma vije bet liou ruz o bonedou, eul liou politikel euz an amzer-vremañ. Glaz e oant kentoh, war a gonter !

Soazig : Kleden-Poher a zo eun tammig muioh war an tu kleiz. Eno ez eus eun dra bennag da weled ?

Visant : Iliz Intron-Varia Gladen, eul leh a belerinaj karet-kenañ gand tud ar vro-mañ. Enni e kaver kizelladuriou dispar war goad. Eur halvar souezuz a zo ivez en he hichenn hag a dalvez ar boan beza sellet outañ.

Soazig : Kendalhom d'ober an dro : Sant Hern, Plevin, Motrev a zeu goude. Eno, en iliz, ema béz an Tad Maner, bet lakeet, n'eus ket keit-se, war roll ar zent. Ken karet eo gand tud ar vro-mañ ma 'z eo bet anvet ganto an "tad mad". Kemend a joa o-deus outañ ma 'z eo bet diskolpet ganto e statu, evid kaoud eur relegenn anezañ da zerhel ganto en o zi.

Troveni Sant Telo

Soazig : E-touez ar parrezioù a welom diwar lein tour Sant Tremeur, ema Landelo. Eno, evel e Lokronan, e reer ivez bep ploaz eun droveni en enor da Zant Patron ar barrez : Sant Telo.

Visant : Ya, hag ar blijadur am-eus bet, va-unan, diou wech, da gemer perz en droveni-ze. Eur gwall haloupadenn eo, m'hel lavar dit. War-dro 18 kilometr etre toud.

Soazig : 18 kilometr prosesion ! biskoaz kemend-all !

Visant : Anvet eo an droveni-ze "Tro ar Relegou" dre ma vez douget penn-da-benn relegou ar Zant, gand kalz a zevosion, peogwir, pa dremener dre gêriadennou 'zo, e vez fuillet bleunioù war an hent, evel da brosesion ar Zakramant meulet ra vezo.

Soazig : Hag e vez kalz a dud o heulia eur brosesion ken hir ?

Visant : Eur mil bennag a dud ! da zul ar Pantekost, bep ploaz, eo e vez greet an Droveni-ze. Kuitaad a reer an iliz, a-bréd diouz ar mintin, gand kroazioù ha bannielou. Méd ar re-mañ a vez lezet en eur gêriadenn, eun hanter leo diouz ar vourh, da hortoz an distro. Relegou St Telo hepkén, douget gand daou waz, a ra an dro penn-da-benn.

Soazig : Peogwir e kuiteer an iliz heb overn, e ranker lavared an overn e-pad an hent ?

Visant : Lavaret e vez e-kichenn eur japel anvet Pennti Sant Laorañs. Er bloaz-mañ zokén eo bet roet da gleved an overn dre radio. Eno ivez, e-kichenn ar japel, e vez debret lein. Pep hini e-neus bet digaset gantañ peadra da derri e zehed hag e naon.

Soazig : Evel-just e vez kanet e-pad ar brosesion meuleudi Sant Telo ! Méd petra 'anavezer euz buhez ar Zant-mañ ?

Visant : Genidig eo euz Breiz-Veur. Anavezet mad eo atao e Bro-Gembre el leh m'eo bet eskob e Kêr Landeff, evel ma lavar deom ar hantik, daou goublad ha tregont ennañ. Setu amañ ar poz kenta. Kan anezañ deom 'ta :

Soazig :

E bro goz ar Vretoned eo bet ganet Telo,
En eur famill binvidig ha karet war-eun-dro.
Ano e dad 'oa Enzig, ano e vamm Gwenheff,
Daou zen euz ar re wella o chom e bro Landeff.

Perag e tiskouezer anezañ atao war gein eur haro ?

Visant : Deuet da Vreiz, e oa bet lavaret dezañ gand mestr ar vro-mañ kemer evitañ an oll zouarou a hellje ober dezo an dro en eun devez. Evid kelhia muioh a zouar e savas war gein eur haro. En eur dremen dre gichenn Kastell-Dall, e redas ar chas war e lerh. Méd ar haro a oa lijerroh egeto.

Soazig : Hag evel-se, neuze, eo bet krouet Parrez Landelo ha merket hent an Droveni.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Pleiben

Soazig : Da beleh ez aim euz Karaez ?

Visant : A-raog mond da Veneziou-Are, e chom ganeom da weled eur barrez vraz, etre an diou aridennad meneziou. Euz Pleiben eo e fell din komz ;

Soazig : Gwir eo n'on-eus lavaret gér e-béd euz ar barrez-se p'on-eus kuiteet Kastellin. Deom di 'ta neuze.

Visant : Pleiben a anavezan mad-kenañ. Bet on eno oh ober skol e-pad pemp ploaz, ouspenn daou-ugent vloaz 'zo abaoe. Amañ emañ evel er gêr.

Soazig : Méd abaoe e tle beza deuet amañ evel e leh all kalz a jeñchamañchou ?

Visant : E buhez an dud, evel just. Méd an iliz hag ar pezh a zo én-dro dezi, n'eus cheñchamant e-béd koulz lavared.

Soazig : N'eus ket kalz a barrezioù hag a vije pinvidikoh war ar poent-se.

Visant : Saint-Tegoneg e Bro-Leon, marteze, hag a zo euz ar memez amzer, da lavared eo, euz ar XVved ha XVIIved kantved.

Soazig : Amañ, koulz hag e Sant-Tegoneg, ne vank netra : an iliz gand he sakreteri, ar garnel, ar halvar, ar volz a enor.

Visant : Ha tri dour war ar marhad ! Pebez pinvidigez ! Ha pa zoñjer eo bet savet an oll draou kaer-ze gand arhant tud ar vro, labourerien-douar dreist-oll, e chomer estlammet.

Soazig : Koulskoude ez eus bet desket deom ne oa nemed peorien en amzer-ze. Petra 'ra dezo beza ken pinvidig ?

Visant : Al labour-douar, ar sevel chatal, ar hanab hag al lin. Kalz a foarioù o-doa ha mad-kenañ ez ee ganto ar homers én-dro. Bez' e oant ivez tud lorhuz ha felloud a ree dezo beza dreist ar parrezioù all.

Soazig : Neket o beleien, o fersoned eo a oa lorhuz kentoh ?

Visant : Nann sur ! ar fabrisianed pe ar huzul-parrez eo a gase al labourioù én-dro. Paea a reent ar vicherourien gand an arhant a oa er héf hag ar hestou a reent dre ar barrez. Ind-i eo a lakee kizella ar vein hervez o hoant. Ar veleien n'o-doa koulz lavared netra da weled. Ha pa zegoueze ganto lakaad re o fri en aferioù-ze, e veze savet prozezioù en o eneb hag a yee a-wechou beteg ar Pab da Rom, hag e chome ar gounid ganto.

Soazig : Feiz ! ar re-ze neuze ne oant ket hanter-dud. Ha c'hoaz e klasker rei deom da houzoud ne oa peizanted an amzer-ze nemed tud dizesk ha didalvez. N'eo ket gwir an dra-ze eta !

Maner Trezigidi

Soazig : Pleiben a zo c'hoaz hirio eur barrez vraz-kenañ. Méd brasoh c'hoaz, d'ar mare m'he-deus bet savet Tour braz Sant Jermen evel ma lavar Yeun ar Gow, en e levr "E skeud tour braz Sant Jermen". Sant Jermen eo patrom ar barrez.

Visant : Parrez Pleiben neuze a oa enni parrez ar Hlost ha pemp chapel all ouspenn e servij ar relijion, beleien enno oll evid overenna beb sul. Ouspenn ugent beleg a oa evel-se war zouar ar barrez.

Soazig : En eur barrez ken gallouduz e oa ivez maneriu ?

Visant : Ya, evel-just ! Unan dreist-oll a zo bet brudet dreist ar re all : Kastell koz Trezigidi eo hennez. Greet e vez hirio anezañ "Ar maner koz". Ne jom euz ar hastell-ze, siwaz ! nemed nebeud a dra. Al leh avad a zo dispar : war hent Kastellin a-zioh ar Ster-Aon, nepell diouz Toull-ar-Hefeleg.

Soazig : Me 'garfe gouzoud eun dra bennag diwar-benn e istor, hag ol lennerien ivez moarvad.

Visant : Netra êsoh. N'on-eus nemed digeri leor Louis Le Gwenneg bet troet e brezoneg war "Feiz ha Breiz" gand an Aotrou Perrot : "Nos vieux manoirs et légendes".

Soazig : Gwelom neuze petra 'lavar al leor-ze.

Visant : El leh m'edo Kastell Trezigidi, ar Ster-Aon a ra eur gammenn euz ar re gaerra. Gweled a reer eno c'hoaz ar roud euz e vogeriu kreñv hag euz e liorzou uhel-uhel a-zioh ar ster : "rouanez steriu Breiz-Izel", eme de Fréminville. Eur vali vraz a vez a oa da vond beteg ennañ. Fontanella a zailas ivez warnañ hag e lakaas tan ennañ.

Soazig : Ha gand piou eo bet savet ar hastell-ze ?

Visant : Gand eur famill-vraz, e gwirionez, hag he-deus roet daou groazour da Zant Loeiz, Roue Frañs, eun eskob da Roazon ha daou zoudard kaloneg, unan da Charlez Bleiz, egile da Yann Vonforz. Unan anezo, Moris e ano, a gemeras perz e "Emgann an Tregont", er bloaz 1351, war al laneg, hanter-hent etre Joselin ha Ploermel. Anaoud a rez an dra-ze ?

Soazig : Desket eo bet din an istor-ze er skol : Tregont Breizad oh en em ganna ouz tregont Saoz. Hag e chomas ar gounid gand ar Vretoned. Eur monumant braz war leh ar stourmad a zegas deom da zoñj euz an darvoud istorel-ze.

Visant : Hag ivez eur werz fromuz-kenañ bet embannet gand an Aotrou Kervaker en e Varzaz Breiz.

Emgann an Tregont

Soazig : Peogwir ho-peus lavaret ano euz Gwerz Emgann an Tregont, mad e ve deom rei eun tañva anezi d'ol lennerien.

Visant : Ma karez, avad. Lennom neuze eur houblad bennag anezi.

Soazig : En eur vond d'an emgann, an tregont Breizad a lavare :

Aotrou Sant-Kado, or paeron,
Roit deom nerz ha kalon,
Ma hounezim, hirio an deiz,
War enebourien euz a Vreiz

Visant : A-raog kregi da vad e lavarent :

Lavar din-me, lavar din-me
Péd 'zo ane, va flohig-me ?

Soazig :

Péd 'zo ane 'lavari deh (deoh) :
Unan, daou, tri, pevar, pemp, c'hweh.

Visant : Goude beza klevet péd Saoz a zo a-eneb dezo, ar Vretoned a lavar :

Mar dint tregont, koulz eo deom,
A-raog, paotred, ha beh warnom.
Ken buan e koueze an taoliou
Ha morzoliou war an anneoioù

Soazig :

Pennbroh a lavare neuze
Da Dinteniak pa dostae :

Visant :

Del ! taol va goaf mad, Tinteniak,
Daoust hag eo-eñ eur gorzenn wag ?

Soazig :

Pez a vo gwag e berr amzer :
Podenn da benn, va mignon ker.

Visant :

Péd ane 'zo maro, Floh mad ?

Soazig :

Ne welan netra gand poultr ha gwad.

Visant :

Péd ane 'zo maro, flohig ?

Soazig :

Setu pemp, c'hweh, seiz maro-mik.

Visant :

Adaleg goulaig an deiz,
En em gannont beteg kreisteiz.
Adaleg kreisteiz beteg an noz,
En em gannont eneb ar Zaoz.

Soazig :

An Aotrou Robert 'lavaras :

Visant :

Sehed am-eus ha sehed braz !

Soazig :

Ken e trohas outañ ar hoad :

Visant :

Ma 'peus sehed, paotr, év da wad !

Soazig : Gounezet ganto ar viktor, ar Vretoned a gane en eur zistrei da Gastell
Joselin :

Visant :

Er baradoz hag en douar,
Sant Kado n'e-neus ket e bar.

Yann Ar Floc'h

Soazig : Euz eun amzer tostoh deom n'eus dén e-béd e Pleiben hag a hellfeh komz diwar e benn ?

Visant : Eo avad, eun den a zo, eet da anaon e 1936, hag a garfen komz anezañ, ablamour m'e-neus bet renet va hammedou kenta war dachenn al lennegèz vrezoneg.

Soazig : Piou eo hennez 'ta ?

Visant : Evidom oll e oa Jean Pach (War baperiou an ti-kêr e oa Jean Le Page). Méd pa skrive e brezoneg e sine atao : Yann ar Floc'h.

Soazig : Eur skrivagner brezoneg e oa eta ?

Visant : Ya, ha kalzig e-neus bet skrivet e brezoneg. Méd abaoe ez eus pell 'zo : a-raog ar brezel braz kenta. Bez' ez eo bet barz, gwerzaouer ha skrivagner.

Soazig : Penaoz eo bet ho rener kenta war al lennegèz vrezoneg ?

Visant : Edom neuze er bloaz 1930. War-dro hanter-kant vloaz e oa-eñ ha me 22 vloaz. Oh ober skol edon e Pleiben, e skol Sant-Jermen, abaoe daou vloaz. Anaoud mad a reen eta Jean Pach. En em weled a reem aliez war-dro an iliz, rag sakrist e oa. Goulennet e oa bet diganin, d'ar mare-ze, sevel eur ganaouenn e brezoneg diwar-benn Kleder, va farrez hinidig. Goude beza poaniet da skriva eun dra bennag, e oan eet d'hen diskouez da Yann ar Floc'h ha da houlenn digantañ difazia pe gwellaad va labour. Reñka brao a reas din va hanaouenn a zeuas da veza Son Kleder, anavezet mad c'hoaz hirio an deiz. Diwar neuze om deuet da veza mignonet vad, ha me a gemeras goud da skriva e brezoneg a beb seurt traou.

Soazig : Lavaret ho-peus e oa eur skrivagner. Petra e-neus bet skrivet ?

Visant : Koñchennou, marvailloù, kontadennoù hag a zo bet embannet e journaliou e amzer etre 1903 ha 1914, evel Le Courrier du Finistère euz Brést, Kroaz ar Vretoned euz Sant Brieg, hag Ar Bobl, journal Taldir Jaffrennoù euz Karaez.

Soazig : N'e-neus moulet leor e-béd ?

Visant : Nann. Méd, goude e varo, Yeun ar Gow, e genvroad, e-neus bet dastumet e goñchennou en eul leor a 300 pajenn anvet "Koñchennou-ar-Ster-Aon". Moulet eo bet, gand sikour eur helenner euz Skol-Veur Harvard en U. S. A., eur brezoneger hag a zeue bep ploaz da dremen e vakañsou da Zant-Wazeg.

Soazig : Me a garfe kaoud al leor-ze. Pa 'blij din ar hoñchennou.

Visant : Evid ar re yaouank a hirio, da zeski brezoneg mad, n'eus ket gwelloh leor.

Yeun Ar Gow

Soazig : P'emaom gand ar skrivagnerien, kendalhom. Chom a ra c'hoaz Yeun ar Gow ha Jakez Riou, o-daou ivez euz ar vro-mañ, hag eet da anaon evel Yann ar Floc'h.

Visant : Ya ! setu eun all hag e-neus bet lemmet e bluenn, en eur skriva brezoneg, ha n'eo ket brezoneg divouedet eo a veze gantañ evel ma lenner bremañ e kemend a baperiou.

Soazig : Petra 'ra da vrezoneg Yeun ar Gow beza ken saouruz, ken bouedeg, ken beo ?

Visant : Brezoneg eo hag a réd evel dour sklêr euz eur stivell. Tamm e-béd gantañ blaz ar galleg. Kee 'ta da glask trei e vrezoneg e galleg hag e weli ar hemm a zo etrezo !

Soazig : Kalz a leoriou a zo bet skrivet gantañ ? Anaoud a ran e levr : "E skeud tour braz Sant-Jermen".

Visant : Al leor-ze, a-dra-zur, eo e oberenn wella. Ennañ ema e eñvorennou bugaleach, ar vuhez e parrez Pleiben gwechall, ar sevenadur war ar mêz. Bez' ez eo eun tammig ar pezh m'eo hirio "Marh al lorh" Pèr Jakez Helias evid ar Vro-Vigoudenn. Komz a ra ivez kalz euz e dad hag e dad-koz.

Soazig : Pa 'z eo ken mad-se e vrezoneg, e heller neuze erbedi e levriou ouz ar re yaouank.

Visant : Ya sur ! Pèr Jakez Helias en eur gomz euz Yeun ar Gow a lavar : « N'am-eus anavezet dén e-béd gouest a-walh da gomz pe da skriva brezoneg evel e hini ». Eun dudi 'oa ouz e zelaou, eun dudi e vo atao e lenn, eun dudi hag eur gentel.

Soazig : Pere eo al levriou all a heller lenn diwar e bluenn ?

Visant : Troet e-neus bet e brezoneg Robinson Crusoë bet embannet gand Al Liamm. Embannet e-neus bet ivez diwar e goust eur pezh-c'hoari trubuiluz gwerzennet : "Ar person touer", hag eun istor ijinet gantañ : "Marheger ar Gêrgoad". Eun tammig a-raog mervel e-noa lakaet lieskriva eun danevell all : "Ar gêr villiget". Red eo menegi c'hoaz e-neus bet dastumet pedennou noz-veill ar re varo bet embannet en eul leorig gand kapusined Rosko.

Soazig : Skriva e-neus bet greet ivez e kelaouennou e amzer moarvad ?

Visant : A-dra-zur ! en oll gelaouennou brezoneg koulz lavared, e kaver eur bern traou bet savet gantañ : barzonegou, gwerziou, kontadennoù ha me 'oar-me.

Jakez Riou

Soazig : Hervez a welan, n'eo ket skrivagnerien eo a ra diouer da Vro-Gerne !

Visant : Nann sur ! Ha c'hoaz ne gomzan nemed euz eun nebeudig. P'edom e Karaez e helljem beza bet komzet ivez euz Taldir Jaffrennou, tad Kan Broadel Breiz : "Bro goz va Zadou". Eur journal sizuniege e-noa, "Ar Bobl", moulllet e Karaez. Lezet e-neus war e lerh eur bern skridou moulllet e nousped kelaouenn. E leor "Eñvorennoù yaouankiz", a zo plijuz kenañ da lenn.

Soazig : Méd komzom hirio kentoh euz Jakez Riou. Ginidig eo euz Lotei, amañ e-kichen.

Visant : Ya, ema Lotei, aze, en tu all d'ar Ganol, en eur blegenn anezi. Eno eo e teuas Jakez Riou er béd. E dad a oa mengleuzier mein-glaz. Ober a reas e studi e skolachou an Tadou Picpus evid mond da veleg. Méd n'ez eas ket beteg penn. Kelaouenner e oa neuze e Brést Ar h/"Courrier du Finistère" a embanne kalzig a vrezonég.

Soazig : Neuze eo e skrivas "An ti satanazet", al leor-ze ken farsuz ha leun a faltazi, mad da ziroudenna an tal.

Visant : E oberenn genta eo bet "Lizer an hini maro", eur romant trist meurbéd, a-eneb ar vezventi hag a ree kemend a zroug e Breiz.

Soazig : Méd e oberenn dalvoudusa eo "Geotenn ar Werhez". Nebeud euz tud e vro a anavez anezi. Koulskoude, an oll zanevellou a zo enni a dremen tro-war-dro da Lotei.

Visant : Danevellou trist-kenañ int peurvuia, berr ha poaniuz an diskoulm anezo aliez, evel "Ar barr-avel" da skwér. Méd ma ouie skriva traou trist, e-neus gouezet dreist-oll lakaad da hoarzin, hag ivez ober goap a-wechou, evel en e zaou bez-c'hoari : "Gorsedd digor" pe "Dogan".

Soazig : Hag ivez en e bez-c'hoari pouezusa : "Nominoe-oe".

Visant : Eun oberenn zouezuz eo honnez ha fentuz, diwar-benn Emgann Ballon hag a roas he frankiz da Vreiz er bloaz 845. C'hoariet eo bet, méd e galleg, war blasenn Lokronan, eun nebeud bloaveziou 'zo.

Soazig : Diêz eo komz euz Jakez Riou heb menegi e gamarad Youenn Drezen.

Visant : Gwir eo o-deus o-daou greet o studiou asamblez. Méd Youenn a zo eur Bigouter. Evel Jakez e-neus bet skrivet kalz e Brezoneg. E levr "Intron Varia Garmez" a zo anavezet mad. Eur romant eo, ha tamm e-béd eul levr a relijion evel ma rofe da gredi e ano. War e lerh eo deuet er-mêz, euz ti-moullérez an Dépêche e Brést, moulllet kaer kenañ, "Youenn Vraz hag e leue", eul levr peziou-c'hoari fentuz-kenañ.

Soazig : Skrivet e-neus bet ivez e eñvorennoù yaouankiz ?

Visant : Ya, hag ez eus tri levr anezo, dindan an ano a "Skol louarn Veig Trebern", bet embannet gand Al Liamm.

Distro da Gastellin

Soazig : Setu-ni distro da Gastellin goude eun droiad hir-hir dre Vro-Gerne ;
Marteze ho-pije c'hoaz eun dra bennag da lavared diwar-benn Kastellin ?

Visant : Ya sur ! meur a dra a zo chomet ganin da lavared ; Sell ! lavared a
helljen dit eo an Duk Alan Ferjent er bloaz 1163, eo a roas da veneh
Landevenneg peb gwir war beketerèz an eged e Kastellin ;

Soazig : Ha diwar-benn ar Hastell koz, n'ho-peus mui netra muioh da lavared ?

Visant : Eo 'vad ! ar bloaz 1163 a welas Konan IV, Duk Breiz, gand skoazell an
Aotrou Hemon, Eskob Leon, o tond a-benn da gemer ar hastell el leh ma oa en
em glozet an Aotrou Ruelin, Beskont ar Faou.

Soazig : Ar hastell-ze, neuze, gand e hweh tour, a oa eur palez kaer da Zuked
Breiz ! Dond a reent da jom ennañ aliez ?

Visant : Dond a reent ennañ da jom dreist-oll evid chaseal. Gouzoud a rez eo an
Duk Yann ar Rouz, evid derhel ar jibier er vro, eo e-neus bet greet sevel ar
voger hir-hir-ze a zo bet anvet "moger an diaoul".

Soazig : Yann ar Rouz neuze eo an Duk e-neus staget e ano ar muia ouz
Kastellin.

Visant : Ya, peogwir, an eil euz e vibien a zo bet ganet amañ, ar péz a ziskouez
e chome pell a-wechou er vro. Bewech ma teue, evel-just, e ree e ziskenn er
Hastell.

Soazig : Eur wech c'hoaz e lavarez pegen mantruz eo e vije bet diskaret ar
Hastell-ze heb beza bet adsavet.

Visant : Er bloavez 1373, ar Zaozon eo a lakaas an tan warnañ a-raog beza kaset
kuit anezañ gand Bertrand Duguesclin.

Soazig : Petra ho-peus desket c'hoaz en eur furchal ho paperiou koz ?

Visant : Eun dra kuriuz a-walh a jom c'hoaz ganin da lavared dit, ha n'ouzout
ket moarvad, na dén e-béd koulz lavared e Kastellin.

Soazig : Petra 'ta ?

Visant : Er bloaz 1782, an duk braz Petrovich, o tremen dre Gastellin, a zo bet
lojet eun nozvez er presbital. Eñ eo an hini a zeuas goude da veza Tsar Bro-
Rusi, dindan an ano a Baol kenta.

Kere ha Jezegou

Soazig : Komzet on-eus euz Yann ar Floc'h, Jakez Riou, Yeun ar Gow, Youenn Drezen. Hag e Kastellin, n'eus ket bet a skrivagnerien vrezoneg ?

Visant : Eo 'vad ! Daou a heller da venegi da vihanna : An aotrou Kere hag an Aotrou Jezegou, bet o-daou Person ha Kure e Kastellin.

Soazig : Petra o-deus bet skrivet, rag n'am-eus ket kavet ano e-béd anezo e istor Gastellin !

Visant : Ar henta e-neus lezet ganeom daou leor sarmoniou hag ivez eul leor kanaouennou dastumet er horn-bro pe bet savet gantañ hag anvet abalamour da-ze : "Kanaouennou Kerne". Setu-amañ al leor-ze.

Soazig : Eul leor brao eo ! Ha skeudennet kaer ! Gand tost da dri-hant pajenn ! Moullet eo bet er bloaz1900. Ouspenn kanaouennou a welan a zo e-barz.

Visant : Ya, rimadellou ha fablennoù a zo ivez. Selaou rimadell an alhweder pa vez o pignad d'an neñv :

Sant Pèr, digor din,
Biken mui ne behin,
Digor 'ta, digor !
Digor din da zor,
Kemer truez ouzin,
Pa va gouzoug a dorrin.
Sell ouz an douar, pegen izel,
Ha me pegen uhel !

Soazig : Ha peogwir Sant Pèr ne glév ket, e lavar en eur ziskenn :

Bouzar out pe ned out ?
Mouzed a rez hag a rez ?
Mad, Pèr, gra da benn,
Hag adarre e pehin,
Hag e rin, rin, rin !

Visant : An aotrou Jezegou, e-keit ha ma oa kure amañ, a zastumas eur bern kontadennou, hag a reas ganto daou leor, ar henta anvet "Kontadennou", hag an eil "E korn an oaled". Moullet int bet o daou goude ar brezel braz kenta.

Soazig : An daou leor-ze a anavezan mad. Peogwir int bet lennet ganin amañ o-daou er radio evid ar vugale.

Visant : Goude "Buhez ar Zent", an daou leor-ze eo a zo bet lennet du-mañ ar muia goude koan e-pad nozveziou hir ar goañv e korn an oaled. Chomet eo garanet don em spered an istoriou-ze. Evidon e oant kaerroh, sur mad, eged an tele bremañ d'ar vugale.

Soazig : Soñj ho-peus euz "Istor Yann e vaz-houarn" ?

Visant : Evel-just ! Péd ha péd kwech n'em-eus ket he hontet d'am bugale-skol, em hlas, p'edon oh ober skol e Pleiben, e Landerne, e Rosko hag e Treboul.

Soazig : Hag e plije a-dra-zur an istor-ze d'ar vugale.

Visant : N'out ket evid kompren gand pegement a vall e hortozent ar pemp munut diweza skol ! Rag ne gonten dezo an istor, nemed dre bennadou berr, da fin ar hlas, pa vezent bet fur ha p'o-deveze labouret mad.

Maout Ar Gow ha Maout Ar Gall

Soazig : N'om ket evid konta amañ unan euz kontadennou an Aotrou Jezegou. An hini verra anezo a vije re hir. Méd lenn e hellom unan euz rimadellou an Aotrou Kere.

Visant : Lennom neuze "Maout ar Gow ha maout ar Gall". Krog ganti :

Soazig :

Maout ar Gow ha maout ar Gall
En em dourte an deiz all
Hag e lavare ar Gow :

Visant :

Sell va maout, penaoz e sko !

Soazig :

Hag ar Gall a lavare :

Visant :

Maout, dalh mad ! eme ar Gall,
Maout ar Gow a ya da fall !

Visant :

Maout, dalh mad, eme ar Gow,
Maout ar Gall dit en em ro !

Soazig :

Hag an eil ouz egile,
An daou zod en em ganne.

Visant :

Va maout, a lavar ar Gall,
A lakay da vaout-te dall !

Soazig :

Va maout, a lavar ar Gow,
Da vaout dit-te a dougno !

Visant :

Hag an daou loen korneg
A lak ar gwad da redeg

Soazig :

D'ar fin oll, maout ar Gallig
A gouez d'an traoñ maro-mik.

Visant :

Ar Gall dilammet a-fo
A dorr gouzoug maout ar Gow.

Soazig :

Setu ar vrezelourien
O-daou war an douar yén.

Visant :

Bremañ 'vad, eme ar Gow,
Eur c'hoari all a vezo !

Soazig :

Serr da vég, eme ar Gall,
Pe me ray dit kemend all !

Visant :

Hag etrezo 'daou raktal,
An taoliou dorn da nijal.

Soazig :

Jobig ar Rouz degouezet
En-deus dezo lavaret :

Visant :

Paotred, chomit didrabas,
Pe me 'ya da hoari 'r vaz !

Soazig :

Greom friko gand ho maouted
Ha bezom oll mignoned.

Ar haz hag ar marmouz

Soazig : An Aotrou Kere a zo bet eur maout ivez da zével ha da reñka fablennou ?

Visant : Ya, ha meur a hini anezo a gaver en e leor “Kanaouennou Kerne”.

Soazig :

Jilez an Orbider, marmouz euz ar falla,
Ha Mignaoñ, lip-dienn, kaz euz ar re laerra,
Evel daou vreur er memez ti
A vev drant ha dizoursi.
Mignon ar mestr 'oa Dom Jilez
Ha Mignaoñ mignon ar vestrez.

Visant :

Setu penaoz, heb beza kannet tamm,
E hellent, koulz pe goulz, ober meur a dro-gamm.

Soazig :

Dom Jilez pa veze paket,
Da vired ne vije kannet,
A zidostae d'ar piltrotig,
A ree deg ha deg chiboudig,
A buche war al leur-zi, kroazet e zaouarn da bedi,
A ree kant ha kant mil orbid,
Koulz pe well hag eun tad ermit
En eur skei war boull e galon,
Atao en-divije pardon.

Visant :

Mignaoñ euz e gostez, pa gleve c'hwez ar rost,
Luch e lagad ha sonn e lost,
A rede da gaoud ar vestrez
Ober a ree tregont arvest :
En em dorche ouz he lostenn,
En em ruille war he barlenn,
En eur lavared héd-ha-héd,
E Gredo hag e Japeled.
Atao, e-leh fest ar vaz
E veze flouret kein ar haz

Soazig :

Ha setu ar gentel da denna :
Grit arveziou, parlantit flour,
Hag e veh faoz evel an dour,
C'hwi a vezo deuet mad
Gand mamm ha merh, gand mab ha tad
Goap a rit ? N'eus forz a ze,
Kalon an dén a gar fouge.

Brazparz

Soazig : Echu gand Kastellin. En hent bremañ da Venez-Are !

Visant : Ya, deom 'ta. Méd chom e rankim a-zav e Brazparz.

Soazig : Hañ ya ! Brazparz ! Gouzoud a rez pere eo an tri dra imposubl da Zoue ?

Visant : Ya sur ! Kompeza Brazparz, diveina Berrien ha diradenna Plouye.

Soazig : Kompeza Brazparz ! E gwirionez n'eo ket eun dra êz, ken diskompez ha ma 'z eo ar vro !

Visant : Emaom amañ e bro ar menezioù pe kentoh e bro an torgennou, evel ma lavarer amañ.

Soazig : Brazparz a gavan eun ano souezuz ha diêz da gompren pe n'eus na Plou na Lan na Lok e-béd ennañ.

Visant : Koulskoude eo bet savet gand eur zant koz euz or bro : Sant Jaoua, a gavim e japel e Plouvien e Bro-Leon. Gwir eo e rankas tehed dirag fallagriez tud ar menez. Lakaad a reas Sant Tujen en e blas.

Soazig : Sant Tujen ? An hini on-eus bet kavet e bro ar Hap hag a beder a-eneb ar chas klañv ?

Visant : Just a-vad, hag e-neus eur japel ken brao e Prevel e-kichenn Gwaien. En eur baseal, greom eur zell 'ta neuze war iliz Brazparz.

Soazig : Eun iliz vraso kenañ eo. Ar re oll hag a gar an traou kaer ne dlefent ket morse tremen dre amañ heb ober eur zell outi.

Visant : Koulz hag ouz ar halvar a zo en he hichenn. N'eo ket gwall vraz. Pell ema war-lerh Pleiben. Méd, sell ouz an teir maouez e-harz ar groaz. N'eus e nebleh netra heñvel outo. Teir maouez en o zav o tougen korv maro ar Hrist.

Soazig : Tour an iliz a zo eun tour kerneveg gand eur garidou hag eur gambr hebkén evid ar hleier. Mibin ha beget lemm eo gand eun douribell da bignad ennañ.

Visant : N'eus ket kalz a blas da lakaad ennañ eur mell kloh, ha koulskoude e lavarer "Kloh braz Brazparz, tour braz Pleiben".

Soazig : Ya, méd ne vez ket lavaret an dra-ze nemed evid distagella an teod.

Visant : Gwir eo. An hini a hell lavared dég kwech diouz reñk heb mond a-dreuz gand e deod : "Kloh braz Brazparz, tour braz Pleiben", hennez a zo eur maout war ar brezoneg.

Quia Time™ et un
sont requis pour visionner cette image.

Menez Mikêl

Soazig : Ha bremañ petra 'raim goude beza gwelet Brazparz ?

Visant : Redom buan war-zu Menez Sant Mikêl ha pignom war e gein. Sklêr eo an amzer hag eun dudi e vo deom ahano selled ouz ar vro. Anaoud a rez dija ar Menez-se ?

Soazig : Evel-just ! meur a wech on bet eno dija. Méd morse n'ez in re aliez. Ne weler ket diou wech ar vro er memez doare.

Visant : Gouzoud a rez ez eo an uhella euz menezioù Breiz ? Tri-hant unneg metr ha pevar ugent e-neus (391 m).

Soazig : Klevet em-eus eo Tuchenn-Gador, e-kichenn, eun tammig uhelloc'h ; nemed ma konter ar japel a zo amañ, e chom ar maout gand Tuchenn Mikêl.

Visant : E-skoaz ar Pireneou hag an Alpou, menezioù Breiz n'int ket kalz a dra : turiadennoù gozed ha netra kén. Méd, war a lavarere, int bet uhel-kenañ gwechall peogwir o-dije bet beteg 1.400 metr a uhelder.

Soazig : Hag e konter ivez e tisonke tan ar menez-mañ. A-drugarez Doue eo maro abaoe pell 'zo !

Visant : Ya ! milionou a vloavezioù a zo abaoe. An hent a heuliom amañ evid pignad war e horre n'eo ket koz. Toullet eo bet goude ar brezel all, dre ma 'z eus bet ano da zevel amañ eur monumant d'an oll Vretoned bet lazete er brezel 14. Gouzoud a rez ez eus 120.000 anezo, eur Breizad war 28. Spontuz eo, neketa !

Soazig : Ar monumant-se eo an hini a zo bet savete goude e Santez-Anna-Wened ?

Visant : Ha gwelloc'h eo evel-se. Eno ema kêr-benn relijiel Breiz, peogwir eo Santez Anna, evel ma lavarere, Mamm-Goz ar Vretoned.

Soazig : Feiz ! amañ eo kreñv an avel ! Ha daoust m'ema warnom an nevez-amzer, n'eo ket gwall domm, tamm e-béd. Ar japel a zo amañ ne dle ket beza gwall goz ?

Visant : Nann. Savete eo bet er bloaz 1672. Evel a welez n'he-deus ket kalz a dalvoudegez. Poan a zo bet ha poan a vez atao ouz he derhel en he savabalamour d'an avelioù foll a hwéz amañ aliez.

Soazig : Sant Mikêl e-neus roete evel-se e ano da galz uhelderioù.

Visant : Sant ar menezioù uhel eo hag ivez a-wechou Sant ar reier braz, evel hini Sant Mikêl an Normandi hag a zo unan euz traou kaerra ar béd bet savete gand meneh.

Ar Youdig

Soazig : Diwar Menez Sant Mikêl ne weler a beb tu nemed douarou noaz pe kentoh torgennou moal.

Visant : Nann. Kerreg, lann, raden ha brug ha netra kén. Klev 'ta ar hleierigou brug o seni en avel ! amañ e tleves kana deom "Son ar brug ruz" bet savet gand an Aotrou Perrot, tad ar Bleun-Brug.

Soazig : Ma karit a-vad :

Gand ho kleierigou ruz-wenn
Brug Breiz, sonit heb ehan,
War an tevenn, war ar menez,
Evid an oll gwitubinan.

Visant : Brug ruz o krak-veva, krog o hrabanou ouz kerreg gwenn pe hlaz.

Soazig : Puchet eo ar menez-mañ, evel eur vamm-yar en eur skrabadenn, endro dezi he re vihan.

Visant : Ya, evel re vihan dezi eo an torgennou pe an tuchennou a weler a-bell pe a-dost tro-war-dro. Torgennou noaz, heñvel ouz deñved o taoulammad an eil war-lerh egile, evel pa vijent o tehed diouz ar mor a vez gwelet du-hont er pellder e tu an hanternoz hag e kostez ar huz-heol.

Soazig : Aze, en traoñ, dindan al lenn vraz, ema ar Youdig, neketa ?

Visant : Ar Youdig ! Eun ano eo hag a ree d'on tud-koz skrija gand ar spont. N'eus ket bet atao eul lenn aze. Ar chaoser a zo bet greet goude ar brezel 14, du-hont, diouz kostez Brenniliz, eo a ra al lenn. Greet eo bet evid rei dour, da genta da uzin Sant-Herbot hag hirio d'an uzin atomik a zo bet savet e-kichenn.

Soazig : Ha perag e skrije kement on tadou-koz pa glevant ano euz ar Youdig ?

Visant : Ar Youdig a oa neuze eur mell toull lagenn, gand eur gohenenn ginvi. Lonka 'ree didruez an dremenerien dievez a valee warnañ. Abalamour da ze e-nevoe ar brud da veza genou an ivern. An Ankou a zigase eno, a-garradou, an eneo daonet, dindan furmou chas du, hag o stlepe e-kreiz al lehid a lonke anezo da viken.

Soazig : O ! a-walh ! sponta 'rit ahanon. Ma kendalhit, ne gouskin ket en noz a zeu.

Luhed ha Moged

Soazig : N'eus forz e pe du trei, ne weler diwar Menez-Mikêl, koulz lavared ti e-béd.

Visant : En tu kleiz d'ar Youdig pe d'al lenn, e welez koulskoude eun toulladig tiéz e-touez eur bodad glaster : bourh Boneur eo.

Soazig : Boneur ! Eur barrez o vervel. Eun iliz a zo. N'eus pardon e-béd mui. Pegaid e vo c'hoaz eun iliz eno ? Ema ar menez a-béz o tond da veza eur goueleh pe eun dezerz.

Visant : Boneur ! hent Tro Breiz, ar pelerinaj brudet, a dremene dre eno gwechall. El leh-se, emichañs, e kave ar belerined bod evid an noz : brasa bod ar menez, eur bod-meur pe eur bod- braz.

Soazig : Ha n'eo ket e Boneur eo bet ganet ar barz Fañch Abgrall, marvet ez-yaouank, lesanvet Alhweder Are ?

Visant : Eo ! anaoud a rez marteze e leor barzonegou "Luhed ha moged" ?

Soazig : Displega 'hellfen deoh zokén darn euz e varzonegou :

Pa zeu an avel da yudal
War lein ar meneziou
E komañs an traou da strakal
E goueleh ar yuniou.
Neuze 'klever o wigourad
Karrigell an Ankou.

Visant : Evel-henn e kan c'hoaz alhweder Are :

Me a zo savet mintin mad,
Pell euz ti va mamm ha va zad.
Digoret em-eus va diouaskell
Ha me 'nijo uhel-uhel,
Me 'zant va gwad o virvi,
Tiri, tirititi !

Soazig : D'e vuia-karet a-raog mervel d'e bloaz e kane ivez :

Bremaig 'soñjen war lein ar mene'
Ober evidoh gand brug ru'
Eur boked paket gand karante'
War-horre, dindan, a beb tu,
C'hwez vad an Are.

Ouz ar sklêr-loar

Soazig : Petra ho-peus c'hoaz da lavared din a-raog diskenn diwar Menez Sant-Mikêl ?

Visant : Meur a dra ! Ha bet out bet eur wech bennag war e gern e-kreiz an noz, ouz ar sklêr-loar ?

Soazig : N'on ket avad ! aon am-bije bet.

Visant : Ahanta ! me a zo bet, ha klevet ganin ahano daouzeg taol an hanternoz o seni en touriou tosta.

Soazig : Ha petra e-neus bet greet an dra-ze deoh ?

Visant : Diêz eo din lavared. Eun dra souezuz eo ar péz a dremen ennoh, neuze. Evel ma vjedad dibredet en eur béd all, spontet gand ar sioulder, paket e-kreiz ar sklêrijenn velen, dindan sellou al loar-gann o c'hoarzin goapauz.

Soazig : Ha petra 'lavar deoh al loar-ze ?

Visant : An êr he-deus da lavared : Deuit warnon da jom, hag e weloh eur béd all heñvel ouz an hini a welit en-dro deoh d'an eur-mañ.

Soazig : Kredi a-walh a rafen.

Visant : Hag al lenn 'ta ! skedi a ra neuze, morlivet evel eur melezour. Morlivet evel eur vered dislonket gand he horvou maro en o liñseriou gwenn.

Soazig : Sponta 'rit ahanon adarre ! ma vije gwir ?

Visant : Gwir eo, koulskoude. Klév petra 'skriv c'hoaz ar barz Alhweder Are :

E-barz ar poullou
'Touez ar brugou,
Ar re zaonet,
Eneou o termal,
Hetou o vervel,
An dristidigéz
A zeu gwall enkréz
E-kreiz ar Yun.
Morse levenéz,
Biken karantéz
E-kreiz ar yun

Soazig : Strobinella 'rit ahanon ! gwelloc'h paouez !

Visant : Strobinellet e vezer, e gwirionez, pa ziskenner diwar ar menez goude daouzeg taol an hanternoz. Ar menez n'eo mui eul leh gouez. Skeudou a welit dre-oll : skeudou du an torgennou, skeudou ar malkennou o pourmen en oabl steredennet. Skeudou du a-zehou, skeudou du a-gleiz, skeudou du dirazoh. Skeudou o tialana : an avel o c'hweza er brug hag el lann.

Bro ar billaouerien

Soazig : Emaom amañ e bro ar billaouerien, neketa ?

Visant : Ya. D'ar mare ma veze tennet mouded euz ar yeun, aze, e oa ivez kalz a billaouerien e bro ar menezioù.

Soazig : Mouded, pillou, gouzer ha mein glaz. Danvezioù dister d'ober fortun !

Visant : Me 'm-eus soñj mad euz an amzer ma veze du-mañ greet tan gand tammou mouded. Tan brao a reent. Gor a zalhent en ti e-pad nozvezioù hir ar goañv.

Soazig : Hag ar billaouerien, soñj ho-peus ivez anezo ?

Visant : Ya sur ! evidom eur pillauer a oa eur Herne. Ma ne vezit ket fur e vezoh roet d'ar Herne, a veze lavaret d'ar vugale a ree re o diaoul.

Soazig : Euz peleh e teue dreist-oll ar billaouerien-ze ?

Visant : Dond a reent euz Sant Riwal, Boneur, ar Fouillez, Brenniliz, Lokeored. Eur wall haloupadenn o-deveze da ober evid dond beteg aochou Bro-Leon.

Soazig : Ne veze ganto evel-just nemed kirri dre gezeg ?

Visant : Kirri skañv, sterniet outo kezeg bihan. Mond a reent a di da di da glask pillou a veze pouezet ganto ouz eur hrog-pouezer. Hag evito e roent bolennou, asiedou, plajou, skudilli, pe avalou. Ni, bugale, a zelle outo heb tostaad re. O brezoneg a gavem drol, ar péz a ree deom soñjal e teuent euz eur vro bell, eur vro estrañjour. Méd eur zon goz a zo diwar-benn ar billaouerien hag a veze kanet kalz e amzer va yaouankiz. Te 'oar honnez, sur. Kan anezi 'ta :

Soazig :

Marivonig a zo dimezet
Gand eur hoz tamm pillauer.
E Lokeored e oa ganet
E koumanant Toull-al-laer.
Foei, Foei, Foei, va zammig Aotrou,
Gand e stoub hag e billou !

Héd ar bloaz, kenkoulz lavared,
'Véz atao o redeg bro,
Hag e léz e wrég glaharet
Er gêr da skuilla daelou.

Pa deuiio lezenn ar vro-mañ
Da derri an eurejou,
Monig a yelo en eur gana
Pell diouz paotred ar pillou.

Park an Arvorig

Soazig : P'emaom er menez, komzom ivez euz Park an Arvorig. Eun dra nevez eo. Perag ar park-se ?

Visant : Savet eo bet gand ar zoñj da rei muioh a vuhez da vro ar meneziou, ha da vired ivez na vefe dismantret pe dizremmet gand modou nevez.

Soazig : Hag eo tizet ar pal-ze ?

Visant : Marteze, ya, e-neus Park an Arvorig degaset er vro eun tamm pinvidigez bennag, rag Pariz e-neus diyalhet eun tammig arhant evid-se. Milinou koz, tiéz koz o koueza en o foull a zo bet saveteet, eun nebeud micheriu a zo bet krouet evid an artizaned dreist-oll. Sacha tud a ra, touristed kemend all, a brén a beb seurt traou, a év chistr hag a zébr krapouez.

Soazig : Me 'gav eo eun dra vad an dra-ze : rei peadra d'an dud da helloud beva en o bro henidig.

Visant : Gwasa 'zo a-vad, an dud a ra ar micheriu nevez-se a zo aliez tud estren. Tud yaouank ar menez, ar re a vije bet en o horv giziou ar vro, a gendalh da vond kuit. Red e vije sikour, dreist peb tra, an nebeud a labourerien-douar a jom c'hoaz e bro ar meneziou, evid ma hello o bugale kendalh war o lerh, heb re a ziêzant.

Soazig : Kreizenn Park an Arvorig eo, a gredan, Menez-Meur ?

Visant : Ya, eun dra gaer a zo bet greet eno : eul leh dudiu da vond da bourmen. Bez' e vez kalzig tud, beb sadorn ha beb sul e-pad toud ar bloaz, méd dreist-oll e-pad an hañv. A-beb seurt loened gouez a heller gweled eno, klozet er parkeier braz, e-kreiz an natur : moh-gouez, kirvi, yourhed. Gweled a heller eun diskouezadeg kenteliuz kenañ. Gwerzet e vez krapouez, chistr, mél, hag a beb seurt traou all. Méd, bet out bet dija o weled Menez-Meur ?

Soazig : Ya, meur a wech on bet o tiskouez Menez-Meur da vignoned din e-doug an hañv. Bet on bet ivez e Sant Riwal o weled an ti-ferm a zo bet reñket e-giz gwechall gand e ostilliu koz a beb seurt hag o forn goz d'ober bara ar gêr.

Visant : Diouz bourk Sant Riwal, neketa, eo êz gweled ez eus deuet er vro eun tammig bihan muioh a binvidigez. Ha gwell a ze !

Roh-Trevezel

Soazig : Meneziou Are a vez greet anezo. Kein Breiz. Heñvel a-walh int e gwirionez, ouz eul livenn-gein gand o aridennou reier evel dent eun heskenn.

Visant : Menez Sant Mikêl eo ar penn kenta anezo. Savom bremañ war Roh-Trevezel. Amañ ema kribell ar menez : kerreg lemm, gourdrouzuz, spontuz !

Soazig : Spontuz, marteze, méd kaer ivez, gand o lanneier alaouret a ra dezo evel kurunennou aour pinvidig-mor. Ha war o diribinou, sell 'ta ouz ar brug ruz perlezennet a zo war-ziskenn beteg o zreid.

Visant : Plas a zo da azeza. Azezom 'ta war ar herreg plad mein-glaz, a ginnig deom o hadoriou. Azezom ha sellom en-dro deom !

Soazig : Dilavar e chomer dirag kemend-all a gaerder. Kaerroh c'hoaz eo an daolenn a weler ahalenn diwar Menez Sant-Mikêl.

Visant : Aze, sell ! dindan da fri, diouz kostez Leon, ar menez a ziskenn en eul lamm krenn beteg an hent-praz a zo en traoñ, hag a gas da Gommana pe da Blouneour.

Soazig : Ya, gweled mad a ran touriou Kommana ha Plouneour, pep hini war greiz eun dorgenn : daou dour heñvel a-walh an eil ouz egile evel diou vell garotezenn, o gwriziu ganto er vann !

Visant : En-dro da bep hini, eun neziad tiéz gwenn evel yér bihan en-dro d'eur yar goz. Roud meneh ar Releg, tostig da Blouneour, eo a weler war an touriou-ze moarvad.

Soazig : Dirazom eh en em léd beteg ar mor kompezenn Bro-Leon azaleg Brést tro beteg Montroulez.

Visant : Gweled a reer zokén mor Montroulez o lintra du-hont dindan an heol. Ha ma 'z eo lemm a-walh da zaoulagad e weli ivez tour Kreiskêr, uhella hini 'zo e Breiz, evel eun nadoz vraz o toulla an oabl glaz, evel ma vefe o klask gwriad ar houmoul.

Soazig : An heol o vond da guzad, en tu all da Zizun, a elum war blég-mor Brest, eun tan-gwall spontuz, leun a beb seurt liou.

QuickTime™ et un
décodeur sont
nécessaires pour visionner cette image.

Ar Vougeo, e Kommana

Diwar Roh-Trevezel

Soazig : Diwar Roh-Trevezel amañ, Kommana eo an tosta deom, pintet war bég eur vronn.

Visant : Aze, pell braz a zo, ez eus bet kavet eul laouer vein pe eur homm evel ma lavarer e Kerne. Enni e oa eur skeudenn goad da Zantez Anna, setu perag eo bet anvet al leh : Komm-Anna.

Soazig : Ha Santez Anna eo patronez ar barrez. Setu perag ivez ez eus eno, en enor d'ar zantez-se, kaerra aoter goad a hellfed da gaoud e Breiz.

Visant : Bet out, a welan, o selled outi ! Méd an iliz, hag a zo eun estlamm he gweled, he-deus c'hoaz eur patron all : Sant Derhen, unan euz or zent koz.

Soazig : Braz eo an iliz-se evel eun iliz-veur. Kalz re vraz evid ar barrezioniz a vez enni bremañ da zul. Kollet he-deus ar barrez ouspenn eun hanter euz he zud abaoe hanter-kant vloaz.

Visant : Paour eo bremañ Ha koulskoude evid beza bet savet eun iliz ken braz ha ken kaer all, eo bet pinvidig eur poent a zo bet. D'ar mare-ze, ar XVIved hag ar XVIIved kantved, e veze gounezet war he douar al lin hag ar hanab da ober lien kaer, hag a roe pinvidigez vraz d'ar vro.

Soazig : Daou galvar kran, e mein Kerzanton, a gaver c'hoaz dirag eur porched, euz ar re gaerra, heñvel ouz re Landerne ha Landivizio.

Visant : Etre ar bourk hag ar menez, e veze kavet gwechall eur japel da Zant Yann Vadezour, euz an XIIved kantved. Savet e oa bet, moarvad, gand ar veneh ruz, pe marheien an Templ, evid digemer pelerined Tro-Breiz, a dremene dre eno gwechall evid mond euz Kemper da Gastell-Paol.

Soazig : El leh m'edo ar japel-ze, neketa, e kaver hirio c'hoaz eur feunteun.

Visant : Evel-just. Eur japel a hell mond da netra, méd eur feunteun a jom atao. N'heller ket mired ouz he dour da redeg. Chom a ra c'hoaz eno ivez taoliou mein e-giz eur vali, anvet ar Vougod. N'eus ket kaeroh e Breiz-Izel a-béz.

Roh-Tredudon

Soazig : Hirio e vo ano ganeom euz Roh-Tredudon. Setu aze eul leh hag a zo bet ano anezañ er Frañs a-béz n'eus ket c'hoaz keid-se !

Visant : Ya, en abeg da beul braz an televizion. Ouspenn daou-hant metr uhelder e-noa da rastellad en oabl an imachou a weler war an tele e Breiz-Izel.

Soazig : Siwaz a-vad ! eun nozvez, ne oar dén gand piou, ar peul braz houarn a zo bet diskaret. Koueza a reas stog-a-gorv war al lanneg, en eur ober eun trouz ivern. A-drugarez Doue ne flatras dén e-béd. Eur burzud !

Visant : Piou a gavas kerse ? Feiz ! ar re a veze stag ganto o fri gwall aliez ouz an tele, ha n'hellent mui tremen hebtañ. Klemmou ha cholori a zavas, evel-just ! E-pad meur a viz ne oa mui netra da weled. Red e oe en em gontanti euz ar radio, ar péz ne oa ket euz goud an oll, te 'oar.

Soazig : Hirio e kaver eur peul all e Roh-Tredudon, méd n'eo ket ken teo na ken uhel.

Visant : Nann. Méd uhel a-walh eo evid dastum deom an imachou a glaskom gweled. Setu kontantet an dud adarre, ha peadra dezo da garga o beilladegou.

Soazig : An taol-lagad, ahann, war ar vro, a zo heñvel a-walh ouz ar péz a weler diwar Menez Sant Mikêl ha Roh-Trevezel. Da dosta deom aze ema Plouneour-Menez, neketa ?

Visant : Ya. Gouzoud a rez ez eus teir barrez e Breiz-Izel hag a zoug an ano a Blouneour : Plouneour-Menez, Plouneour-Trêz, Plouneour-Lanvern. Sant Eneour, evel-just eo patron ar parreziou-ze.

Soazig : An taol-lagad euz amañ, diouz kostez Kerne, a zo disheñvel braz diouz ar péz a weler pa zeller war-zu Leon.

Visant : Diouz kostez Kerne e weler ar vro a-béz beteg aridennad ar Meneziou-Du, leun a draoniennou hag a dorgennou ha koadeg ivez, daoust ma 'z eus bet dija diskaret kalz re a wéz.

Soazig : Dirag kement-se a gaerder e hellfed kana adarre :

O Breiz-Izel, O Breiz, O kaerra bro !
En da enor, me 'gano, lon leno-lon-le !

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

War hent an Uhelgoad

Soazig : Petra 'raim bremañ ? N'on-eus mui netra da weled er meneziou-mañ. Ha ma 'z afem d'an Uhel-Goad ?

Visant : Ma karez. Hag en eur vond di e welim war on hent ar Fouillez, Brenniliz, Lokeored ha Sant Herbot.

Soazig : Ar Fouillez, pebez ano drol! daoust ha n'eo ket abalamour ma teu eno ar vro en eun taol da veza glaz, eo e roer dezi an ano-ze ?

Visant : Marteze ! n'ouzon ket re ! Gwechall e veze kavet amañ kalz a billaouerien. Niver an dud a-vad, abaoe, a zo eet war ziskar, an douar a zo treud : douar menez. Sevel chatal a reont, an deñved ivez. Yaouankizou 'zo a blij dezo ober war-dro an deñved. Ha n'eo ket eun dra gaer beza mesaer pe vesaerez ?

Soazig : Gwelet em-eus eo Sant Vadezour patron ar barrez, hag ez oa brudet braz e bardon gwechall hag ez eo atao, ma ne fazian ket.

Visant : Devosion Sant Yann Vadezour a zo bet digaset amañ gand meneh Sant Yann Jeruzalem, anvet c'hoaz marhegeien Malt. Béz' o-doa amañ eur gouent, unan euz o re halloudusa, peogwir e oa houmañ ar penn euz an urz e Breiz. Ne jom mui anezi, siwaz ! nemed dismantrou. Gand ar gouent-se o vond da netra, nag a ziskar a zo deuet ivez er barrez !

Soazig : Pelloh ema Brenniliz. Mall am-eus da erruoud eno. Naon krampouez am-eus hag eno e ouzon e vez greet krampouez mad.

Visant : Brenniliz ! Kompren a rez an ano ? Bre-an-iliz, torgenn an iliz. An iliz a zo brao. Hag he gwerennou a-liou bravoh c'hoaz.

Soazig : Er barrez-mañ eo ema an uzin atomik. Ha ma rafem eur gwél dezi peogwir ema ken tost d'ar bourk ?

Visant : Méd gweled a rez ez eus difenn da vond e-barz. Skrivet eo a-zioh an nor, e galleg hag e brezoneg. Eur wech all bennag e tistroim hag e kemerim on amzer da weled petra eo.

Soazig : Bremañ, neuze, yao da Lokeored, ha goude da Zant Herbot, a-raog tizoud an Uhelgoad.

Visant : E Lokeored ez aim en iliz da weled skeudenn an Tad Eternel, kaerra hini a zo en eskopti a-dra-zur. Aoter ar Rozera, nevez kempennet gand an Arzou-kaer, a zo dispar ivez da weled.

Sant-Herbot

Soazig : Mantret e chomer o kavoud amañ, en eul leh ken digenvez, eun iliz ken souezuz ! Lavared a heller, e gwirionez, eo houmañ iliz-veur Menez-Are.

Visant : Ya. Estlammuz eo, neketa ? kavoud amañ eur seurt iliz ! Netra ne vank : na kalvar, na karnel, na porched, hag eun tour dispar daoust m'e-neus kollet e vég.

Soazig : Eur Zant braz, a-dra-zur, eo Sant Herbot, pa 'z eus bet savet dezañ eun ti ken kaer. Daoust hag anaoud a reer eun dra bennag euz e vuhez ?

Visant : Albert le Grand, en e "Vuhez ar Zent", a lavar eo bet ganet e Breiz-Veur. Dond a reas amañ da veva e-giz ermit, e-kreiz ar hoajou. Gounid a reas d'ar feiz kristen tud ar vro. Deski a reas dezo difraosta an douar ha sevel chatal-korn. Burzudou niveruz a reas ivez da heul e oberou mad. Loened gouez ar hoajou braz a zente outañ zokén evel loened doñv.

Soazig : Abalamour da ze e vez pedet gand ar re a zav loened, anevaled korn dreist-oll. Kinnig a reer dezañ atao lostou saout a vez lakeet war eun aoter vein, a weler c'hoaz en iliz, tostig d'e véz.

Visant : N'eus ket eur zant moarvad a vez pedet muioh e Breiz-Izel eged Sant Herbot. Kavet e vez e statu, e mein pe e koad, en eur hant iliz bennag euz eskopti Kemper ha Leon.

Soazig : Penaoz ez eus bet savet dezañ amañ eun iliz ken pinvidig ?

Visant : Da genta toud, e plas e ermitaj pe e beniti, ez eus bet savet eur prioldi hag a oa stag ouz manati an Tadou Karmez euz Roazon. An iliz a welom bremañ a zo euz ar hantvejou XV, XVI, ha XVII. Savet eo bet e plas eun iliz kosoh bet distrujet e-pad brezelioù Breiz. Eun toullad ardameziou livet war ar werenn vraz, a ziskouez o-deus oll Aotrouned vraz ar vro sikouret sevel anezi. Méd savet eo bet ivez gand profou ha labour tud ar vro, ar zaverien chatal-korn, da gredi eo.

Soazig : Diabarz an iliz a zo eur marz da weled ! Pilerou, gweregeier, aoteriou, delwennou, ha dreist peb tra, ar gwerennou e liou euz ar XVIved kantved.

Visant : Ar péz marzuz a-vad, sell ! eo ar chantele, warnañ eun niver souezuz a skeudennou, kizellet oll er hoad dero, diwar-benn an Testamant-koz hag an Testamant nevez : profeted, ebestel ha sibillezed zoken. Ar zant e-nevoa amañ eur relegouer arhant el leh m'edo e benn. Laeret eo bet gand ar Zaozon e-pad brezelioù Herez Breiz, a gasas anezañ ganto d'o bro, hag abaoe n'ouzon ket petra eo deuet da veza.

Kastell ar Ruskeg

Soazig : Dirag iliz Sant Herbot, ouz tor ar menez, ez eus eur hastell koz da weled.

Visant : Ya. Bet eo bet eur hastell kaer, méd hirio, ma n'ema ket c'hoaz en e boull, eo fall a-walh e stad. Euz ar XVIved kantved eo.

Soazig : Méd a-raog an amzer-ze e oa dija eur hastell eno ?

Visant : Eur gontadenn goz a lavar deom e oa eno o chom, d'ar mare ma save Sant Herbot e lochenn, eun Aotrou anvet Gevrel. Ken braz e oa hemañ ma veze ar gwéz en e gichenn evel ar raden en or heñver-ni.

Soazig : Eur ramz eo e oa neuze !

Visant : Ha n'edo ket e-unan. Daou vreur e-noa ken braz hag-eñ. Gevrel a zavas e gastell war Menez-Are hag e vreudeur war ar Menez-Du, diouz kostez Laz. Labourad a reent gand ar memez ostillou, hag e taolent anezo euz an eil d'egile dreist ar meneziou, ken kreñv e oant.

Soazig : Konta 'reer ivez, eh en em zerviche evid eva, rag sehedig braz e oa, euz ar mell laouer ront a zo e-kichenn ar hastell, evel ma vije bet eur werenn.

Visant : Ya, hag eo bet toullet ar mell laouer-ze gantañ. Eñ ivez eo a gizellas dezi he hosteziou ken brao. Dour ar Ster-Elez a ziskenn euz ar Youdig ne oa ket re evitañ ! Dond a reas da gaoud kasoni ouz Sant Herbot abalamour d'e brezegennou. Eun deiz, en eur glask e laza gand eun taol horz, e kouezas war bég an tour a dreuzas dezañ e beultrin. Ruill a reas d'an traoñ ha bég an tour d'e heul.

Soazig : Hag abaoe, moarvad, eo e-neus kollet an tour e vég ?

Visant : Ya. Ha Gevrel e vuhez. Leuskel a reas eur rohadenn spontuz a lakeas an douar da grenn. Tud ar vro a doullas neuze eur bég evitañ. Red e oe dezo a-vad e bleaga beteg seiz kwech evid e lakaad en toull. Eur bern reier a verk atao al leh m'eo bet beziet.

Soazig : Eun dra bennag souezuz a gonter ivez diwar-benn an daou ejenn e-noa roet da Zant Herbot evid e zikour d'ober e labouriou ponner

Visant : Pa varvas ar zant, an daou ejenn-ze a jome gourvezet dirag e véz Ne helled o lakaad da labourad nemed e-pad an noz. Eur wech a-vad, eur peizant o dalhas goude ar zao-heol. Diwar neuze, dén e-béd n'o gwelas mui.

Soazig : Eet e oant, marteze, da gavoud ar Zant d'ar baradoz ?

Visant : Kredi a-walh a rafen. Rag ken mignon e oa hemañ d'an anevaled, ma houlennas digand an Aotrou Doue beza roet dezo da batron. Ar péz a erruas kerkent. Setu perag eo hirio Sant Herbot patron ar zaout.

War hent an Uhelgoad

Soazig : Meur a dra a vefe c'hoaz da lavared diwar-benn Sant Herbot, méd tremen 'ra an amzer ha mall eo deom mond d'an Uhelgoad.

Visant : Yao, en hent neuze ! Sellom a-vad gand evez ouz ar vro en eur vond. Gwél, nag a goajou dre-oll ! war an tu dehou e welez lamm-dour ar Ster-Elez a ziskenn euz Lenn Vrenniliz.

Soazig : Méd n'eus mui a lamm-dour ! diskenn a ra bremañ ar ster dre ar horzennou braz-se a gas anezi war-eün d'an uzin elektrik.

Visant : Gwechall, O ! n'eus ket c'hoaz keit-se, nag e oa kaer gweled ar ster o lammad aze euz eur roh d'e-bén, eonennet oll. Kaer e veze dreist-oll, a lavar deom eur skrid koz, pa deuze an erh war ar menezioù rag d'ar mare-ze, e weled aliez er goañv an erh o holei an torgennou tro-war-dro, beteg daou-ugent devez diouz reñk.

Soazig : Hirio eo ral gweled an dra-ze. A-veh ma weler bremañ, eur wechig ar bloaz, liou an erh.

Visant : Ha gouzoud a rez emañ amañ ivez e bro an dañserien vad ! marteze abalamour m'eo houmañ bro ar hornandoned. Leoniz a lavarfe Paotred ar zabat.

Soazig : Ha paotred ar zabat eo o buhez o tañsal pe o koroll, kerkent ha ma kouez an noz. War ar menezioù n'eo ket plas a vank dezo da ebatal.

Visant : Hag ez eont da guzad pa zao an heol, e toullou ar reier, da hoari gand o zeñzorioù braz.

Soazig : Teñzorioù a zo dindan ar menez ?

Visant : Ya, hervez ma lavar eur gontadenn. Dindan Roh-Trevezel e vije eur guziadenn. Beb unneg kant vloaz, da daol an hanternoz, ar menez a zigor. Eur paotr, dezañ unneg vloaz, a hell mond e-barz. Ar péz a reas eur wech eur paotr euz an oad-se. Méd ne gavas nemed eun tamm koad hanter vreïn. Ar zantig koz e oa. Hag ar zantig-se a reas dezañ dond da veza pinvidig-mor.

Soazig : Hag e reas dezañ dimezi gand eur briñsez bennag evel-just !

Visant : Evel ma lavarez ! Ken pinvidig e oa ma teuas da veza karet gand merh roue Bro-Hall ha ma timezas ganti. An eured a oa kaer, hag ar friko da heul lipous-kenañ. Lenn kentoh roll ar roll-meuzioù :

Soazig :

Diskouarnioù kelien, treid siliou,
Lostou merien ha kig viou,
Yod da frita, da zifrita,
E klud ar yér o tistana.
Bara mouchenn a-reñkennajou,
Keid ahalenn da Zant-Kadou.

An Uhelgoad

Soazig : Ar gêrig-mañ a zoug mad he ano. Ne weler nemed koajou a beb tu. Hag ar hoajou-ze a zo e gwirionez war an uhel. “Koad-uhel” a vije lavaret bremañ kentoh eged “An uhel goad”.

Visant : Emaom amañ, ya, e bro ar hoajou, méd ivez e bro ar reier hag an dour. Eul lenn vraz a zo aze e-kichenn hag a lakee tro, gwechall, e rod eur vilin, a-raog mond da goll e-mesk berniou reier, eur zouez o gweled.

Soazig : Ya, souezuz eo ar reier-ze da weled. Melladou boullou mein int kentoh, evel ma vijent bet flouret e-pad milionou a vloaveziou gand eur mor bennag.

Visant : N’eo ket ar mor eo e-neus uzet anezo, méd an doureier o ruill diwar menezioù hag a oa uhel neuze. Trêz-douar a oa da genta en-dro d’ar reier-ze. Méd an trêz a zo eet gand an dour, hag ar reier a zo bet diruillet e goueled an draonienn, a-vil-vern, en eur lezel toullou dindanno.

Soazig : Hag unan euz an toullou-ze a zo anvet hirio “Toull an Diaoul”. Bet on bet diskennet ennañ meur a wech. En e ziabarz e verv dour ar stèr en eur ober eun trouz ivern.

Visant : War a gonter, an toull-ze n’eo nemed penn hent an ivern hag a zo penn-da-benn dezañ naonteg tavarn ha pevar-ugent. Enno e vez servijet gwin-ardant gand plahed yaouank koantoh-koanta dre ma tostaer ouz an ivern. An hini a hell paka an davarn ziweza, heb beza mezo, a hell distrei war e hiz. Méd ar re a vez mezo a vez sammet gand an diaoulou ha daonet da viken.

Soazig : Sell ‘ta ouz ar reier ! a-beb seurt furmou o-deus !

Visant : Ya. Lod a zo evel tiéz. Lod all evel kabellou-touseg pe listri-kegin anvet abalamour da-ze “Menaj ar Werhez”. Eur roh a zo heñvel ouz eur mell botez hag a vez greet anezi “Botez Gargantua”.

Soazig : Evidon-me a-vad, ar roh souezusa eo an hini a heller bralla en eur heurta warni. Abalamour da-ze e vez anvet ar “Roh a vrall”. Braz-spontuz eo koulskoude ! evel eun ti !

Visant : Pelloh, goude meur a lamm ha meur a ruill dre douez ar reier, ar stèr a gouez war he fenn en eur mell toull don, en eur yudal. Eno ema an izlonk el leh ma stlape Ahez he haredigou pa veze skuiz ganto.

Mein an Uhelgoad

Soazig : Pa gomzer euz an Uhelgoad, e soñjer atao er gwéz hag er vein : gwéz ha mein, setu petra eo an Uhelgoad, setu petra 'ra d'ar vro beza ken kaer, ken disheñvel diouz al lehiou all e Breiz.

Visant : Kaer ha pinvidig ivez. Euz ar hoad fao e veze tennet kalz a voteier koad gwechall, méd euz ar vein eo e tenne ar vro he brasa pinvidigez. Kalz pikerien vein a gaved eno en amzer-goz. Méd hirio e vez labouret ar vein gand ostillou modern. Heskennet e vez ar vein evel ma vez heskennet ar gwéz, buan ha diboan.

Soazig : Nag a béd iliz, nag a béd ti, nag a béd monumant a gaver e Breiz-Izel hag el lehiou all, savet gand mein an Uhelgoad !

Visant : Ar vein-ze, pe ar reier-ze o-deus ivez o istor, pe kentoh meur a istor.

Soazig : Kontit din 'ta an istoriou-ze.

Visant : An hini genta eo houmañ : Konta a reer penaoz Gargantua, ar Ramz keltieg, a oa bet degemeret fall-kenañ gand tud an Uhelgoad. Hemañ, droug braz ennañ, a dehas war-zu Leon. Hag en eur dehed e pake an oll reier a gave war e hent, hag o stlape war an Uhelgoad d'en em veñji. Setu perag, douar Leon, diveinet gantañ, a zo hirio pinvidig.

Soazig : Ha petra 'lavar an istor all ?

Visant : Mill-bell 'zo, pa ne oa an Uhelgoad nemed eun dreo etre parrezioù Berrien ha Plouye, e savas cheu etre an diou barrez, ar péz n'eo ket gwall vrag evid kristenien. Stlapa a reent melladou mein an eil parrez ouz e-bén. Méd taoliou pep hini a veze re verr, hag ar vein a stlapent a goueze etrezo o-diou, war an Uhelgoad. Tud Plouye a-vad a stlape larkoh o mein, ar péz a ra da barrez Berrien, hirio, kaoud muioh a reier eged Plouye.

Soazig : Evel-se, on tud koz, leun a ijin atao, a glaske eur rezon da beb tra. Ha diwar frouez puill o faltazi, o huñvreou, na péd ha péd koñchenn a zo bet diwanet, hag a zo deuet c'hoaz da vraoaad euz eur rumm tud d'egile dre ma tro an amzer.

Ar roue Arzur

Soazig : War a gonter c'hoaz, e vije bet kêriou braz, gwechall-goz, war Menez-Are !

Visant : Gwir eo ! e-kreiz Meneziou Are, e vije bet eur gêr vraz-kenañ, e-pad an amzeriou pella diouzom.

Soazig : Heñvel ouz Kêr-Iz neuze, bet lonket gand mor Douarnenez ?

Visant : Ya, méd kalz kosoh eged houmañ e-kreiz ar glaster hag ar meneziou uhel. Ma oa e-leiz a besketêrien e Kêr-Iz, e Kêr-Menez-Are ne oa nemed mengleuzierien ha pikerien vein da zevel tiéz ha manerious eus ar re gaerra.

Soazig : Ha ne jom mui roud e-béd euz ar gêr vraz-se ? Perag 'ta ?

Visant : Evel tud Kêr-Iz, e oant deuet da veza kristenien fall-kenañ. Da zeiz noz Nedeleg e kavjont gwelloc'h chom da ebatall ha da festa kentoc'h eged mond d'an overenn hanternoz. Neuze, ar menez a zigoras hag a lonkas ar gêr a-béz.

Soazig : Eul leh a zo en Uhelgoad hag a vez greet anezañ "Kamp ar Roue Arzur" pe "Keo Arzur". Petra 'zo dindan an ano-ze ?

Visant : An dra-ze, hervez an dud ouizieg, a vije ar péz a jom euz a zilerh eur gêr geltieg koz, kosoh c'hoaz eged ar Roue Arzur.

Soazig : Ar Roue Arzur ! hennez, mar deo gwir ar péz a gonter, a veve, neketa, war-dro ar c'hwehved kantved. Kestell kaer e-noa e Bro-Gembre hag e Breiz-Izel el leh m'ema bremañ Kerduel e Pleuveur-Bodou.

Visant : Hervez ma krede on tadou-koz, ar Roue Arzur n'eo ket maro. Kousket eo nemetken, en eul leh kuzet. Méd eun deiz e savo leun a vuhez hag a nerz hag e kerzo e penn e Vretoned hag o lakaio da veza treh war an oll enebourien. Klevet e vo neuze adarre e gan brezel war lein ar menez, an hini a gavom er Barzaz-Breiz.

Soazig :

Deom, deom, deom, deom, deom, deom d'ar gad,
Deom, kar, deom, breur, deom, mab, deom, tad,
Deom, deom, deom oll, deom 'ta tud vad
Er stourmad, treuzet, ma kouezom,
Gand or gwad en em vadezfom,
Ha kalon laouen e varvfom
Ma varvfom evel ma 'z eo dleet,
D'ar gristenien, d'ar Vretoned.
Morse ne varvim re a-bréd.

Ar Ster-Arhant

Soazig : Souezet e vezan atao pa demenan dre an Uhelgoad, o weled skrivet dirag eur ster "Rivière d'argent". Daoust hag ar gér "arhant" e-neus eun dra bennag da weled aze ?

Visant : Gouzoud a ran e vez kavet aliez a-walh ar gér-ze en anoiou-lehiou. Anaoud a ran eul leh anvet ha skrivet Pont-Arhant, ar péz n'eo mened Pont-ar-Han : pont ar waz. Méd en Uhelgoad, gouzoud a rez, koulz hag e Poullaouen, ez eus bet e-pad pell, azaleg ar XVved kantved, mengleuziou, el leh ma veze kavet mesk-ha-mesk plom hag arhant. An ano a lavarer a hellfe, marteze, dond ahano.

Soazig : N'on-eus lavaret gér e-béd nag euz an iliz parrez nag euz Intron-Varia-an-Neñvou.

Visant : Euz an iliz parrez, n'eus ket kalz a dra da lavared. Euz ar XVIved kantved eo al lodenn gosa anezi. Nevezet eo bet e fin ar hantved diweza. Sant Erwan eo ar patron anezi.

Soazig : Ha chapel an Intron Varia, petra 'ouzer diwarbenni ?

Visant : Kosoh eo : euz ar XVved kantved. He zourig koant a zo eur hantved yaouankoh. Tammou gwerennou koz a jom ivez war ar prenestou. Méd ar hizelladuriou war goad a gaver en-dro d'an aoter, a zo a dalvoudègèz braz. Bugaleaj Or Zalver a gaver warno.

Soazig : An Uhelgoad, dispar evel ma 'z eo, a zo eul leh darempredet-kenañ ?

Visant : E-kreiz ar vro n'eus leh e-béd hag a welfe kement a dud o paseal ha n'eo ket hebken en hañv da amzer an douristed. D'an nevez-amzer dreist-oll, eo eun dudi pourmen dre zindan ar gwéz en eur zelaou an dour o lammad dreist ar reier.

Soazig : Ya. Ha ribouliou kaer a zo da vond a-gleiz hag a-zehou, a bign hag a ziskenn tro-ha-tro en eur gammigellad. Evidon eo ken kaer all mond di da bourmen d'an diskar-amzer pa ne vez mui kemend a douristed dre ar vro.

Visant : Deom dre ar wenojenn-mañ, ma karez, a gaso ahanom beteg lochenn eur boutaouer koad.

Soazig : Just a-vad, felloud a ra din prena eur re evidon rag dond a ra ar hiz en-dro da wiska bouteier-koad.

Visant : N'eo ket eur hiz fall. On tud-koz a ouie er-vad n'eus netra gwelloh da zerhel tomm d'an treid. Evidon-me, e Kleder, e veze atao ganen eur re voutou-koad gand kolo fresk enno ha bourrou foenn.

Intron Varia Goatkeo

Soazig : Tostig d’an Uhelgoad ez eus eul leh hag a rankom da weled : Chapel Intron Varia Goatkeo.

Visant : Gwir eo. Evidon eo eul leh c’hwek-kenañ d’am halon. Nag a eñvoriou a zeu em spered pa glevan an ano-ze : Koatkeo ! Seni a ra evel eur hloh-galv. N’ema ket ouspenn diou leo a-hann. Deom di buan dre hent Bolazeg.

Soazig : Setu neuze, dirazom, ar japel a garit kement. Petra ‘zo skrivet en-dro d’an nor-dal ?

Visant : Êz eo lenn : - “Milved bloaz adsavidigez Breiz euz an Normanded“. Savet eo bet ar japel-gaer-mañ er bloaz 1937, gand an Aotrou Perrot, tad ar Bleun-Brug, pa oa person e Skrignag.

Soazig : Hag ar bloaz-mañ ez eus kant vloaz abaoe m’eo bet ganet an Aotrou Perrot, e Plouarzel, d’an 3 a viz Gwengolo.

Visant : Ya, hag abalamour da-ze ez eus bet eun overn-radio e Sant Noug da zeiz ar Pantekost hag eur gouél kaer e maner Keryann.

Soazig : Perag e Sant Noug hag e Keryann kentoh eged e Plouarzel ?

Visant : Sant Noug eo bet e blas kenta a gure hag eno e maner Keryann eo e-neus savet ar Bleun-Brug er bloaz 1905. Soñj ez-peus euz ar goueliou dispar a zo bet e Landivizio, e Sant Noug hag e Keryann evid lida eured-aour ar Bleun-Brug er bloaz 1965 ?

Soazig : Ya. Soñj mad am-eus ; ar goueliou-ze a jom garanet e memor ar re oll o-deus bet o gwelet.

Visant : Ar Bleun-Brug a zo eur gevidigez katolik ha breizad.

Soazig : Béz an Aotrou Perrot eo a zo aze dindan eur groaz keltieg. Petra ‘lenner warni ?

Visant : Hadet e-neus en daelou hag er gwad. Ya, eet eo beteg rei e wad evid Feiz ha Breiz evel an Aotrou Jegou, diweza person Koatkeo a zo e véz en tu all. Eur werz am-eus bet savet war maro tad ar bleun-Brug. Kan anezi ‘ta !

Soazig :

Aotrou Perrot karet, kouskit dineh e peoh,
E skeud ar japel-mañ, ken kaer savet ganeoh.
Breiziz, war ho roudou, a-vagad a gerzo,
Ho puhez, ho maro, bepred o hennerzo.
Kenavo, tad karet, n’ho kwelim mui er béd,
Digor frank ho kalon, ha dor ho ti bepréd,
Méd euz barr an Neñvou, c’hwi a reno bremañ
Ho tiskibien feal, war heñchou ar béd-mañ.

Ar Releg e Plouneour

Soazig : Petra a jom ganeom c'hoaz da weled a-raog echui ar bloavez-skol hag on troiadennou e Bro-Gerne ?

Visant : Felloud a ra din echui er Releg, e Parrez Plouneour-Menez.

Soazig : Daou leh a zo e Breiz-Izel hag a zoug an ano-ze : ar Releg-Kerhuon, hag ar Releg-Plouneour.

Visant : Ya. Méd ne gomzin hirio nemed euz ar Releg-Plouneour, anvet ivez Intron Varia ar Releg.

Soazig : Deom di neuze ha lavarit din, en eur vond, petra eo ar Releg ha perag an ano-ze.

Visant : Ar Releg pe ar Relegou eo “les reliques” e galleg. Setu-amañ petra 'hoarvezas eno war-dro ar bloaz 555.

Soazig : E amzeriou kenta Breiz-Vihan, pa zeuas on Tadou amañ da jom euz Breiz-Veur, e oa an dra-ze ?

Visant : Neuze, pe nebeud goude. Lavaret em-boa ano dit dija, p'edom e Karaez, euz ar Roue kriz Konomor.

Soazig : An hini a lazas Santez Trifina, e bried, hag a zibennas e vab Sant Tremeur.

Visant : Lazet e-nevoa ivez roue an Domnonea pe Bro Hanternoz Breiz, hag evid kaoud e blas e felle dezañ ivez laza e vab Judual pe Tudal. Méd hemañ, aliet gand Sant Samzon, eskob Dol, a zavas eun arme da stanka an hent ouz Konomor, roue ar Poher.

Soazig : Hag e teuas a-benn da drehi ar roue-fallagr-se ?

Visant : Amañ end-eün, el leh-mañ eo eh en em gavas an diou arme an eil dirag e-bén. Tri devez e padas an emgann. Konomor a oe pladet ouz torgenn. Koll a reas e vuhez koulz hag an darn-vuia euz e zoudarded, hag o horvou a jomas eno da zizehi dindan an heol bero.

Soazig : Ne zeuas den e-béd d'o zebelia en douar kristen ?

Visant : Eo. Pell goude, Sant Paol, kenta eskob Leon, a gasas e vikel-vraz Tangi da zevel eno eur manati. Kavoud a reas an draonienn leun a eskern dizehet. Ar veneh o dastumas hag o zebelias oll er memez béz, ha war ar béz-se e savjont eur japel d'ar Werhez.

Soazig : Bremañ e komprenan perag eo bet anvet al leh-mañ : Intron Varia ar Releg.

Visant : Ar veneh a roas d'o manati ar memez ano. Dond a reas da veza evel eur Baradoz e-kreiz eur goueleh gand douar-labouret brao en-dro dezañ. Evel-se e padas ar vuhez da vond ganto brao-kenañ en-dro beteg an deiz ma rankjont tehed da bell-vro pa zouaras an Normaned war zouar Breiz-Izel.

Ar Releg goude an Normaned

Soazig : An Normaned eta a zistrujas an abati-mañ war-dro an Xved kantved, evel ma tistrujont hini Landevenneg. Méd adsavet eo bet.

Visant : Ya. Gand meneh euz Urz Sant Bernez, er bloaz1132. Eur manati braz ha kaer eo bet hag a badas beteg ar Revolusion Vraz. Gwél pegen kaer iliz a jom c'hoaz euz ar manati-ze ! ne jom, siwaz ! nemeti en he sav. Euz ar rest a-veh ma chom eun dismantr bennag.

Soazig : Eun iliz-vraz roman eo e welan. Merk an XIIved kantved a zo war he mein. Braster an iliz a ziskouez mad pegen gallouduz eo bet an Abati.

Visant : Ya, gallouduz eo bet, ha gallouduz eo chomet keit ha ma veze anvet an tadou-Abad gand ar veneh. Roet e-neus bet zokén meur a eskob da Vreiz, da eskoptiou Kerne, Treger ha Leon.

Soazig : Evel-just, ar wasa en em gavas gand ar manati-ze evel gand ar re all eo kaoud en e benn tud ha ne vezent meneh atao, anvet “Abbés commanditaires”, dibabet gand Roue Bro-Hall.

Visant : Ar re-mañ ne oant darbaret nemed gand eun dra : pinvidigez an Abati, ha karga o godellou gand ar binvidigez-se, rag kalz anezo, pennou-braz euz Bro-Hall, ne vezent morse war-dro ar Releg, ha ne reent forz e-béd gand ar reparasionou da ober war ar gouent.

Soazig : Êz eo kompren neuze penaoz ez eas buan e stal da stalig hag e stalig da netra.

Visant : Da vare ar Revolusion Vraz, ne jome nemed pevar manah er Releg. Gwerzet e oe ar manati a-stok-varhad d'eur marhadour euz Montroulez, ha dismantret goude, nemed ar japel.

Soazig : Hirio eo houmañ reñket brao en-dro, hag asuret dezi he buhez evid eur pennad mad.

Visant : Hag an dra-ze, a-drugarez d'eun toullad mignoned brokuz. Eur gouél kaer-kenañ a vez er Releg bep ploaz (er bloaz-mañ d'ar pevare sul a viz Gouere), gand lazou-kana Bro-Leon, anvet “Festival de la musique bretonne”.

Soazig : Digasom ivez da zoñj e vez bep ploaz pardon braz er Releg d'ar 15 a viz Eost, evel e Intron Varia an Neñvou, en Uhelgoad hag e Koatkeo. Kristenien Menez-Are a jom ivez fidel da Intron Varia ar Releg.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Kastell-santel

Soazig : Kastell ! Bro va zadou, Kêr-benn Bro-Leon ! Tridal a ra va halon, rag amañ emañ er gêr, neketa !

Visant : Ya. Kastell-Paol a zo anavezet mad ganeom. Seni a ra an ano-ze em dioueskouarn, sklêr evel kleier an Iliz-Veur.

Soazig : An iliz-veur ! an dra-ze a laka lorh ennon pa zoñjan ez eus bet gwechall e Kastell eun eskob, eskob Bro-Leon. Setu perag e lavared moarvad : Kastell Santel.

Visant : N'eo ket e vefe Kastell, koulskoude, santelloh eged ar hêriou-all euz Bro-Leon pe Bro-Gerne. Méd, a-raog ar Revolution Vraz, pa oa amañ eun eskob, e oa enni ivez e-leiz a goueñchou. Er hantved diweza, n'eus bet parrez e-béd na tost, o rei kemend a veleien d'an Iliz. Ouspenn, pa zeller ouz kêr euz a-bell, e vezer skoet o weled, a-zioh kêr, kemend all a douriou o sevel war-zu an neñv. Anaoud a rez ar zon a ganem ken aliez gwechall pa vezem o tiwall ar zaout en or parkeier ?

Soazig : Hañ ya ! An tour dantelezet !

Visant : Just. Kan anezi deom evid digeri or pourmenadenn dre Vro-Leon. Evel-se or-bo eun diloh laouen.

Soazig :

E kastell Paol ez on-me ganet.
O kêr zantel a Vro-Leon,
O parrez va hendadou karet,
Te 'zo rouanez va halon.

Diskan
Nann n'ez eus ! nann n'ez eus ket
Eur barrez ken mad d'am halon er béd.
Me 'gar va hleuz alaouret
Va zour dantelezet.

Eur gouriz dour a zeu da walhi,
Ha da drempa an douarou
Pa vez ar gourlenn, pebez dudi !
Taoler eur zell war an aochou.

On touriou kaer ha dantelezet
A bar an deiz laouen dreizo.
On iliz vraz ken brao kizellet
'Zo gwir rouanez an oll vro.

Soazig : On oll zelaouerien ne ouzont ket marteze peseurt kêr eo Kastell-Paol. Gwall bell emañ an ano-ze diouz an ano galleg : "Saint Pol de Léon".

Visant : Amañ e vefe red ober eun tammig istor. Kastelliz o-unan, ne ouzont ket toud, marteze, a beleh e teu an ano-ze.

Soazig : Me va-unan n'on ket re zur. Ha mad e vefe deoh ober din ivez eun tammig kentel.

Visant : Da genta e rankin konta, evid ma vo sklêr va hentel, buhez ar zant e-neus diazezet ar gêr, ha roet e ano dezi : Paol.

Soazig : Gouzoud a ran mad piou eo Sant Paol. Du-mañ e veze lennet "Buhez ar Zent" goude koan. Ganet eo bet e Bro-Gembre, e Breiz-Veur, war-dro ar bloaz 480. E dad a oa a reñk uhel, hag a gasas anezañ da skol Sant Ildud, skol vraz ar Zent o-deus bet kristenet or bro : Divi, Samzon, Brieg, Magloar.

Visant : Paket gantañ e zeskadurez, eh en em dennas d'e hwezeg vloaz en eur hoad braz, evid ober pinijenn. D'e dregont vloaz e teuas da veza beleg, hag e savas eur manati, daouzeg beleg ennañ hag eñ en o fenn.

Soazig : Méd ne jomas ket eno gwall bell ?

Visant : Nann, pa glaskas ar roue Marh ober anezañ eun eskob, e tehas. Treuzi a reas ar mor gand daouzeg beleg atao, da zond da Vreiz-Vihan, el leh ma oa eet dija kalz a Vretoned eveltañ bet tehet dirag ar Zaozon.

Soazig : Ya, ha douara a rejont da genta en Enez-Eusa ha sevel eno ivez eur manati. Al leh a zoug atao an ano a Lambaol. Lezel a reas eno unan euz e veneh, hag en hent adarre, eün dirazo.

Visant : Petra 'reas en douar-braz el leh m'ema bremañ Lambaol-Witalmeze ? Mond a reas ahano dre Lambaol-Blouarzel ha Lambaol-Wimillo, beteg eur hastell koz chomet a-zilerh ar Romaned. Goullo e oa neuze. An tan a oa bet ennañ. Ne oa war e dro nemed eur wiz koz gand he zorad moh bihan, eun héd gwenan hag eur wezenn-dann. Eno eo e teuo da jom goude beza bet en Enez-Vaz, o weled Mestr ar Vro, ar priñs Wizur, keñderv dezañ. Diwar neuze, ar hastell koz-se a oa anvet : Kastell-Paol.

Soazig : Bremañ e komprenan mad. Hag en-dro dezañ, neuze eo bet savet ar gêr a anvont bremañ "Kastell-Paol" hag e galleg "Saint-Pol-de-Léon".

Kenta eskob Bro-Leon

Soazig : En dro ziweza ho-peus komzet euz ar Priñs Wizur Piou e oa ar Priñs-se ?

Visant : Wizur hag a oa kenderv da Zant Paol, a houarne ar vro en ano Judual, Roue an Domnenea, pe Hanternoz Breiz-Vihan. O chom edo en Enez-Vaz, el leh ma kavas Sant Pol anezañ.

Soazig : Laouen e oa bet, sur a-walh, o kavoud e penn ar vro unan euz e gerent !

Visant : Ya sur ! Ouspenn, Wizur, evel Sant Paol, a oa eun den santel-meurbéd. Tremen a ree e amzer er bedenn, er binijenn hag o trei e brezoneg ar Skritur-Zakr, evel ma vije bet eur manah. Chomet eo bet ar skrid-se pell a-walh e Kastell-Paol. Méd kollet eo bet siwaz !

Soazig : Pa gomzer euz Sant Paol en Enez-Vaz, n'heller ket en em vired da zoñjal en dragon pe an êrouant a veve neuze en enezenn hag a daole ar spont war ar vro.

Visant : Sant Paol, e gwirionez, eo a stlapas er mor al loen divalo-ze. Eur paotr yaouank euz Kleder, anvet Nuz, a yeas assemblez gantañ a-benn d'an dragon. Al leh m'eo bet taolet ganto er mor a zo anvet hirio c'hoaz "Toull ar Zarpant". Hag ar paotr yaouank-se a zo bet lesanvet goude "Gour-na-deh" hag e vaner, e Kleder, Kergournadeh, da lavared eo : Kêr an hini na deh ket. Evel-se eo anvet atao an dismantrou a jom anezañ.

Soazig : Tra souezuz, e buhez meur a zant breizad ha meur a zant all e vez ano aliez euz dragoned. Daoust hag ez eus bet dragoned evel-se, er vro, eur wech bennag ?

Visant : E hellfe beza bet. Méd kredi a heller, ivez, n'eo an dragoned-se nemed eur skeudenn euz ar baganiez pe an doueou faoz a rene neuze war ar vro.

Soazig : Goude eur seurt burzud, Sant Paol a dle beza bet gwelet mad gand e genvroiz ?

Visant : Ken mad ma soñjas Wizur e vije red ober anezañ eun eskob pa ne oa hini e-béd c'hoaz e Bro-Leon. Da genta e roas dezañ Enez-Vaz da zével enni eur manati evid ar veneh a oa deuet d'e heul euz Breiz-Veur. Goude e roas dezañ Kastell koz ar Romaned gand ar gêriadenn a oa stag outañ hag a oa bet kêr Ouelamor da amzer an Arvoriz.

Soazig : Hag e teuas da veza eskob ?

Visant : Goude beza bet kaset da léz ar Roue Childebert evid beza konsakret. Ha setu savet eskopti Leon gant Sant Paol en e benn.

An Hirglaz

Soazig : Eun dra all souezuz-kenañ a gavom c'hoaz e buhez Sant Paol : ar hloh e-neus lezet war e lerh, anvet "An Hirglaz" hag e-neus ar vertuz da barea diouz ar boan skouarn.

Visant : Souezuz eo ar hloh-mañ, e gwirionez ken koz all ha ma 'z eo ! Heñvel eo ouz kleier all miret e Bro-Iwerzon hag a zo euz ar memez amzer : hini Sant Patrig da skwér.

Soazig : Hag ar hloh-se a zo bet eet beteg ennañ dre vuzud, hervez "Buhez ar Zent" an Aotrou Perrot.

Visant : Dre henou eur pesk paket war an aot, en Enez-Vaz gand eur pesketour. Ar roue Marh e-noa seiz kloh en e balez. Paol, a-raog kuitaad e vro henidig, a houlennas unan anezo. Mark ne fellas ket dezañ, ha setu perag e teuas Doue war e zikour en eur gas dezañ unan euz ar seiz kloh-se dre vuzud.

Soazig : Sant Paol, a lavar deom "Buhez ar Zent", a oe laouen braz pa deuas ar pesketour da zegas dezañ ar hloh.

Visant : Ar hleier-ze a oa ar hiz anezo neuze. Sonet e vezent gand an dorn da hervel ar veneh d'an ofisou pe an dud d'an overenn.

Soazig : Bez' ez eus c'hoaz kleier koz all evel-se e Breiz-Izel ?

Visant : Pevar a zo anezo : tri en Eskopti Kemper ha Leon. Kloh Sant Goulhen, miret e Goulien, e Bro ar Hap ; hini Sant Ronan e Lokronan, ha kloh Sant Paol amañ anvet "An Hirglaz". Egile a zo e parrez Stivel e-kichenn Poñdi. Hemañ eo kloh Sant Meriadeg.

Soazig : Heñvel a-walh int o-fevar, a gredan. Hag o-fevar o-deus ar memez vertuziou. Gwelet em-eus bet aliez hini Sant Paol. Deiz ar pardon eo bet lakeet da zeni a-zioh va fenn ouz an daol zantel gand eur beleg. Perag e reer "an Hirglaz" anezañ ?

Visant : Abalamour d'e furm ha d'e liou. Hini Sant Ronan a zo kentoh eur follenn vetal pleget war gelh. Kloh Sant Goulhen, heñvel ouz hini Sant Paol, e-leh e zeni, a vez lakeet war ar penn evel eun tok.

Soazig : Lennet em-eus e oa Sant Gweltaz eur maout da farda kleier evel-se.

Visant : Ya, konta a reer eo bet eet beteg Rom da ginnig unan anezo d'an Tad Santel ar Pab.

QuickTime™ et un
décompresseur
sont requis pour visionner cette image.

Chapel Sant-Pèr, e Kastell-Paol

A-dreuz ar hantvejou

Soazig : Setu tost da 1.500 vloaz abaoe m'eo ganet Kastell-Paol. Nag a zarvoudou a dle beza bet c'hoarvezet amañ abaoe neuze !

Visant : Re hir e vefe a-dra-zur o displega oll. Bez' e hellom koulskoude menegi ar re vrasa anezo.

Soazig : Evel el lehiou all, an Normaned moarvad o-deus bet ivez klasket trabas ouz Kastelliz ?

Visant : N'eo ket trabas hepken eo o-deus klasket : distruja kêr ne lavaran ket. An iliz-veur genta bet savet war relegou Sant Paol a oe devet ha dismantret ganto.

Soazig : War relegou Sant Paol ? Me a zoñje din e oa marvet en Enez-Vaz, en e vanati el leh m'eh en em dennas a-raog fin e vuhez.

Visant : Evel-just, eno eo marvet. Méd beziet eo bet e manati Kastell-Paol war houlenn Kastelliz. Rag amañ ivez ez eus bet eur manati gand kalz a zouar stag outañ anvet Minihi Kastell-Paol hag a oa ennañ seiz parrez.

Soazig : Méd an Normaned a zo bet trehet. An iliz-veur hag an abati a zo bet savet en-dro.

Visant : Ha zokén kaerroh eged a-raog. Eur hastell-kreñv a zo bet savet ivez neuze. Méd er bloaz 1.170, ar Zaozon eo a lammas war ar gêr. Ne jome anezi euz o dilerh, nemed dismantrou. Kastell-kreñv hag all, peb tra a zo bet diskaret.

Soazig : Koulskoude e oa Aotrouien hallouduz o chom e Kastell-Paol d'ar mare-ze.

Visant : Beskonted Leon a veze greet anezo. Eun ti braz o-doa e Kastell, daoust ma vezent peurvuia o chom war ar mêz, e maner ar Penhoed. Pinvidig-mor e oant ha perhenn d'eur bern parreziou etre Kastell ha Brést. Méd Herve a Leon, ar pevare euz an ano, rivinet gand dispignou braz, a rankas lezel gand Yann ar Rouz, Duk Breiz, er bloaz 1.275, an darn-vuia euz e leveou.

Soazig : Famill ar Rohaned ivez a renas war Vro-Leon, e-pad pell amzer, neketa ?

Visant : Gwir eo Méd ar re-mañ hag a oa o chom e Landerne, n'o-doa netra da weled war Gastell-Paol. An eskob amañ a oa Kont ha perhenn da zouarou seiz parrez Minihi Leon.

Soazig : Lavarom c'hoaz evid echui, eo bet distrujet Kastell, evel meur a gêr all or-beus gwelet dija, gand ar forban Fontanella, re anavezet, siwaz ! dre e wall-daoliou, dre Vreiz-Izel a-béz.

Minihi Kastell-Paol

Soazig : En dro ziweza ez eus bet ano ganeom euz Minihi Kastell-Paol. Mad eo deoh lavared petra 'oa ar Minihi-ze.

Visant : Meur a vinihi a oa e Breiz. Hini Lokronan a oa an hini anavezeta anezo. Minihi-Leon 'oa ar vroad stag ouz manati Sant Paol. Bremañ e vije bet lavaret : Douarou ti ar veneh : meneh ti, deuet da veza menehi ha goude minihi. Eul leh santel e oa, "lieu d'asile" gand e zeiz parrez.

Soazig : Pere 'oa ar parreziou-ze ?

Visant : E kêr e oa teir : Krist-kêr, Sant Yann-Vadezour, hag Intron Varia Kahel. Ar peder all a oa war ar mêz : Sant Pèr, Krist ar Parkeier, Tregondern ha parrez an oll Zent.

Soazig : Ma komprenan mad, hirio, e-leh ar seiz parrez-se, on-eus, Kastell, Santeg ha Rosko.

Visant : Ya. Ha pep hini euz ar parreziou-ze he-doa he ferson hag he aoter en iliz-veur. Eno ivez e rankent mond d'an overenn beb sul ha d'ar goueliou-berz, 44 anezo.

Soazig : Ne veze ket, evelato lavaret seiz overenn en iliz-veur, er memez amzer ?

Visant : Nann. An oll a gleve ar memez overenn. Méd, pa veze echu, peb parrez en em vode dirag he aoter evid kleved ar pron.

Soazig : Ar Revolusion Vraz eo he-deus kaset ar giziou-ze d'an traoñ ?

Visant : A-raog dija e oa bet cheñchamant. Roskoiz a oa deuet a-benn da zavel o iliz, hag a oa deuet da veza eur barrez distag diouz Kastell-Paol. An dra-mañ 'vad 'zo eun istor all hag he hontin pa 'z aim da Rosko.

Soazig : Mespaul, va farrez din, stok ouz Kastell, hag he-deus Sant Paol en he ano, daoust ha n'edo ket ivez e Minihi Kastell ?

Visant : Nann. Mespaul a oa eun dreo euz parrez Plouvorn. Marteze 'vad, peogwir eo bet anvet Mêz-Paol eo abalamour ma plije da Zant Paol mond di war ar mêz, da aveli e benn. Méd kredi 'rafen kentoh eo bet anvet evel-se abalamour ma oa eno mêziou, da lavared eo, parkeier heb kleuz e-béd d'o dispartia.

Iliz-Veur Kastell-Paol

Soazig : Mad e vo deom, goude beza taolet eur zell war an amzer-dremenet, ober bremañ ivez eur zell war ar péz a gaerra a zo da weled e Kastell Paol.

Visant : Deom neuze da weled an Iliz-Veur. N'eus ket e Kastell kosoh monumant egeti.

Soazig : Skoet e vezan atao pa zellan ouz an ilizou-meur pa welan pegeid amzer a zo bet lakeet d'o zevel. On Tadou ne vezent ket preset.

Visant : Gwir eo. Hag amañ e Kastell koulz hag e Kemper e kavom war an iliz-veur roud ar hantvejou azaleg an XIIIved kantved betek ar XVIIved kantved ha lodennou all c'hoaz tostoh deom.

Soazig : Ar heur, a gav din, eo al lodenn gosa anezi ?

Visant : N'eo ket, méd ar horv braz, al lodenn dosta d'an daou dour. En neo dreuz a-vad, war an tu kleiz, e kaver c'hoaz eul lodenn roman, kosoh eta eged an XIIved kantved.

Soazig : Evid beza gellet sevel eun iliz-veur ken kaer, ar vro a dlee beza pinvidig ?

Visant : Ya. Dindan gouarnamant Yann ar Rouz, Duk Breiz, da amzer an eskob Derrien, Bro-Leon a oa pinvidig braz. Hemañ a gargas ti-savourien euz an Normandi da zevel dezañ e iliz-veur. Ar re-mañ a lakeas degas mein euz o bro dre vor hag a zavas, gand sikour mañsonerien ha kizillerien Bro-Gastell, korv braz an iliz-veur evel m'ema hirio. Savet eo bet, sur a-walh, war zismantrou eun iliz kosoh.

Soazig : Setu ar péz a weler da genta pa 'z eer en iliz-veur dre an nor-dal a zo dindan an daou dour.

Visant : Skoet e vezer neuze, neketa, gand kaerder an taol-lagad, dirag ar hizelladuriou skañv ha liou melen ar vein. An neo-groaz, hirroh eged ar horv-braz, a zo euz ar XVved hag ar XVIved.

Soazig : Plijoud a ra din ober an dro ha chom da zelled ouz e japeliou, e brenestou ha beziou eun toullad eskibien, unan anezo e marbr gwenn. Souezet e vezan atao, o kavoud eno ivez kasedou bihan koad, enno pennou maro.

Visant : Ar re-ze a zo bet tennet euz beziou a oa en iliz-veur. Bez' ez int pennou tud bet gallouduz en o amzer, evel ar Chaloni Barbier hag a zavas maner Keryann e parrez Sant Noug.

Soazig : En unan euz ar chapelioù, euz ar volz e weler eul livadenn zouezuz : eun dén tri benn dezañ gand ar homzou-mañ e brezoneg : "Ma Doue, Arabad". Skeudenn an Dreinded moarvad ?

Visant : Ya. Taolom eur zell ivez war ar werenn-rod, kaerra hini a zo e Breiz. En eur vond er-mêz, taolom eur zell all war al laouer vein koz-Noe, hag a zo bet eun arched, marteze hini Sant Paol pe Konan Meriadeg ?

Bro-Leon

Soazig : Kastell-Paol eo kêrbenn Bro-Leon. Perag eo bet houmañ anvet Leon ?

Visant : Dond a raje an ano-ze euz eur gér latin deuet da veza “Légion” e galleg ha “Leon” e brezoneg hag a zo bet roet ivez d’eur rann-vro euz ar Spagn.

Soazig : Evid ar péz a zell ouz an iliz, e oa renet Bro-Leon gand Eskob Kastell-Paol. Méd a-hend-all, daoust hag he-deus bet ivez eur Roue pe eun duk pe eur hont bennag en he fenn ?

Visant : Beteg an XIIIved kantved ez oa e Bro-Leon Konted hallouduz a gase en-dro he aferiou, hag a zo bet aliez e brezel ouz duk Breiz end-eün. E romantou ar Roue Arzur, euz ar Grenn-Amzer, e vez aliez ano anezo. Tristan, al Leonad, niz ar Roue Marh, a oa skwér an oll varhegeien.

Soazig : Brud-vad he-deus bet atao ar vro, neketa ?

Visant : Ya, daoust d’ar péz a zo bet skrivet a-wechou diwar-benn ar peñseou pe ar beñseourien. Setu amañ petra ‘skriv Brousmiche, eur Brestad, en eur skrid euz ar bloaz 1.830 diwar-benn Kastelliz.

Soazig : Ha petra ‘skrive ?

Visant : Skriva a ree : “Kastelliz a zo tud habask, hegarad hag a zegemer mad an diavêzidi. Dalhet o-deus d’o giziou mad. E nebleh ne gomzer gweloh ar brezoneg, e nebleh n’eo chomet ken beo, daoust m’o-deus ivez ar brud da gomz galleg euz ar henta”.

Soazig : Hag an dra-ze moarvad abalamour d’he skolach ?

Visant : Marteze, rag a-bréd kenta ez eus bet skoliou e Kastell-Paol da rei evid netra deskadurez d’ar re yaouank, koulz merhed ha paotred. Soñj nag a goueñchou a oa e kêr Gastell d’ar mare-ze ! Skol ar gurusted a zo chomet brudet. Anaoud a reer c’hoaz o zi koz tostig d’an iliz-veur, anvet ar “Psallette”. Ar skolach kenta e Prad-Kuig a oa dija anezañ er XVIved kantved. Hini an Ursulinezed, evid ar merhed, a zo euz ar bloaz 1.645.

Soazig : Ar skolach a gavom bremañ anvet “Ar Hreiz-KêrÂ, a zo euz ar bloaz 1.645.

Visant : Kloerdi Bro-Leon eo bet e-pad pell amzer hag e-neus kelennet eun toullad mad a veleien. E amzer an eskob de Rieux, er XVIIved kantved, e oa e-barz eskopti Leon 1.200 beleg evid eur 100 bennag a barreziou.

Soazig : An Aotrou de la Marche eo a zo bet diweza eskob Kastell-Paol hag ivez brasa madoberour ar skolach ?

Visant : Ya. Brokuz-kenañ e oa e-keñver an oll oberou mad. Dispignet e-neus bet euz e arhant e-unan, 500.000 lur arhant an amzer-ze, evid sevel skolach Bro-Leon, hag e oa, da vare ar Revolusion Vraz, unan euz ar haerra skolachou e Breiz a-béz.

